



HAL
open science

Strategiezh c'hounit ar produiñ laezh biologel ?

Jean Gouérec

► **To cite this version:**

| Jean Gouérec. Strategiezh c'hounit ar produiñ laezh biologel ?. Linguistics. 2022. dumas-04258029

HAL Id: dumas-04258029

<https://dumas.ccsd.cnrs.fr/dumas-04258029>

Submitted on 25 Oct 2023

HAL is a multi-disciplinary open access archive for the deposit and dissemination of scientific research documents, whether they are published or not. The documents may come from teaching and research institutions in France or abroad, or from public or private research centers.

L'archive ouverte pluridisciplinaire **HAL**, est destinée au dépôt et à la diffusion de documents scientifiques de niveau recherche, publiés ou non, émanant des établissements d'enseignement et de recherche français ou étrangers, des laboratoires publics ou privés.



Distributed under a Creative Commons Attribution - NonCommercial - NoDerivatives 4.0 International License

Skol-veur Roazhon 2

Master enklask Brezhoneg ha Keltiek



Jean GOUEREC

Dindan renerezh Stefan MOAL

2022



Skol-veur Roazhon 2

Master enklask Brezhoneg ha Keltiek

Strategiezh c'hounit ar produiñ laezh biologel ?

Jean GOUEREC

Dindan renerezh Stefan MOAL

2022

« *Neb a venn, hennezh a c'hall !*¹ »

¹ Jean-Marc Ayrault, Kentañ ministr, deuet da Roazhon d'an 13 a viz Kerzu 2013 evit sinañ an « Emglev evit dazont Breizh », meneget gant J.-B. de Montvalon, *Pacte pour la Bretagne : Ayrault souhaite un « approfondissement de la décentralisation »*, Le Monde, Publié le 13/12/2013. https://www.lemonde.fr/politique/article/2013/12/13/imposant-dispositif-de-securite-pour-la-visite-d-ayrault-en-bretagne_4334106_823448.html (Consulté le 12/02/2020).

*D'am zud-kozh ha d'am zud, peizanted e penn un nebeudig devezhioù-aret
ha produerien laezh a remziad da remziad, o deus treuzkaset din
hent ar vuhez, ar brezhoneg, karantez an dud hag an douar.*

Da viken emaint ennon.

D'am breur ha d'e familh aet pell diouzh ar vro e Mec'hiko

Alies e soñjan dezho.

D'am zud-kaer, tud degemerus ha kalonek Norzh-Bro-C'hall,

Soñj mat am eus anezho

*D'am gwreg, d'am bugale ha d'am bugale-vihan o deus kalonekaet ac'hanon da genderc'hel
ingal gant studioù ha da stummañ war ar brezhoneg kerkent e retred.*

Bepred int em c'halon.

Ar c'hounskrid-mañ a zo gouestlet dezho holl.

Trugarekaat a ran,

an holl re, niverus, o deus roet un tañva din eus al laezh hag ar brezhoneg, bodet an div zachenn en un egorenn voutin da-geñver ar memor-mañ,

ha, dreist-holl, ar re o deus sikouret ac’hanon da gas da benn al labour-mañ,

Isabelle Pailler, kuzulierez war ar laezh bio ha kustum e Kambr rannvroel labour-douar Breizh, he deus kinniget din ul lennadurezh dreist war al laezh bio, enni meur a desteni produerien, aliet-mat ac’hanon evit dibab un nebeud produerien laezh d’en em gavout ganto evit ur pennad-kaoz dre ur c’houlennoeg, ha gouestlet amzer evit kas he ampartiz din war tachennoù ar produiñ laezh bio. Trugarez dezhi ivez evit he aotre da eilañ skeudenn rakpajenn ar c’hounskrid-mañ.

Ar brouduerien laezh bio, o deus kemeret war o amzer ken prizius all evit degemer ac’hanon hag eskemm diwar bep tra eus o micher produer laezh bio oc’h emdreñ dizehan.

Stefan Moal, mestr-prezegenner e Skol-veur Roazhon 2, evit e skoazell hag e alioù prizius penn-da-benn d’ar memor-mañ evit resisaat ar sujed, frammañ, displegañ ha reizhañ anezhañ.

Roll ar berradurioù

% : dregantad

Bio : biologel

e : eur

€ : euro

g/l : gramm dre litrad

ha : hektar

hl : hektolitr

kg : kilogramm

l : litr

Laezh : a-hed ar memor-mañ e reer anv, bepred, eus laezh-buoc'h

m² : mètre carré

p. : pajenn

Pr : « Professeur »

Produioù laezh/boued-laezh : laezh hag ar produioù a vez graet gantañ : dienn, dienn laezh, yaourtoù, amann, fourmaj,...

s.o. : sellet ouzh

Taolenn

Digoradur.....	8
Lodenn gentañ	
Ur bed nevez o tiwanañ goude an « Tregont vloaz glorius ».....	10
Eil lodenn	
Ur patrom agroekologek o c’hounit war ar patrom askoridik.....	21
Trede lodenn	
Strategiezh uhelek ar produiñ laezh bio : produiñ gwelloc’h ha gounit muioc’h en ur labourat nebeutoc’h.....	30
Pevare lodenn	
Strategiezh c’hounit ar produiñ laezh bio ?.....	68
Pempvet lodenn	
Dazont filierenn broduiñ al laezh bio ?.....	80
Klozadur	103
Roll an teskanvioù.....	106
Lennadurezh.....	108
Taolenn ar pennadoù.....	116
Diverradennoù.....	118

Digoradur

Anat eo d'an holl ar pezh a zesk deomp ar furnezh poblec'h : anavezout gwelloc'h eus pelec'h e teuer evit gouzout gwelloc'h pelec'h e yeer ha kompren gwelloc'h an dazont evel-se.

An teulfilm « *Bretagne : une terre sacrifiée* » pellskignet war *France 5* d'ar seitek a viz Du 2020 a zo bet savet hervez an doare-ober-se -daoust ma n'eo ket bet diskouezet trawalc'h, war a seblant, an araokadennoù kaset war-raok er bloavezhioù tremenet- hag en deus lakaet war wel penaos e oa bet ret, goude an eil brezel-bed, lakaat da dalvezout e Breizh ul labour-douar askoridik evit magañ Bro-C'hall.

Breizh, lec'hiet e pell pennañ ar c'hornôg, paour e zouar, a zo deuet da vezañ, a-hed ar pezh a zo bet anvet an « Tregont vloaz gloriüs² », kentañ rannvro Frañs war tachenn al labour-douar, galloudus e industriezh agrobouedel ouzhpenn-se.

Diorren ekonomiezh al laezh en deus heuliet dre vras ar memes lañs abaoe an eil brezel-bed. Boued hollvedel ma ez eus unan, uhel e dalvoudegezh vezhurel, en un nebeud dekvloaziadoù eo deuet al laezh da vezañ eta ur produ bevezin a-vras, hag an industriourien o deus ranket merañ buan-tre « *un fleuve blanc en crue* » hervez termennoù ar sokiologour François Vatin^{3,4}.

Met, bet meulet ar patrom re bell sur a-walc'h, al labourerien-douar ne sellent ket a-dost kennebeut ouzh emdroadur ar bed o cheñch, deuet e oa an ekoreizhiad ha yec'hed an dud da vezañ sujedoù pouezusañ a-hed an amzer.

Bet emskiantek eus ar pezh a oa e dalc'h, pell-tre a-raok pep unan ac'hanomp lod o doa savet o mouez ha lakaet al labour-douar askoridik hag e wastoù en arvar. Ha tamm-ha-tamm eo deuet war wel ur bed nevez o tiwanañ goude an « Tregont vloaz gloriüs » (lodenn gentañ p. 10).

Meur a zae da dalañ outo evit imboudañ al labour-douar arnevez war al labour-douar henvoazel hag ar produin laezh bio war ar produin laezh boas, ar pezh a dalvez paseal tamm-ha-tamm eus ur patrom askoridik d'ur patrom agroekologek (eil lodenn p. 21).

² Fourastié, J. *Les Trente Glorieuses ou la révolution invisible de 1946 à 1975*, Fayard, coll. Pluriel, Paris, 2020.

³ Cité dans un article de Vieille Blanchard, E. *Lait et produits laitiers : une économie devenue folle ?* Publié le 30/05/2019, dans le cadre du dossier « Lait et produits laitiers, faut-il s'en passer ? », paru dans la revue *Virage*, n°1 - printemps 2019. <https://www.vegetarisme.fr/magazine/virage-01-printemps-2019> (Consulté le 29/11/2020).

⁴ Vatin, F. *L'industrie du lait, essai d'histoire économique*, Paris, L'Harmattan, 2020, Introduction p. 9.

Ur patrom nevez da sevel diazezet war ur meizad a ro tu da lakaat da glotañ an ekonomiezh hag an endro. Evit a sell ouzh ar produiñ laezh bio eo ret tizhout efedusted armerzhel ha doujañ an endro war un dro en ur aesaat buhez sokial ar broduerien laezh a zo hiziv, muioc'h eget biskoazh, e-kreiz an dalc'hoù kevredigezhel. Ur pal a c'hell bezañ tizhout nemet en ur zisheñvelaat un tamm mat pelloc'h en tu-hont da gaier kargoù al laezh bio ent strizh, da lâret eo en ur gas war-raok strategiezh uhelek ar produiñ laezh bio, ar pezh a dalvez produiñ gwelloc'h ha gounit muioc'h en ur labourat nebeutoc'h ouzhpenn-se (trede lodenn p. 30).

Dielfennet e vo elfennoù pennañ ar produiñ laezh bio a-vremañ diwar skouerioù embannadennoù micherel bet kinniget kaerik-tre gant Kambr rannvroel labour-douar Breizh. Ha kreñvaet eo bet an disoc'hoù lakaet war wel enno dre eskemmoù gant un nebeud produerien laezh bio gant ar pal gwiriañ, diwar disoc'hoù an holl titouroù bet dastumet ha dielfennet, ar vartezeadenn eo pe get strategiezh uhelek ar produiñ laezh bio ur strategiezh c'hounit evit ar broduerien ha, ledanoc'h, evit ar gevelerien ekonomikel en ardrañ hag ar gevredigezh dre vras (pevare lodenn p. 68).

Ouzhpenn an disoc'hoù tizhet, ar raktresoù hag an durc'hadurioù war ar stern war dachennoù zo, e vo digoret ar preder war un nebeud dalc'hoù pouezus. Peseurt dazont evit ar patrom nevez-se ? Chom a raio ul log marc'had ? Gellout a raio ar patrom bezañ hollekaet da galz a broduerien laezh boas all pe d'an holl ? Ha gant peseurt efedoù (bez' ez eus riskloù dreistproduiñ laezh bio ? bez' e vo ret azasaat ar c'hementadoù laezh evit mirout an talvoud ?). Kement-se a zisoc'ho war ur preder hollek diverret dre ar goulenn-mañ : peseurt dazont evit filierenn broduiñ al laezh bio ? (pempvet lodenn p. 80).

Da glozañ (p. 103) e vo astennet ar preder en tu all da bilañs ha diarselloù filierenn al laezh bio war arvarioù ar mare-hont (petra, penaos pelec'h ha da beseurt priz produiñ da skouer) kreñvaet gant pandemiezh ar c'hleñved koronavirus hag ar stad dic'hortoz nevez deuet war wel e 2021 gant dreistproduiñ al laezh bio (pe un digempouez kinnig ha goulenn da nebeutañ) ha digresk bevezerezh ar produioù laezh bio war un dro. Un hanter kantved war-lerc'h an « Tregont vloaz glorius », ur bed nevez da sevel adarre ? Ket, met patrom filierenn al laezh bio da adkempenn ha da wellekaat moarvat, graet e gammedoù kentañ gantañ ouzhpenn tregont vloaz 'zo.

Lodenn gentañ

Ur bed nevez o tiwanañ goude an « Tregont vloaz glorius »

Aet d'an anaon d'an daou a viz Kerzu 2020, prezidant kozh ar Republik, Valéry Giscard d'Estaing, Doue d'e bardono, Hennezh eo en deus bleinet Frañs etre 1974 ha 1981, an « Tregont vloaz glorius », ar c'helc'hiad kreskiñ bras goude an eil brezel-bed, o vont war an diskar pe oc'h echuiñ ha merket gant an stroñsoù tireoul hag an dilabour a-yoc'h.

Met petra a dalvez an « Tregont vloaz glorius » dre vras war tachenn al labour-douar hag ar produiñ laezh ? E vadoberoù hag e zrougerioù ? Ar goulennoù kentañ savet diwar-bouez patrom al labour-douar askorid ha produadurour ha deroù ur bed nevez o tiwanañ ?

1.1 Ur patrom labour-douar askoridik lakaet en arvar

Sklaer e oa pal al labour-douar betek ar bloavezhioù 1970 : magañ Bro-C'hall, da lavaret eo kreskiñ ar produioù labour-douar evit bastañ da ezhemmoù Frañs hag izelaat ar sujidigezh voued e-keñver an enporzhiadoù⁵.

Kresk hollek Frañs a zo bet 5,05 % etre 1950 ha 1973 (e-lec'h 1,15 % etre 1913 ha 1950 ha 2,10 % etre 1973 ha 2000)⁶, ar pezh a glot gant ur prantad dreistordinal peogwir n'eo ket bet tostaet morse nag a-raok na war-lerc'h eus ar feurioù kreskiñ enrollet e-pad an « Tregont vloaz glorius ». Ha se rak ne c'heller ket kemer e kont azlañs ekonomikel rakwelet e 2021 (6,3 %) peogwir e teu goude digresk trumm ar PDK⁷ e 2020 (- 8,3 % hervez an EBSSA⁸) a zo liammet gant enkadenn yec'hedel ar « C'hovid-19 ».

Evit a sell al labour-douar e Frañs e oa e 1946 7,5 milion labourer-douar ha 2 vilion e 1975⁹ hepken, ar pezh a glot gant ouzhpenn an drederenn eus ar boblañs oberiant e 1946 hag an dekvedenn e 1975.

⁵ Sebillotte, M. *Les Trente Glorieuses, Dans les mondes de l'agriculture (1996)*, pages 17 à 43. <https://www.cairn.info/les-mondes-de-l-agriculture--9782738006691-page-17.htm> (Consulté le 19/01/2021).

⁶ *Les Trente Glorieuses ou la révolution invisible de 1946 à 1975, op. cit.* Préface de Daniel Cohen p. II.

⁷ PDK : Produadur diabarzh kriz (PIB : Produit intérieur brut).

⁸ EBSSA : Ensavadur broadel ar stadegoù hag ar studioù armerzhel (INSEE : Institut national de la statistique et des études économiques).

⁹ *Les Trente Glorieuses ou la révolution invisible de 1946 à 1975, op. cit.* p. 41.

Met, bez' ez eus ur stadañ souezhusoc'h c'hoazh : e 1946 ul labourer-douar a vage (fall) etre 5 ha 6 den tra ma veze maget (mat-tre) 26 den e 1975¹⁰.

An emdroadurioù-se eus produusted al labour-douar a zo disoc'h meur a faktor : teknik agronomek, energiezh mekanikel, mekanikoù galloudus, ludu ha dibab mat plant ha hadoù¹¹. Met kement a gresk ne c'helle ket padout didermen (s.o. kreskiñ ar prantad 1973-2000 meneget a-uc'h) hep sevel bec'hioù nevez evit perc'hennañ danvezioù rouez, ekologel ar blanedenn¹².

Ouzhpenn-se, Jean Fourastié¹³ a sach evezh an dud war lodenn greñv kig boued poblañs Frañs. Rak evit produiñ 1 000 kalorienn e stumm kig eo ret kaout div pe deier gwech muioc'h gorread labour-douar eget evit produiñ anezho e stumm edaj. Kement a zaeoù a zo deuet da vezañ pouezusoc'h-pouezusañ a-hed an amzer hag a zo ur sujed meur eus an amzer-vremañ.

Taolet ur sellad berr war ar patrom labour-douar askoridik, e vo lakaet war wel ivez arouezennoù ur patrom produiñ laezh uhel e gresk en ur c'hroashent.

1.2 Ur patrom produiñ laezh uhel e gresk en ur c'hroashent

En ur mod, ez eus bet ivez « Tregont vloaz glorius » al laezh (1955-1984)¹⁴, merket gant kresk spontus ar « stêr-veur wenn » ha war o lerc'h un nebeud enkadennoù don en doare ma eo bet -hag eo hiziv an deiz c'hoazh- start buhez ar broduerien laezh.

1.2.1 Broudet ar produiñ laezh a-vilvern

Al laezh, produadur al labour-douar, hag ekonomiezh al laezh o deus heuliet an hevelep tuadur hag ar patrom labour-douar dre vras, bet o c'hresk dreistkont ha buan. Pedet eo bet ar saverien saout-laezh, goude an eil brezel bed, da ziorren ur striv produiñ evel biskoazh evit lakaat termen da euzh ar verrentez boued¹⁵. Koulskoude, e oa lec'hiet produiñ laezh Frañs, 150 milion hektolitrad e 1949¹⁶, un tamm e pep lec'h, ha rannet etre 1,5 milion a gêr¹⁷. Da c'houde, fin ar bloavezhioù 1950/deroù ar bloavezhioù 1960 e oa bet kalz uheloc'h kresk ar produiñ laezh¹⁸.

¹⁰ *Les Trente Glorieuses ou la révolution invisible de 1946 à 1975*, op. cit. p. 42.

¹¹ *Les Trente Glorieuses ou la révolution invisible de 1946 à 1975*, op. cit. p. 18.

¹² *Les Trente Glorieuses ou la révolution invisible de 1946 à 1975*, op. cit. Préface de Daniel Cohen p. III.

¹³ *Les Trente Glorieuses ou la révolution invisible de 1946 à 1975*, op. cit. p. 54.

¹⁴ Calvez, E. *La planète laitière : quelques aspects de la production dans le monde*, Bulletin de l'Association de Géographes Français, Année 2007. https://www.persee.fr/doc/bagf_0004-5322_2007_num_84_1_2542 (Consulté le 06/12/2020).

¹⁵ Calvez, E. *La planète laitière : quelques aspects de la production dans le monde*, op. cit..

¹⁶ Hervez Casalis, J. *L'évolution de la production laitière en France*, Le Paysan, 1957, N° 470 : 132,5 million hl e 1949 ha 150 million hl e 1950 (160, 150, 170, 180, 178 million hl e 1951, 1952, 1953, 1954 ha 1955).

¹⁷ Calvez, E. *La planète laitière : quelques aspects de la production dans le monde*, op. cit.

¹⁸ Ret eo lavarout ez eus un diforc'h bihan a-walc'h etre al laezh produet hag al laezh dastumet. Evel-se, e oa bet produet, e 2011, 243,4 million hl laezh pa oa bet dastumet 239,1 million hl, Données CNIEL (Centre National Interprofessionnel de l'Economie Laitière), 2011, citées par Ricard, D. *Les mutations des systèmes productifs en France : le cas des filières laitières bovines*, Revue Géographique de l'Est, vol. 54 / 1-2 / 2014. <https://journals.openedition.org/rge/5180> (Consulté le 22/01/2021).

Evel-se, e oa istimet da 268 milion hl evit ar bloavezh 1965¹⁹, goude bezañ bet feur kreskiñ bloaziek war-dro 5 % en dek vloaz a-raok. Hervez ar memes levr-dave e oa istimet ur produiñ laezh eus 68 milion hl e 1882, 150 milion hl e 1935 ; produiñ bet priziet uhel-tre, re uhel d'ar mare-se.

Diwezhatoc'h, etre 1970 ha 1983 e kresk an dastum laezh e Frañs tost da 40 % tra ma oa digresket ar broduerien eus an hanter²⁰. Ar sifroù-se a glot gant re un embannadenn all²¹ a ziskouez eo 2,5 % feur kreskiñ bloaziek an dastum laezh abaoe 1970. Hag e 1982, bet dastumet 248 milion hl eo kresk an dastum 38 % uheloc'h eget e 1970. Dont a ra ar c'hresk-se eus feur kreskiñ bloaziek ar produiñ eus 3,1 % ha digresk bloaziek ar chaptal saout eus 0,6 %.

Barr an dastum laezh saout a zo bet tizhet er bloavezhioù 1983 ha 1984 (tro-dro 253 milion hl) a-raok izelaat tamm-ha-tamm etre 1985 ha 1997 (224 milion hl), lakaet da dalvezout ar c'hotaioù laezh abaoe ar 1añ a viz Ebrel 1984 (adlammoù bet arsellet e 1986, 1990, 1994 ha 1995). Stabil a-walc'h eo chomet an dastum laezh etre 1997 ha 2010 (tro-dro 220 milion hl)²² a-raok kreskiñ ur wec'h adarre, izel e lañs, etre 2009 ha 2013 (222, 227, 239, 238 ha 233 milion hl e 2009, 2010, 2011, 2012 ha 2013), uheloc'h e 2014 ha 2015 (224,6 milion hl bep bloaz), hag izeloc'h ha stabil a-hed ar bloavezhioù 2016, 2017, 2018, 2019 ha 2020 (237, 239, 238, 238 ha 239 milion hl)²³.

Ret eo lavarout ez eus kalz broioù er c'hornaoueg o deus c'hoariet ur roll bras evit kreskiñ ar produiñ laezh. E 1950, e talvez produiñ an teier Rannvro, Normandi-Izel, Breizh ha Broioù-al-Liger, nebeutoc'h eget 25 % eus produiñ Frañs. E 1983, e talvezont evit 47,7 % eus an dastum broadel²⁴. E 2018 e sav dastum an teir Rannvro (en ur zerc'hel kont eus Normandi-Uhel ivez²⁵) da 54,6 %²⁶. Ouzhpenn e kaver ar muiañ eus ar produiñ laezh e kornaoueg Frañs, o deus ar brodurienn en em lakaat da wellaat askoradoù o chatal saout laezh dreist-holl. Tamm-ha-tamm e vo erlec'hiet ar gouennoù lec'hel (nemet e Normandi) gant ar vuoc'h « izelvroek », anavezet gwelloc'h evel « holsteinenn »²⁷, cheñchet e anv e 1990 ha deuet da vezañ « Prim Holstein », ar c'hentañ gouenn saout-laezh arbennik war ar bed²⁸.

¹⁹ Eck, A. *Le lait et l'industrie laitière*, PUF, coll. « Que sais-je ? », Paris, 1967, p. 94.

²⁰ Pflimlin, A. Faverdin, P. Béranger, C. *Un demi-siècle d'évolution de l'élevage bovin. Bilan et perspectives*, Fourrages (2009) 200, 429-464.

²¹ Delage J. (Pr), Directeur de l'Institut National Agronomique Paris-Grignon, *Aperçu de l'évolution de la production bovine laitière en France et dans la C.E.E.*, Bull. Acad. Vét. De France, 1984, 57, 262.

²² Ricard, D. *Les mutations des systèmes productifs en France : le cas des filières laitières bovines*, op. cit.

²³ CNIEL (Centre National Interprofessionnel de l'Economie Laitière), *L'économie laitière en chiffres*, Edition 2021, 26 mars 2021, p. 46.

²⁴ Calvez, E. *La planète laitière : quelques aspects de la production dans le monde*, op. cit.

²⁵ Bet kendeuzet Normandi-Uhel gant Normandi-Izel d'ar 1añ a viz Genver 2016 da-geñver an adreizh tiriadel.

²⁶ Données CNIEL 2021, op. cit. p. 43.

²⁷ Calvez, E. *La planète laitière : quelques aspects de la production dans le monde*, op. cit.

²⁸ UFR Génétique, élevage et reproduction (AgroParisTech) - France UPRA Sélection 1996-2007, *race bovine Prim Holstein*. <http://www2.agroparistech.fr/svs/genere/especes/bovins/primhols.htm> (Consulté le 23/01/2021).

Deuet eo a-benn ar broduerien da zigreskiñ o c'houstoù produiñ en ur heuliañ en un doare reizh roadennoù nevez diuzouennañ ha magañ ar saout. Hag an tu a oa da wellaat askoradoù ar saout. Ne vo adlavaret trawalc'h morse e koust kalz nebutoc'h da vogañ ur vuoc'h a brodu 5 000 litrad laezh dre laezherezh eget div vuoc'h 2 500 litrad laezh gant pep hini²⁹. Lodek eo ivez Pr Jacques Delage³⁰ en ar gredenn-se en deus disklêriet : « *Il est banal mais pas inutile de rappeler que le coût de production du litre de lait est plus élevé avec 50 vaches produisant 4 000 kg de lait qu'avec 30 vaches en fournissant 6 600 kg, et il est important de souligner que la marge de progrès des productions individuelles reste dans la pratique considérable* ».

Bet heuliet ar redioù evit tennañ splot eus ur vuoc'h uhel e broduusted gant ar broduerien, lod anezho o deus en em c'houlennet betek pelec'h mont. Istimet e vez ne c'heller ket produiñ muioc'h eget 25 litrad laezh bemdez gant ur magadur diazezet war ar geot³¹. Dre ma produ kalz a saout muioc'h eget 30 litrad laezh bemdez, 50 litrad evit ar re wellañ, ret eo ouzhpennañ ur magadur arbennik d'ar bouedoù-chatal boas (foenn, geot, beterabez, maiz), da lâret eo bouedoù diwar gozhadur graet gant protein azotek. Met evit produerien zo eo diroll priz an advezhurioù-se : « *Ar pezh peus ouzhpenn 25 litrad emañ o prenañ*³² ».

Aze emañ an dalc'h ! N'eus liamm ebet etre efedusted ar saout kousto pe gousto ha korvoder ar saver saout. Ar broduerien n'int ket bet gwall blijet degemer ur seurt kemennadenn : « *Je me souviens de réunions en 1990 où on entendait les mouches voler quand on disait qu'il n'y avait pas de lien entre la performance par vache et le revenu de l'éleveur*³³ ». Ha koulskoude e vever ganedigezh ur bennaenn nevez : produiñ dre goustoù izelañ, pe heñchañ ar broduerien war-zu pleustroù gwellekaet.

Ouzhpenn dalc'hoù ar produiñ laezh-mañ o deus bet ar broduerien da dalañ ivez ouzh meur a enkadenn al laezh a-hed an amzer.

1.2.2 Merket ar c'hinnig laezh gant enkadennoù mareadek

Bebet o deus produerien ar « stêr-veur wenn », evel e vez anvet ar produiñ laezh, meur a enkadenn a-hed an amzer ha bevañ a reont c'hoazh : enkadenn ar saout foll, enkadennoù al laezh e 2009, 2015 ha hiziv an deiz zoken ma ra ar gouarnamant e seizh posupl evit gwarantiñ d'ar broduerien ur c'horvoder dereat. Produerien zo, sur a-walc'h, o deus dalc'het kont eus an diaesterioù ekonomikel-se evit mont war-zu ar produiñ laezh bio, ar pezh a vo gwelet pelloc'h.

²⁹ Casalis, J. *L'évolution de la production laitière en France, op.cit.*

³⁰ Delage J. (Pr), *Aperçu de l'évolution de la production bovine laitière en France et dans la C.E.E., op.cit.*

³¹ Mellouët, P. *La vache et le paysan*, Guissény, Roudoù, 2007 p. 108.

³² Mellouët, P. *La vache et le paysan, op. cit.* p. 108

³³ Mellouët, P. *La vache et le paysan, op. cit.* p. 56.

Enkadenn ar saout foll, « ur c’hren-douar evit ar sevel saout en Europa³⁴ », a zo kroget en Europa e penn kentañ ar bloavezhioù 1990. Magañ ar saout geotdebrer (tennet e vo splet eus ar perzh-se evit ar saver saout laezh bio e-giz e vo gwelet pelloc’h) gant bleudoù diwar loened a zo kaoz eus ar c’hleñved-se. Ur gwallreuz eo bet ar c’hleñved-se evit ar saverien saout peogwir e veze boset an holl dropell pa veze klañv ul loen hepken. Miret groñs eo implij ar bleudoù-se evit al loened hollzebrer, evned-porz h pe voc’h da skouer. A-benn ar fin eo bet difennet o implij evit holl an desaverezh loened e miz Du 2000.

Un nebeud bloavezhioù war-lerc’h eo savet enkadenn al laezh 2009 en Europa e miz Mae 2009. War un dro eo un enkadenn rannvloaziat (marc’hamatoc’h eo priz al laezh en nevezamzer atav, pa vez produet ar muiañ laezh gant ar saout) hag un enkadenn don. Prenet eo bet al laezh d’ar broduerien 30 % nebeutoc’h eget ar bloavezh kent. Diskar grevus ar prizioù a zo kaoz eus digresk korvoder ar gêrioù laezh etre 40 % ha 60 %. E-touez an abegoù o deus degaset an enkadenn-se ez eus liveoù uhel-spontus eus ar produiñ laezh bedel bet tizhet en Aostralia hag e Zeland-Nevez. Ret eo menegiñ eo bet skañvoc’h pe skañvoc’h-tre an enkadenn evit an AOG³⁵ hag ar produioù bio chomet stabil a-awalc’h o frizioù. Ar memes tra eo bet evit ar reizhiadoù geotegek graet ganto espern kargoù a-bouez³⁶.

An enkadenn all savet e 2015 a glot gant ur mare digresk bras prizioù al laezh en UE³⁷ goude fin ar c’hotaioù laezh. Rakwelet e oa abaoe 2003 evit miz Ebrel 2015 fin ar c’hotaioù laezh evit frankizekaat ar gennad ha lakaat harz da goustoù UE evit merañ ar c’hotaioù³⁸. Kement-se zo kaoz eo aet war kreskiñ uhel ar produiñ laezh europat hag an enkadenn dreistproduiñ eta. Ha digresket eo prizioù al laezh ouzhpenn 10 % gant ar c’hinnig-se daoust d’an diarbennoù kemeret gant ar gouarnamantoù hag UE (skoazelloù evit lakaat harz d’ar produiñ) e-pad an enkadenn.

Padout a ra dreistproduiñ en Europa (en Iwerzhon dreist-holl, met e Frañs hag en Alamagn ivez). Se zo kaoz eo bet savet ha dalc’het e Frañs Breujoù ar magadurezh³⁹ e-pad an eil c’hwec’h miziad 2017. Lakaat ar prizioù hervez ar c’houstoù produiñ eo bet disoc’h an emglev skoulmet, met n’eo ket gwall aes da lakaat an diarbenn da dalvezout.

Setu perak eo bet votet un tamm diwezhatoc’h al lezenn *EGalim*⁴⁰ tri fal pennañ dezhi :

³⁴ Mellouët, P. *La vache et le paysan*, op. cit. p. 116.

³⁵ AOG : Anvadurioù orin gwarezet (AOP : appellation d’origine protégée).

³⁶ Carpon, A. *Crise et grève du lait de 2009*, Web-agri, 05/09/2019. <https://www.web-agri.fr/prix-du-lait/article/151621/dix-ans-apres-entre-regrets-et-avancees> (Consulté le 14/01/2021).

³⁷ UE : Unaniezh Europa (UE : Union européenne).

³⁸ Hénin, F. *Conjoncture laitière*, Web-agri, 24/07/2015. <https://www.web-agri.fr/prix-en-elevage/article/111545/300-1-000-l-avec-une-pac-sans-outil-de-regulation-la-crise-etait-inevitable> (Consulté le 14/01/2021).

³⁹ EGalim : États généraux de l’alimentation.

⁴⁰ Loi n° 2018-938 du 30 octobre 2018 pour l’équilibre des relations commerciales dans le secteur agricole et alimentaire et une alimentation saine, durable et accessible à tous (loi issue des États généraux de l’alimentation – EGalim).

- paeañ ar priz reizh d'ar broduerien evit reiñ tu dezho da vevañ en un doare din eus o labour ;
- kreñvaat kalite yec'hedel, endroel ha mezhurel ar produioù ;
- harpañ ur boued yac'h, sur ha padus evit an holl.

Gwellaet eo bet korvoder ar broduerien laezh gant al lezenn-se ? Kenderc'hel a reont da gavout diaesterioù war o hent kentoc'h. Priz al laezh a zo troet war an digresk rak ar prizioù war ar marc'hadoù etrebroadel a zo izeloc'h eget ar prizioù koust hervez ar pezh en deus disklêriet Serge Papin, Prezidant kozh « Système U »⁴¹, roet dezhañ ur gefridi hanterouriezh e miz Du 2020 gant ministr al labour-douar evit heuliañ kevraouerezh kenwerzhel etre an dasparzherezh bras hag ar filierennoù labour-douar. Hervezañ, n'eo ket lakaet al lezenn da dalvezout diwar-benn sevel ar prizioù diwar prizioù koust an danvez diaoz, ha ret eo kaout ur benveg evit degas treuzwelusted. Fellout a ra dezhañ staliañ ur stignad-arnod evit ar filierenn laezh a-raok fin ar c'hevraouerezh kenwerzhel, d'ar 1añ a viz Meurzh 2021. Moarvat n'he deus ket graet berzh a-walc'h ar gefridi peogwir eo bet lakaet al lezenn « *EGalim II* » war ar stern.

Bet lakaet war wel dalc'hoù zo eus filierenn al laezh e vo ledanaet an dachenn evit dizoleiñ ar re a zo bet emouez ouzh gwastoù ar patromoù produadurour hag o deus embannet emañ ar bed en arvar en ur zerc'hel d'al lusk diroll a-vremañ.

1.3 Gwastoù patromoù produadurour dinac'het

Niverus eo bet ar re o deus savet o mouezh evit disklêriañ drougimplijoù ur seurt patrom, lod abred-tre, lod all diwezhatoc'h, met an holl gant ar pal « saveteiñ ar blanedenn ». En doare ma ne c'hello den ebet kadarnaat ne ouie ket, e-giz ma vez lavaret.

1.3.1 Mouezh diarogerien ar goaz ekologel

En ur mod eo bet ar skrivagner gall, barzh, nijer ka kelaouer, Antoine de Saint Exupéry, an hini kentañ, e deroù an XX^{vet} kantved, da sachañ evezh war hor planedenn ma c'hell bezañ atribuet dezhañ an arroudenn-mañ « *Nous n'héritons pas de la terre de nos parents, nous l'empruntons à nos enfants* ». Un doare da c'houll gant pep hini kemer perzh evit mirout mat an danvezioù naturel, teñzorioù hor pladennen bennañ hag ez eus nemet unan anezhi sañset.

Diwezhatoc'h, e 1974, ur c'helenner agronomiezh brudet dre ar bed a-bezh, René Dumont⁴², a zo aet war ar renk evit dilennadeg ar prezidant. Daoust ma n'eo ket bet dilennet, difennet en deus, evit ar wech kentañ, ar goaz ekologel ha n'en deus ket bet ur prezeg tener war emdroadur ar blanedenn pa eo bet disklêriet gantañ : « *Si nous continuons l'évolution actuelle de la*

⁴¹ Mestayer, T. (Propos recueillis par), S. Papin, ancien président de Système U, « *Les distributeurs doivent prendre leurs responsabilités* », Le Télégramme, Économie, 18/01/2021.

⁴² Bet skrivet gantañ dreist-holl, *L'utopie ou la mort !* Paris, Ed. du Seuil, coll. « L'Histoire immédiate », 1973.

population et de la production industrielle démentielle, nous allons à l'effondrement total de notre planète, de la vie sur terre vers le milieu du siècle prochain »⁴³. Met gouzout a rae René Dumont, koulz ha den, e vezer en e c'haou atav pa lavarar ar gwir re abred⁴⁴.

En amzer-se, ur c'helenner agronomiezh all, ezel eus Akademiezh al labour-douar, brudet dre ar bed a-bezh ivez, evit e rakwardouriezh dreist-holl, Jean Keilling, en deus bet un doare-ober renet gant preder an dazont tost pe bell bepred⁴⁵. Evel-se, eo bet war evezh atav evit mirout strujusted an douaroù dre o danvezioù organek : an humus. Ha ret eo menegiñ e c'houlennata hollek war ar sujed-se : « *La présence d'animaux domestiques ou de troupeaux herbivores dont on récupère et utilise les déjections, n'est-elle pas un gage de continuité historique des civilisations sédentaires ? Les déjections des animaux ne sont-elles pas le levain au sens bactériologique qui conditionne la fertilité des sols ?* »⁴⁶.

Meneget eo gantañ ivez ur c'hlasker gall e Ensavadur broadel klaskerezh agronomek (EBKA), Francis Chaboussou⁴⁷, a grede e oa ret heuliañ un hent disheñvel diouzh « *la chaîne sans fin des traitements antiparasitaires*⁴⁸ » evit hentennoù al labour-douar biologel, da lavaret eo « *celles qui évitent ou limitent la mise en service des molécules susceptibles de divaguer après avoir rempli leur rôle*⁴⁹ ».

Tro-dro an amzer-se eo aet an oberour all ivez, Pierre Cadiou⁵⁰, war tachenn al labour-douar biologel gant un dalc'h pouezus : ekologiezh pe vitologiezh ? Petra a c'hoarvezfe un deiz bennak ma vefe al labour-douar ekologel un dra all estreget un c'hoarvoud marzel ?

En ur pennad-kaoz gant an Télégramme, « *Il n'y a de progrès qu'humain* », e grog Arnaud Platel⁵¹ e bennad en ur venegiñ barzhez Traoñ-an-Dour, Anjela Duval. Dre he savboent bet degemeret gant Roger Laouénan e 1972, an « Tregont vloaz gloriüs » o vezañ war an diskar, he doa ar varzhez displeget ne zalc'h ket kont a-walc'h an araokadenn eus hevoud mab-den⁵². E-giz e lâar Jean Le Clerc de la Herverie goude tremen Anjela Duval en un abadenn skingomz

⁴³ Dumont, R. « *Nous allons à l'effondrement total de notre planète* », 1974, Vidéo YouTube - INA Actu 24 oct. 2019.

⁴⁴ Drouelle, F. *Campagne de René Dumont : l'écologie entre en politique*, 26 novembre 2018. <https://www.franceinter.fr/emissions/affaires-sensibles/affaires-sensibles-26-novembre-2018> (Consulté le 27/01/2020).

⁴⁵ Keilling, J. *Des sols & des hommes, Un agronome se penche sur son passé*, Paris, Ed. du Dauphin, 1988, p. 197.

⁴⁶ Keilling, J. *Des sols & des hommes, Un agronome se penche sur son passé, op. cit.* p. 104.

⁴⁷ Bet skrivet gantañ, *Les plantes malades des pesticides : Bases nouvelles d'une prévention contre les maladies et parasites*, Debard, 1980.

⁴⁸ Keilling, J. *Des sols & des hommes, Un agronome se penche sur son passé, op. cit.* p. 193.

⁴⁹ Keilling, J., *Des sols & des hommes, Un agronome se penche sur son passé, op. cit.* p. 193.

⁵⁰ *L'Agriculture biologique en France : écologie ou mythologie*, Grenoble, PUG, 1975.

⁵¹ Plantel, A. conseiller municipal de Plomelin et secrétaire fédéral du PS 29, « *Il n'y a de progrès qu'humain* », Tribune, Le Télégramme Forum, 04/11/2020.

⁵² « *Où est-il le vrai progrès ?* ». « *Que vois-je autour de moi, sinon des cultivateurs abrutis de travail, écrasés de dettes, contraints à s'équiper de plus en plus lourdement. Ils n'ont plus d'heure pour se lever ou se coucher. Produire, produire, tirer le maximum de la terre. Je n'appelle pas ça le progrès* ».

« *Les conteurs* » e 1971⁵³ : « Disfi he doa ar varzhez ouzh an araokadennoù teknikel hag a zegas un tamm dieubidigezh da vab den hag un tamm gwask war ar memes tro ».

Ha diarogerien ar gaoz ekologel o deus roet plas d'ar sacherien evezh war tachenn an ekologiezh, niverusoc'h-niverusañ anezho a-hed an amzer.

1.3.2 Galv ar sacherien evezh war tachenn an ekologiezh

Gwastoù al labour-douar askoridik a zo lakaet war wel gant Isabelle Saporta⁵⁴ war meur a dachenn : ar beizanted da gentañ tout hag a chom da redek war-lerc'h ur patrom « seul vrasoc'h seul varc'had-matoc'h », ar yec'hed (kontamadur an dud gant an diastuzerioù) hag an endro (saotradur an dour gant an diastuzerioù hag an nitratoù, bezhin glas war aodoù Breizh...).

Poan gollet hervez an oberour o venegiñ Jean-Pierre Pasquet, saver saout-laezh e Châtillon-en-Vendelais, « *parce que la course à la production de masse, on ne peut pas la gagner. Il y aura toujours un pays capable de produire plus, pour moins cher que nous* ».

En ur pennad-kaoz gant an Télégramme, *Agriculture*. « *Nous ne vivons pas une crise mais une mutation totale*⁵⁵ », e tispleg Bruno Parmentier, ijinour, ekonomour ha Pennrener kozh Strollad ESA⁵⁶, eo echu gant patrom ar bloavezhioù 1960-1990. E-pad ar maread-se eo bet tric'hementet an askoradoù, da lâret eo eo bet tizhet araokadennoù dispar, met deuet eo bremañ an tuioù fall da vezañ par d'an tuioù mat.

Setu perak e rank al labour-douar cheñch penn-da-benn evel ma oa bet graet gantañ er bloavezhioù 1960 ha diorren start un doare-ober agroekologel. Un nebeud ahelioù diorenn al labour-douar nevez-se a zo damdreset gantañ da skouer : dilezel treiñ an douar, gounit al ludu kentoc'h eget prenañ anezhañ, lakaat da dalvezout erlec'hiadoù d'an diastuzerioù (dre blantenoù all) ha damprevanerioù (en ur vegañ loened skoazellerien-gouniderezh). Un dra a-bouez all a zo lakaet war wel gantañ war un dro. Dre an ezhommoù a-vras da vastañ, ret e vo mirout atav ur produiñ industriyel. Ha penaos lakaat se da glotañ eta gant berzh ar produioù bio, lec'hel ha reizh e-touez an dud.

E berr gomzoù, kenderc'hel da ober buan, marc'had-mat, aezet gant ar muiañ bio, lec'hel ha reizh. Ur pezh mell dae da dalañ outañ. Aze emañ an dalc'h !

⁵³ Le Clerc de la Herverie, J. *Evit kejañ gant Anjela Duval*, Vidéo, Magazine diffusé le 19/10/1972. <https://fresques.ina.fr/ouest-en-memoire/fiche-media/Region00504/evit-kejan-gant-anjela-duval-rencontre-avec-anjela-duval.html> (Consulté le 05/11/2020).

⁵⁴ *Le livre noir de l'agriculture : comment on assassine nos paysans, notre santé et l'environnement*, Paris, Fayard, 2011.

⁵⁵ Larvor, R. (Entretien avec Parmentier, B.), *Agriculture*. « *Nous ne vivons pas une crise mais une mutation totale* », Le Télégramme, 01/10/2019.

⁵⁶ École supérieure d'agriculture d'Angers.

En ur pennad-kaoz gant an Télégramme⁵⁷, Marc Dufumier⁵⁸, agronomour ha kelenner-klasker a gomz diwar-benn al labour-douar en amzer da zont. Hervezañ, e vo kendalc'het d'ober un implij askoridik nemet eus ar pezh a zo digoust ha nevezadus. Ha kement-se gant energiezh fosil an nebeutañ ar gwellañ, da lavaret eo gant teknikoù arat ebet ha neuropistrienn ebet ivez ma c'heller. Ul labour-douar muioc'h-mui ekologel e vo eta e plas ul labour-douar awenet gant an industriezh, hini an amzer-dremenet. Met ur gudenn a chom da ziskoulmañ, keroc'h e vo ar produioù eus ar patrom labour-douar-se, izeloc'h e askoradoù, hag a c'houll muioc'h a labour ; setu penaos lakaat ar produioù-se da vezañ digor d'ar rummoù kevredigezhel izel. En ur pennad-kaoz gant an Télégramme⁵⁹ e tispleg Marc Dufumier ivez « Gallout a raio al labour-douar modern kompezañ warc'hoazh yec'hed ar plant ha yec'hed an dud ».

An oberour all, Jean-Marie Pelt⁶⁰, louzawour hag ekologour birvidik abred-mat, en doa sachet evezh an dud ouzh efedoù an diastuzerioù war ar yec'hed hag an endro hag an tu da erlec'hiañ anezho gant doareoù-ober nevezus diazezet war produioù dinoazusoc'h hag en ur implij perzhioù ar plant dreist-holl.

Ar sokiologour Jean Viard⁶¹, bet degemeret he savboent gant an Télégramme⁶² diwar-benn efedoù an enkadenn yec'hedel war bed ar beizanted, en deus disklêriet « *Les agriculteurs doivent profiter de ce moment où les robinets de subventions publiques sont ouverts pour changer* », da lâret eo dilezel an diastuzerioù rak kreñv-tre e vo hervezañ ar gwask evit lakaat bed ar beizanted da cheñch don. E-giz ma lavar en e levr « *Le sacre de la terre* », ret eo adkavout skiant, lec'hel, lakaat da boulzañ, tiriad, lec'hioù, da lâret eo identelezh kreñv ar vicher labourer-douar e liamm gant an endro hag an ekobevezerien.

Gallout a reer mont war-zu an treuzkemm agroekologek dre an emelloù publik ha prevez ?

1.3.3 Pleg war-zu an treuzkemm agroekologek

Pouezus eo degas da soñj eo bet krouiet ministrerezh an Endro e miz Genver 1971, da lâret eo un tammig a-raok fin an « Tregont vloaz gloriüs », d'ar memes mare ma oa ar mouezhioù kentañ o sevel diwar-benn patrom askoridk an « Tregont vloaz gloriüs » hag o gwastoù. Dont a reas Robert Poujade da vezañ Ministr dileuriet ouzh ar C'hentañ ministr, e karg eus gwarez

⁵⁷ Jégo, K. *Jeudi de l'agroécologie : Marc Dufumier évoque l'agriculture du futur*, Le Télégramme, 14/01/2020.

⁵⁸ Oberour « *Agriculture biologique : espoir ou chimère ?* Le Muscadier, coll. « Le Choc des idées », 2013 ha kenoberour « *L'agroécologie peut nous sauver* » aux Éditions Actes Sud, 2019.

⁵⁹ Dufumier, M. *L'agriculture moderne de demain pourra concilier santé des végétaux et santé humaine*, Tribune, Le Télégramme, Forum, 02/01/2020.

⁶⁰ Pelt, J.-M. avec la collaboration de Steffan, F. *Cessons de tuer la terre pour nourrir l'homme ! Pour en finir avec les pesticides*, Fayard, 2012.

⁶¹ Oberour « *Le sacre de la terre* », Editions de l'Aube, 2020.

⁶² Le Gall, F. « *Les agriculteurs doivent profiter de ce moment où les robinets des subventions publiques sont ouverts pour changer* », 3 questions à Viard, J. Le Télégramme, Forum, 16/04/2020.

an natur hag an endro. Taolennet e oa gant Robert Poujade e-unan evel ministrerezh an traoù dibosupl⁶³.

Tost da zaou-ugent vloaz war-lerc'h eo bet aozet *Grenelle* an endro e 2007 evit kemer divizoù war hir dermen war tachenn an endro hag an diorren padus. Gant al lezennoù votet goude-se, anvet « *Grenelle I* » ha « *Grenelle II* », divizet e oa bet digreskiñ eus an hanter implij an diastuzerioù a-benn 2018, nemet ouzhpennet e oa bet un enkemmad diwezhañ « *si possible* »⁶⁴. Met hervez Lez ar c'hontoù⁶⁵, n'eo ket bet tizhet, dek vloaz war-lerc'h, ar palioù merket gant an daou steuñv « *Ecophyto I* » hag « *Ecophyto II* ». Hervez ur bilañs savet e miz Geñver 2020 eus ar steuñv « *Ecophyto II* », implij ar produioù fitoyec'hed en deus kresket eus 21 % e Frañs e 2018. Setu perak en deus divizet ar gouarnamant, e miz Ebrel 2020, dibistriañ al labour-douar, evit an trede gwech, en ur reiñ lañs d'ar steuñv « *Ecophyto II +* ». Koulskoude ministr al Labour-douar, Didier Guillaume, bet aterset en un abadenn skingomz war Europe 1⁶⁶, en deus disklêriet e miz C'hwevrer 2020 : « *La transition écologique est en marche* ». N'eus ket bet morse hervezañ kement a emdroadurioù evit ar mod bio : 10 % eus ar beizanted c'hall.

Ur sin vat all evit ar bio : ur pavilhon « Bio » digoret e Rungis d'an 9 aviz Mae 2016, ar brasañ koc'hu « Bio » en Europa, da lâret eo ma ez eus en ardrañ ur gwir marc'had broadel hag etrebroadel ez eus en argrec'h ur chañs wirion evit diorren ar produiñ bio.

Gweladennet eo bet ur gêr laezherezh bio en Il-ha-Gwilen gant sekretour-Stad evit an Treuzkemm ekologel, Emmanuelle Wargon, d'an naontek a viz C'hwevrer 2020 ha disklêriet he deus e tale ar gêr ouzh an holl zezverkoù evit treuzkemm frank al labour-douar⁶⁷. Bet en ur mod produiñ laezh kustum gwechall, eo aet ar gêr war ar mod bio en ur zont da vezañ emren en energiezh dre banelloù fotovoltaek hag ar mikrometanaat. Hollek eo difrae al labourer-douar : magañ al loened gant e c'hounezadurioù, robot-goro ebet, fardañ diennoù laezh war al lec'h, gwerzhañ anezho e rouadedoù kenwerzh nes hag e pretierezh stroll.

Un diverrañ eus an emdroadurioù pennañ o tiwanañ goude an « Tregont vloaz gloriüs » bet lakaet war wel a-uc'h a zo kinniget er skeudenn 1 p. 20.

Bezañ emskiantek, ober erbedadennoù, lakaat palioù uhel da dizhout a glot gant un doare-ober hollek dre genemglev met ar pouezusañ hag an diaesañ eo lakaat da dalvezout ar pennaennoù. Daoust hag eo bet heuliet an durc'hadurioù mat ?

⁶³ Keilling, J. *Des sols & des hommes : un agronome se penche sur son passé*, op. cit. p. 185.

⁶⁴ Pelt, J.-M. avec la collaboration de Steffan, F. *Cessons de tuer la terre pour nourrir l'homme ! Pour en finir avec les pesticides*, op. cit., prologue p. 2.

⁶⁵ La Cour des comptes épingle la réduction des pesticides « très en deçà des objectifs », Le Télégramme, 05/02/2020.

⁶⁶ Mabrouk, S. *interview politique du ministre de l'Agriculture Didier Guillaume*, Matinale Europe 1, 10/02/ 2020.

⁶⁷ Staes, C. *Deux contrats de transition écologique signés avec Emmanuelle Wargon*, Le Télégramme, 20/02/2020.

Skeudenn 1

An emdroadurioù pennañ o tiwanañ goude an « Tregont vloaz gloriüs »

Pennaennoù	Hentadurioù
<p>Ar pezh a zo bet ret lakaat e pleustr e-pad an « Tregont vloaz gloriüs »</p>	<ul style="list-style-type: none"> • Ur patrom labour-douar askoridik evit bastañ da ezhemmoù Bro-C'hall hag izelaat ar sujidigezh voued e-keñver an enporzhiadoù, goude an eil brezel-bed betek ar bloavezhioù 1970 (an « Tregont vloaz gloriüs » ent strizh). • Ur patrom produiñ laezh uhel e gresk etre 1955 ha 1984 (« Tregont vloaz gloriüs » al laezh) evit lakaat termen da euzh ar verrentez boued ivez.
<p>Ar pezh a zo bet e kont goude an « Tregont vloaz gloriüs »</p>	<ul style="list-style-type: none"> • Dindan levezon diarogerien ar gaoz ekologel ha galv ar sacherien evezh war tachenn an ekologiezh, • Dindan wask enkadennoù mareadek ar c'hinnig laezh, • Dindan emzalc'h nevez ar broduerien n'eus liamm ebet etre an efedusted laezh dre vuoc'h kousto pe gousto hag askorusted ar saverien saout-laezh tra ma int staget ouzh o micher diouzh ar mintin betek an noz penn-da-benn ar bloaz, • E vefe al labourerien-douar nebeutoc'h techet da : <ul style="list-style-type: none"> ➤ Redek war-lerc'h ar produiñ a-yoc'h, ➤ Implij produioù kimiek sintetek (diskar ar remziadoù « azot » hervez ur produer laezh bio).
<p>Ar pezh a zo o tiwanañ goude an « Tregont vloaz gloriüs »</p>	<ul style="list-style-type: none"> • Sachañ evezh war ar blanedenn hag an douaroù (mirout strujusted an douaroù dre o danvezioù organek, ober gant perzhioù ar plant e-lec'h an diastuzerioù,...). • Cheñch al labour-douar penn-da-benn evel ma eo bet graet gantañ er bloavezhioù 1960 ha diorren start un doare-ober agroekologel, da lâret eo mont war hentennoù al labour-douar biologel. • Lakaat mab-den e-kreiz an araokadenn ha derc'hel kont eus e hevoud. • Sevel un bennaenn nevez : produiñ dre goustoù izelañ pe henchañ ar broduerien war-zu pleustroù gwellekaet. • En ur vezañ emskiantek e vo keroc'h produioù ar patrom labour-douar agroekologek-se hag e vo ret mirout atav ur produiñ « industriel ».

Eil lodenn

Ur patrom agroekologek o c'hounit war ar patrom askoridik

Un tammig e pep lec'h eo bet lakaet war wel gant skiantourien, agronomourien hag ar Stad e-unan, gwastoù al labour-douar askoridik ha produadurour en anv prederioù ekologel. Deuet se da vezañ sinal kemenn ur meizad nevez : n'eus tamm dazont ebet gant patrom al labour-douar produadurour⁶⁸, war peseurt hent nevezus ha gant peseurt lusk eo aet war-raok al labour-douar biologel ?

2.1 Ganedigezh ha diorren al labour-douar biologel e Frañs

Evel e c'hoarvez alies a-walc'h e vez graet labourioù zo hep gouzout eo an doare-ober heuliet ur meizad nevez a zegaso araokaat war meur a dachenn diwezhatoc'h. Kement-se a zo degouezhet gant al labour-douar biologel.

2.1.1 Gwrizioù, ofisieladur ha termenadur al labour-douar biologel

Istor ofisiel al labour-douar biologel (AB) a zo bet ganet e 1980, da lâret eo fin an « Tregont vloaz gloriüs » dre vras, gant anaoudegezh e lezenn heñchañ al labour-douar⁶⁹ eus ul labour-douar « hep implij produioù kimiek sintetek ». Met, deuet e oa al labour-douar biologel war wel e penn kentañ ar bloavezhioù 1950, gant nac'h askoridikaat al labour-douar hag ar reñver a implij diastuzerioù ha temz kimiek⁷⁰. Anavezet al labour-douar biologel, hep menegiñ splann anezhañ koulskoude, gant lezenn heñchañ al labour-douar ar 4 a viz Gouere 1980, lakaet eo bet war wel e 1991 an termen « labour-douar biologel » en ur reoliadur Europa a ro an anaoudegezh ofisiel d'an doare produiñ-se⁷¹.

⁶⁸ Dufumier, M. « *Neuf propositions pour l'agriculture française* », Tribune, Le Monde, 21/07/2017. https://www.lemonde.fr/idees/article/2017/07/21/neuf-propositions-pour-l-agriculture-francaise_5163391_3232.html (Consulté le 15/12/2020).

⁶⁹ Loi n° 80-502 du 4 juillet 1980 d'orientation agricole : Art 14 III « Les cahiers des charges définissant les conditions de l'agriculture n'utilisant pas de produits chimiques de synthèse peuvent être homologués par arrêté du Ministre de l'Agriculture ».

⁷⁰ Produire Bio, *L'histoire de la Bio*. <https://www.produire-bio.fr/cest-quoi-la-bio/histoire-de-la-bio/> (Consulté le 17/12/2020).

⁷¹ Règlement CEE 2092/91 du Conseil du 24 juin 1991 concernant le mode de production biologique de produits agricoles et sa présentation sur les produits agricoles et les denrées alimentaires.

Ouzhpenn e tegas da soñj an elfennoù-se eus orin al labour-douar biologel, poent eo resisaat bremañ an termenadur a vez graet anezhañ : « Al labour-douar biologel a zo ur mod produiñ doujus d'an endro. Ret eo chom hep ober gant produioù kimiek sintetek hag OGK⁷² ha ret eo adaozañ an danvezioù organek, treiñ an trevadoù, kas war-raok ar stourm biologel ha doujañs mad al loened⁷³ ». Ur sin pouezus, un arouez eo bet an hent nevez kemeret gant al labour-douar evel-se, ha goude ul loc'hañ goustad eo aet war-raok tamm-ha-tamm ha deuet da vezañ arouezus gant gwir mennadoù evit an dazont. Zoken ma ne vo ket tizhet palioù ar gouarnamant war a seblant.

2.1.2 Diorren fonnus al labour-douar biologel

E 1995, e selle al labour-douar biologel ouzh 0,42 %⁷⁴ eus ar GLDI⁷⁵ gall. Bet stabil a-walc'h e-pad un nebeud bloavezhioù, he deus bet ar filierenn ul lañs nevez adal 2008 war-lerc'h Grenelle an endro e 2007 (s.o. p. 19). E 2019, ouzhpenn 10 % eus ar c'hêrioù (muioc'h eget 47 000 kêr) a zo aet war un doare-ober ekologel, da lavaret eo 8,3 % eus ar gorread labour-douar implijet a glot gant ouzhpenn 2 vilion hektarad⁷⁶. A-hend all, palioù ar steuñv « *Ambition Bio 2022* » Ministrerezh al Labour-douar d'ar 25 a viz Even 2018 a oa da dizhout 15 % eus ar GLDT⁷⁷ e doare bio ac'hann 2022 ha 20 % produioù bio e pretierezh stroll⁷⁸. Met kalz re uhel e seblant ar pal 15 % e-keñver ar seveniñ e 2019 : 8,5 %⁷⁹ hag e 2020 : 9,5 % (2,5 milion hektarad gounezet e mod bio -an hanter muioc'h eget pemp bloaz a-raok- gant 53 255 kêr bio -12 % eus ar c'hêrioù gall- 13 % a c'hêrioù bio ouzhpenn ar bloaz a-raok)⁸⁰.

Ha petra a vez graet er c'hêrioù gant ar gorreadoù labour-douar bio ?

2.2 Eus al labour-douar biologel d'ar sevel saout-laezh biologel

Ar sevel saout-laezh biologel a zo unan eus ar gennadoù en deus tennet splot dreist-holl eus mont war-zu al labour-douar biologel.

⁷² OGK : Organegoù genoù kemmet (OGM : organisme génétiquement modifié).

⁷³ République Française, L'environnement en France, Rapport sur l'état de l'environnement, *L'agriculture biologique en France*, Fiches thématiques, Mise à jour le 29 septembre 2020. <https://ree.developpement-durable.gouv.fr/themes/economie-verte/activites-de-l-economie-verte/pratiques-agricoles-respectueuses-de-l-environnement/article/l-agriculture-biologique-en-france> (Consulté le 29/01/2021).

⁷⁴ *L'agriculture biologique en France*, Fiches thématiques, Mise à jour le 29 septembre 2020, *op. cit.*

⁷⁵ GLDI : Gorread labour-douar implijet (SAU : Surface agricole utilisée).

⁷⁶ *L'agriculture biologique en France*, Fiches thématiques - Mise à jour le 29 septembre 2020, *op. cit.*

⁷⁷ GLDT : gorread labour-douar talvoudus (SAU : Surface agricole utile).

⁷⁸ Ministère de l'agriculture et de l'alimentation, *Le Programme Ambition Bio 2022 présenté à l'issue du Grand Conseil d'Orientation de l'Agence Bio*, Communiqué du 25/06/2018. <https://agriculture.gouv.fr/le-programme-ambition-bio-2022-presente-l-issue-du-grand-conseil-d-orientation-de-l-agence-bio> (Consulté le 19/12/2020).

⁷⁹ Agence Bio, *Les chiffres 2019 du secteur bio*, Dossier de presse, 9 juillet 2020. https://www.agencebio.org/wp-content/uploads/2020/07/DP-AGENCE-BIO-CHIFFRES-2019_def.pdf (Consulté le 16/12/2020).

⁸⁰ Agence Bio, *Les chiffres 2020 du secteur bio*, Dossier de presse, Juillet 2021. <https://www.agencebio.org/wp-content/uploads/2021/07/AGENCE-BIO-JUILLET2021-V08-interactif.pdf> (Consulté le 20/12/2021).

2.2.1 Muioc'h-mui a c'hounidoù bio gouestlet d'ar sevel saout-laezh biologel

E 2019, 61 % eus gounidoù al labour-douar biologel a zo gouestlet da gorreadoù boued-chatal⁸¹. Hag ar c'hêrioù sevel saout bio o deus kresket eus 8 % etre 2018 ha 2019 gant emdroadur an niver a saout laezh eus 10 % pa oa 3 % ouzhpenn evit ar buoc'hed-bronnañ⁸².

Setu, petra a dalvez ar filierenn saout-laezh biologel ha pelec'h emañ lec'hiet e bro-Frañs ?

2.2.2 Filierenn ar saout-laezh biologel o cheñch da vat

Ar filierenn he deus kresket kreñv adal 2010 e Bro-C'hall hag e Breizh, met disheñvel-bras a-walc'h eus an eil departamant d'egile.

Deroù ar bloavezhioù 2010 a zo merket gant ur gwir lusk produiñ evit filierenn al laezh-saout bio, dre ma en deus kresket splann etre 2010 ha 2012 n'eo ket hepken niver ar c'hêrioù testenikaet met niver ar re anezho o deus roet war an emdroadur bio ivez⁸³. E-pad dek vloaz, etre 2006 ha 2015, en deus kresket dastum al laezh-buoc'h bio eus 147 % (eus 225 da 557 milion litrad). Ar c'hreskoù pennañ bet merzet e 2011 (+ 25 % e-keñver 2010) hag e 2012 (+ 33% e-keñver 2011) a zo liammet ouzh niver ar c'hêrioù testenikaet bio o kreskiñ⁸⁴.

Kaset eo bet dastum al laezh bio war-raok e 2016 dre ma oa niverusoc'h-niverusañ ar broduerien laezh bio. Gant 684 produer nevez aet war ar bio er c'hwec'hmiziad kentañ ar bloaz 2016 ha 143 ouzhpenn en eil c'hwec'hmiziad, he deus ar filierenn bio kontet pemp gwech muioc'h a emdroadur war ar c'hwec'h miz kentañ 2016 eget ar bloaz 2015 a-bezh. Diwar al lusk-se eo bet dastumet ouzhpenn 840 million a litrad laezh bio fin 2018⁸⁵. Evit ar pezh a sell ouzh ar gorreadoù bio e 2018, 60 % anezho a zo evel gounidoù boued-chatal ha pradennoù pad⁸⁶. E 2016 e veze niveret 2 501 produer laezh-buoc'h testenikaet bio e Frañs, da lavaret eo 4,2 %⁸⁷ eus ar c'hêrioù laezherezh gall (58 462⁸⁸). E miz Genver 2019 e veze niveret 3 425 produer bio (36,9 % muioc'h eget e 2016) a zeroe o laezh d'ul laezherezh⁸⁹, eleze war-dro 6,4 % eus ar c'hêrioù laezherezh gall (53 798⁹⁰). Kontañ a reer 128 000 buoc'h-laezh bio er chatal (66 000 en emdroadur bio ouzhpenn) fin 2017, eleze 5,4 % eus ar chatal gall⁹¹. War ar memes mod e niverer, e 2019, 160 000 buoc'h-laezh bio ha 243 000 en ur zelec'her kont eus ar re a zo

⁸¹ *L'agriculture biologique en France*, Fiches thématiques, Mise à jour le 29 septembre 2020, *op. cit.*

⁸² *L'agriculture biologique en France*, Fiches thématiques, Mise à jour le 29 septembre 2020, *op. cit.*

⁸³ FranceAgriMer, *La filière du lait de vache biologique en France*, Édition décembre 2016.

⁸⁴ FranceAgriMer, *La filière du lait de vache biologique en France*, Édition décembre 2016, *op. cit.*

⁸⁵ Produire Bio, *La filière bovin lait*. <https://www.produire-bio.fr> (Consulté le 06/01/2021).

⁸⁶ Sénat, *Rapport d'information sur les financements publics consacrés à l'agriculture biologique*, 29/01/2020.

⁸⁷ Produire Bio, *La filière bovin lait*, *op. cit.*

⁸⁸ CNIEL, *L'économie laitière en chiffres*, Edition 2020, Avril 2020, p. 20.

⁸⁹ Produire Bio, *La filière bovin lait*, *op. cit.*

⁹⁰ CNIEL, *L'économie laitière en chiffres*, Edition 2020, *op. cit.* p. 20.

⁹¹ Produire Bio, *La filière bovin lait*, *op. cit.*

en emdroadur⁹², eleze en holl 7 % eus ar chatal gall (3 485 000 buoc'h-laezh e 2019⁹³). Ha ment an tropelloù a zo un tamm bihanoc'h er mod bio : 56 buoc'h dre gêr well-wazh⁹⁴ e-lec'h 68 dre sevel saout laezh gall (51 592 kêr en holl e 2019⁹⁵).

A-drugarez d'al lusk-se eo bet dastumet 975,7 milion a litrad laezh bio e 2019 (15,7 % muioc'h eget e 2018 pa eo bet ar c'hresk, e 2018, 32 % muioc'h eget e 2017), eleze 4,1 % eus dastum broadel al laezh-buoc'h⁹⁶ (e-lec'h 1 % e 2008⁹⁷ ha 3,5 % e 2018⁹⁸).

E 2020 eo paseet an dregantad-se da 4,6 % (1,1 miliard litrad laezh bio dastumet -11,7 % muioc'h eget e 2019- diwar 23,9 miliard litrad en holl⁹⁹). Gant kement a lusk eo bet daougementet an dastum laezh bio etre 2015 (546 472 l) ha 2020 (1 108 697 l)¹⁰⁰.

Kenderc'hel a ra an dastum laezh bio da greskiñ evit tizhout 1,17 miliard litrad (e kumul bloaziek red e miz Eeven 2021), digant 4 100 produer, eleze 5 % eus an dastum broadel. War e lañs e tlefe an dastum laezh bio tizhout 1,35 miliard litrad laezh bio fin 2022 (22 % ouzhpenn an dastum 2020) digant 4 400 produer laezh bio (10 % muioc'h eget e 2020). Neuze e vefe an dastum laezh bio kement ha 6 % eus an dastum laezh broadel¹⁰¹.

Dastumet eo al laezh-buoc'h bio gant ur c'hant laezherezh bennak. En o zouez tri embregerezh (Biolait, Lactalis, Eurial-Agrial) a zastum ouzhpenn an hanter eus ar produiñ laezh bio¹⁰², ar c'hentañ plas dalc'het gant Biolait (war-dro 30 % eus an dastum broadel), bet krouiet e kornôg Frañs e 1994 gant c'hwec'h produer laezh¹⁰³.

Ar fardañ boued-laezh bio (e-maez produioù ar gêr) savet diwar al laezh bio a sell ouzh an holl broduioù gant feurioù kreskiñ a zo etre 14,6 % ha 74,9 % eus 2017 da 2019, da lâret eo dre urzh

⁹² Jeanne, D. *Les conversions d'élevage de ruminants moins dynamiques en 2019*, 19/08/2020. <https://www.web-agri.fr/bovin-viande/article/171324/les-conversions-bio-d-elevage-de-ruminants-moins-dynamiques-en-2019#> (Consulté le 08/01/2022).

⁹³ CNIEL, *L'économie laitière en chiffres*, Edition 2021, *op. cit.* p. 22.

⁹⁴ D. Jeanne, *L'explosion de la production de lait bio va-t-elle faire évoluer le modèle*, 27/05/2020. <https://www.agri-mutuel.com/elevage/l'explosion-de-la-production-de-lait-bio-va-t-elle-faire-evoluer-le-modele/> (Consulté le 08/01/2022).

⁹⁵ CNIEL, *L'économie laitière en chiffres*, Edition 2021, *op. cit.* p. 20.

⁹⁶ Produire Bio, *Note de conjoncture du lait bio en France et en Europe, Premier semestre 2020*, 23/04/2020. <https://www.produire-bio.fr> (Consulté le 11/01/2021).

⁹⁷ D. Jeanne, *L'explosion de la production de lait bio va-t-elle faire évoluer le modèle*, *op. cit.*

⁹⁸ FNAB (Fédération nationale d'agriculture biologique), *Note de conjoncture Lait*, Avril 2019.

⁹⁹ CNIEL, *L'économie laitière en chiffres*, Edition 2021, *op. cit.* p. 46 et 48.

¹⁰⁰ CNIEL, *L'économie laitière en chiffres*, Edition 2021, *op. cit.* p. 48.

¹⁰¹ Chambres d'agriculture Normandie, *Lait bio : le point sur un contexte tendu*, 27/10/2021. <https://normandie.chambres-agriculture.fr/a-proximite/actualites-locales/detail-actualite/actualites/lait-bio-le-point-sur-un-contexte-tendu/> (Consulté le 22/12/2021).

¹⁰² Produire Bio, *La filière bovin lait*, *op. cit.*

¹⁰³ Biolait, *Biolait annonce son prix du lait 2019 (TPC : Toutes Primes Comprises) et renforce ses aides financières*, Communiqué de presse, 28/01/2020. <https://www.biolait.eu/biolait-annonce-son-prix-du-lait-2019-tpc-et-renforce-ses-aides-financieres/> (Consulté le 06/01/2021).

war zigresk : laezh pakataet (+ 14,6 %), laezh goel ha yaourtoù (+ 21,0 %), fourmaj (+ 55,2 %), amann (+ 54,8 %), diennoù laezh fresk (+ 22,7 %), dienn pakataet (+74,9 %) ¹⁰⁴.

Bevezerezh boued-laezh an tiegezhioù a gresk evit an holl broduioù gant feurioù kreskiñ ouzhpenn 10 % abaoe meur a vloaz war un toullad dazrannoù (amann, dienn, fourmajoù...). Ar plas kentañ a zo evit al laezh beveziñ : prenet e vez ur voutailhad laezh bio diwar zek ¹⁰⁵.

Dreistordinal eo bet kresk gwerzhañ ar boued-laezh bio e 2019 ¹⁰⁶, war-bouez al laezh pakataet e kresk ar c'hementad gwerzhet eus 3,7 % hepken. Ar c'hreskoù pennañ a zo evit ar fourmajoù (+ 25,6 % etre 2018 ha 2019), an dienn (+ 23,6 %) hag an amann (+ 19 %). Bez' ez eus bet ivez un emdroadur pozitivel evit prizioù ar boued-laezh bio. Merzout a reer ivez e teu eus Frañs 98 % eus al laezh hag ar boued-laezh bevezet e Frañs (e-lec'h 67 % evit holl ar produioù bio) ¹⁰⁷.

Ouzhpenn-se, evit kalz a dud enkadenn ar C'hovid-19 a gemmo boazioù debriñ ar Frañsizien en un doare padus ¹⁰⁸. Diarbenn a ra 69 % eus an divizourien a zo arbennigourien war an agrobouederezh ur c'hresk fonnus evit ar bio (etre 10 % ha 20 % ar bloaz e-pad ar pemp bloavezh da zont, gant an abeg e ya an debriñ yac'h war ziorren).

Met ar pezh a oa gwir sur-awalc'h en un endro stabil en deus cheñchet penn-kil-ha-troad e 2021 gant dreistproduiñ al laezh bio (pe un digempouez kinnig ha goulenn da nebeutañ) ha digresk bevezerezh ar produioù laezh bio war un dro (s.o. p. 99).

Daoust da se, bez' ez eus bet heñvel lusk e filierenn al lezh bio e Breizh hag e Penn-ar-Bed ?

E 2016, e sav, an dastum laezh bio e Breizh, evel e Bro-C'hall, da 2,4 % eus an dastum hollek. Pourchas a ra Breizh 22 % eus al laezh bio broadel. E 2016, 590 kêr bio a ra war-dro ur sevel saout-laezh, hervez « *l'Agence Bio* », eleze 27 % ouzhpenn en ur bloavezh. Kresket en deus chatal ar saout-laezh bio eus un drederenn d'ar memes koulz, deuet Breizh da vezañ evel-se en eil renk ar rannvroioù evit niver ar saout-laezh bio ¹⁰⁹. Mont war-zu al laezh bio a ya war gresk ingal abaoe 2011. Evel-se, 185 sevel saout-laezh a zo aet war-zu ar produiñ laezh biologel e 2016 hervez « *l'Agence Bio* ». Buanaet eo bet ar pleg gant enkadenn al laezh a zo bremañ, evel ar pezh a oa bet gwelet e-pad enkadenn 2009 (bet prenet al laezh d'ar broduerien 30 % nebeutoc'h eget er bloaz a-raok, tra m'eo chomet stabil a-walc'h priz ar produioù biologel).

¹⁰⁴ CNIEL, *L'économie laitière en chiffres*, Edition 2021, *op. cit.* p. 86.

¹⁰⁵ Produire Bio, *La filière bovin lait*, *op.cit.*

¹⁰⁶ Produire Bio, *Note de conjoncture du lait bio en France et en Europe*, *op. cit.*

¹⁰⁷ Ministère de l'Agriculture et de l'Alimentation, *Infographie - L'agriculture biologique en France*, 20/07/2020. <https://agriculture.gouv.fr/infographie-lagriculture-biologique-en-france> (Consulté le 16/12/2020).

¹⁰⁸ HEC Stories, *Quelles traces le Covid-19 laissera-t-il dans l'agro-alimentaire ?* N° 8, Décembre 2020 (80 divizour eus gennad an agrobouederezh bodet gant « Klub HEC Agrobouederezh » da-geñver ur « webinaire »).

¹⁰⁹ Agreste Bretagne, *La filière laitière en Bretagne, 5- La filière laitière bio : la crise accélère le nombre de conversions*, Janvier 2018 - N°2.

Evit a sell Penn-ar-Bed, n'emañ ket an departamant gwall war-wel er rannvro Breizh. Evit ar saout laezh testeniekaet bio e 2019 (36 346 e Breizh, eleze 12 % ouzhpenn ar bloavezh 2018), ar plas diwezhañ a zo gantañ (6 405 buoc'h, 17,6 % eus chatal bio Breizh), a-dreñv Aodoù-an-Arvor (7 050 buoc'h, 19,4 % eus chatal bio Breizh), Mor-Bihan (8 989, 24,7 % eus chatal bio Breizh) hag Il-ha-Gwilen (13 902 buoc'h, 38,3 % eus chatal bio Breizh). Da lâret eo, bez ez eus ouzhpenn hanter nebeutoc'h a saout laezh bio e Penn-ar-Bed eget e Il-ha-Gwilen e 2019¹¹⁰. Dre ma eo gwelloc'h an amzer evit ar produiñ laezh dre c'heota e Penn-ar-Bed, e tefle niver saout laezh testeniekaet bio ar departamant mont war ziorren hervez Isabelle Pailler, kuzulierez war ar laezh bio ha kustum e Kambr rannvroel labour-douar Breizh.

2.2.3 Ur c'haier kargoù start evit ar sevel saout-laezh bio

Ur gêr laezherezh eo ret dezhi talañ ouzh ur c'haier kargoù termenet gant ar reolennadur a denn d'an doareoù-mañ^{111,112} :

- Tachennoù dindan an amzer : ret eo d'ar saout-laezh bio paseal ar braz eus o amzer dindan an amzer ha kavout an tu d'ar peuriñ bio ar peurliesañ ar gwellañ. Ouzhpenn-se, evit mirout ouzh mac'hañ an douar, an dreistpeuriñ, ar saotradur ha krignerezh an douaroù eo termenet niver ha stankted ar saout. Se zo kaoz e vez kavet ur vuoc'h dre kektar hepken well-wazh.
- Batimantoù azasaet : ret eo terkañ ar c'hrevier-saout gant reoladoù resis evit aesaat mad al loened : gorread izek (6m² dre vuoc'h), sklêrijenn, aveladur, plouzadur a zo rakwelet evit gwellaat doareoù bevañ ar saout.
- Pleustroù sevel saout resis : difennet eo stagañ pe zigenvezañ ar saout dre vras koulz hag ar muturniezh nemet digornañ ar saout-laezh.
- Magadur bio diazezet war ar peuriñ : ret eo d'ar magadur bezañ bio evel-just (produet hep diastuzer ebet, hep danvez strujusaat sintetek ha hep OGK), ober gwell gant ar peuriñ (geot fresk pe sec'het pe ensiloet) : 60 % eus lodenn voued bemdeziek ar geotdebrerien da nebeutañ eus an danvez sec'h a rank bezañ tennet eus boued-chatal gros, fresk, sec'het pe ensiloet.
- Prederioù mezegel-loened reoliet : er-maez eus ar vaksinadurioù, prederioù a-enep an arvevaded ha steuñv an ezvoudañ a zo ret, reolennet eo doare ha niver ar prederioù aotreet. An arselladennoù hag ar gwarez a zo da vrientekaat da gentañ tout evit teurel evezh da vad al loened ha da yec'hed mat ar saout bio. Evit prederiañ anezho, ma'z eus ezhommm, harzet strizh eo an antibiotikoù hag ouzh ar medisinerezh dous e tro ar saver saout dre vras.

¹¹⁰ Agence Bio, *Chiffres-clés 2019 (Synthèses régionales)*. <https://www.agencebio.org> (Consulté le 30/01/2021).

¹¹¹ FranceAgriMer, *La filière du lait de vache biologique en France*, Édition décembre 2016, *op. cit.*

¹¹² Les 2 Vaches, *C'est quoi exactement du lait bio*. <https://www.les2vaches.com/cest-quoi-exactement-du-lait-bio> (Consulté le 30/01/2021).

Ouzhpenn-se eo al laezh bio ur produ testeniekaet « labour-douar biologel » (AB). Evit bezañ testeniekaet ha diskouez ar meneg « produ eus al labour-douar biologel » e rank ar produiñ bezañ kontrollet gant un aozadur testeniekaat dizalc'h grataet gant ar Stad (nav anezho a zo). Talvezout a ra an testeniekaat evit ur bloaz. Ret eo adneveziñ an argerzh kontroll ar bloaz war-lerc'h. Ur wech ar bloaz da nebeutañ e vez kontrollet ar c'hêrioù bio, met bez' ez eus ivez gweladennoù dic'horthoz (tro-dro 50% eus ar broduerien bep bloaz)¹¹³.

Evel-se, e vast al laezh bio da ezhemmoù niverus dre e gaier ar c'hargoù, hep bac'hañ ar broduerien koulskoude en argerzhioù re strizh. En ur mod, chom a ra ar produer mestr eus e donkadur, dre ma emañ en e zorn kenaoz an tropell (gouennoù ar saout), ar mod da c'horho anezho (pegen alies bemdez ha pegeit etre daou c'horho) hag aozadur al labour da skouer, da lavarout eo dalc'hoù ekonomikel, sokial ha kevredigezhel.

Met, ober gant un tropell saout-laezh bio a zegas efedoù dibar ha redioù pouezus-tre e rank ar broduerien derch'el kont anezho.

2.2.4 Efedoù dibar ha redioù ar produiñ laezh bio

Un tamm mat izeloc'h eo produiñ laezh ar saout-laezh bio. Da-geñver an emdroadur war al laezh bio eo digresk ar produiñ laezh dizingal eus ur gêr d'egile : etre 10 ha 20 % nebeutoc'h laezh well-wazh¹¹⁴. Hag un tamm keroc'h eo priz al laezh bio paeet d'ar broduerien e dave d'ar sifroù amañ war-lerc'h.

Evel-se, bilañs 2019 priz al laezh bio a laka war wel eo bet priz al laezh (hini gwirion ennañ efed kalite) 478,6 €/1 000 litrad well-wazh (2 % ouzhpenn ar priz miziek keitat 2018 a oa 469 €/1 000 litrad)¹¹⁵. Ar memes priz evit al laezh standart (priz, arc'hoproù a bep seurt ennañ, evit ul laezh standart gant 38 gramm a zanvezenn dru ha 32 gramm a zanvezenn broteek dre litrad) a oa istimet da 462 €/1 000 litrad (e digresk eus 1 % e-keñver keitad ar bloavezh 2018).

Priz gwirion al laezh bio paeet d'ar broduerien e miz Genver 2020 a oa 500,5 €/1 000 litrad well-wazh (4 % ouzhpenn miz Genver 2019 : 481,8 €/1 000 litrad), ha 490 €/1 000 litrad e miz C'hwevrer. Ar memes priz evit ur laezh standart (38 gramm a zanvezenn dru ha 32 gramm a zanvezenn broteek) a oa 485,5 €/1 000 litrad e miz Genver ha 478,9 €/1 000 litrad e miz C'hwevrer¹¹⁶.

Ur seurt priz a glot gant un diforc'h etre priz al laezh boas hag al laezh bio a zo 110 €/1 000 litrad ouzhpenn abaoe 2018 (notennañ a ranker eo gwashaet rannvloazegezh ar priz er mod bio : eus

¹¹³ Les 2 Vaches, *C'est quoi exactement du lait bio*, op. cit.

¹¹⁴ Produire Bio, *Bovins lait*. <https://www.produire-bio.fr> (Consulté le 11/01/2021).

¹¹⁵ Produire Bio, *Note de conjoncture du lait bio en France et en Europe, Premier semestre 2020*, op. cit.

¹¹⁶ Produire Bio, *Note de conjoncture du lait bio en France et en Europe, Premier semestre 2020*, op. cit.

400 € en nevezamzer da 500 €/1 000 litrad er goañv)¹¹⁷. Daveoù all a ziskouez eo keroc'h priz al laezh bio ivez tro-dro 115 €/1 000 litrad eget al laezh boas, da lâret eo war-dro 30 % ouzhpenn¹¹⁸ d'ar 1 añ a viz Eost 2021 (priz standart 38/32 al laezh boas : 355,6 €/1 000 l, al laezh bio : 470,87 €/1 000 l, eleze 115,27 € pe 32,4 % ouzhpenn ; priz gwirion al laezh boas : 372,9 €/1 000 l, al laezh bio : 487,55 €/1 000 l, eleze 114,65 € pe 30,7 % ouzhpenn).

Met degouezhet dreistproduiñ al laezh bio (pe un digempouez kinnig ha goulenn da nebeutañ) ha digresk bevezerezh ar produioù laezh bio a-daol-trumm emañ, hiziv an deiz, al laezh bio war an tu fall, lakaet diskenn war ar prizioù (s.o. pempvet lodenn).

Un diverrañ eus merkoù a-bouez ar patrom ekologiek o c'hounit war ar patrom askoridik bet lakaet war wel a-uc'h a zo kinniget er skeudenn 2 p. 29.

Berr-ha-berr eo ret d'ar broduerien laezh bio dere'hel kont ouzh teir arventenn pennañ. Un arvetenn reoliek, karta ar produiñ laezh biologel hag he redioù, ha div arventenn armerzhel, kementad ha priz al laezh.

Se a zo kaoz e rankint, evit gwellekaat mont en-dro o c'hêrioù ha bezañ kevezusoc'h eget ar c'hêrioù laezh kustum, mestroniañ chadenn grouiñ talvoudegezh¹¹⁹ o froduiñ laezh. Ar pezh a dalvez, dielfennañ, soñjal, jediñ, bezañ aliet mat (Kambroù al labour-douar,...), kemer perzh e strolloù kêrioù laezh bio hag all, kemer skouer war kêrioù broadel pe etrebroadel all... evit digreskiñ ar c'houstoù produiñ d'ar muiañ ha neveziñ. Evel-se e ch'ellint tennañ gounidoù sokioekonomikel hag endroel eus o reizhiad sevel saout laezh bio en ur sevel strategiezh uhelek patrom frank ar produiñ laezh bio.

Lakaet e vo war wel ar perzhioù sokioekonomikel hag endroel-se diwar skouerioù embannadennoù micherel ha diwar eskemmoù gant un nebeud produerien laezh bio e Penn-ar-Bed.

¹¹⁷ Chambre d'agriculture du Tarn et Maison de l'élevage du Tarn, *Le lait bio : Pourquoi pas moi ? Livret à destination des éleveurs en vaches laitières, en réflexion sur un projet AB*, Mai 2021.

¹¹⁸ Web-agri, *Cotation physique du lait, Prix du lait moyen payé aux producteurs en France, Prix du lait en €/1000L - cours 2020*. <https://www.web-agri.fr/marches-agricoles/lait> (Consulté le 07/11/2021).

¹¹⁹ HEC Stories, *La crème de la crème*, David Akpamagbo éleveur-artisan installé dans le Finistère, N° 5, Mars 2020

Skeudenn 2

Merkoù a-bouez ar patrom agroekologek o c'hounit war ar patrom askoridik

Prantadoù	Merkoù a-bouez
Ganedigezh al labour-douar biologel hag ar produiñ laezh bio	<ul style="list-style-type: none"> • Al labour-douar biologel <ul style="list-style-type: none"> ➤ Deuet war wel e 1950 ha bet anavezet e 1980 hep menegiñ anezhañ koulskoude. ➤ Ofisielaet e 1991 dre ur reoliadur Europat. • Ar produiñ laezh biologel : produerien kentañ al laezh bio e fin ar bloavezhioù 1980.
Lusk ha stad filierenn al labour- douar biologel hag al laezh bio	<ul style="list-style-type: none"> • Filierenn al labour-douar biologel <ul style="list-style-type: none"> ➤ Gorreadoù labour-douar bio : 9,5 % (2,5 milion ha) e 2020 (e-lec'h 8,3 % e 2019 ha 0,42 % e 1995), pell a-walc'h c'hoazh eus pal ar steuñv « <i>Ambition Bio 2022</i> » : 15 %. ➤ Kêrioù bio : 12 % eus ar c'hêrioù gall e 2020, eleze 53 255 kêr (13 % ouzhpenn hag er bloaz a-raok). • Filierenn al laezh bio <ul style="list-style-type: none"> ➤ Kêrioù laezherezh bio : 3 425 e 2019 (36,9 % muioc'h eget e 2016), eleze 6,4 % eus ar c'hêrioù laezherezh gall (tost d'ur gêr diwar bemzek). ➤ Chatal saout-laezh bio : 243 000 e 2019 (en o zouez 83 000 en emdroadur bio), eleze 7 % eus ar chatal gall (56 buoc'h dre gêr bio well-wazh e-lec'h 68 dre sevel saout laezh gall). ➤ Dastum laezh-buoc'h bio <ul style="list-style-type: none"> ▪ Etre 1 % eus an dastum broadel e 2008 ha 4 % e 2019. ▪ An hanter muioc'h e 2020 (1,1 miliard litrad) eget e 2015 (0,55 miliard litrad). ▪ 2021 (kumul bloaziek red e miz Even) : 1,2 miliard litrad digant 4 100 produer, 5 % eus an dastum broadel. ▪ 2022 (istimadennoù fin ar bloaz) : 1,35 miliard litrad (22 % ouzhpenn an dastum 2020) digant 4 400 produer (10 % ouzhpenn 2020), 6 % eus an dastum broadel. ➤ Fardañ boued laezh bio (dre urzh war zigresk ; feur kreskiñ etre 2017 ha 2019) : laezh pakataet (14,6 %), laezh goel ha yaourtoù (21,0 %), fourmaj (55,2 %), amann (54,8 %), diennoù laezh fresk (22,7 %), dienn pakataet (74,9%). ➤ Bevezerezh boued-laezh an tiegezhioù <ul style="list-style-type: none"> ▪ Feurioù kreskiñ ouzhpenn 10 % abaoe meur a vloaz war un toullad dazrannoù (amann, dienn, fourmajoù...). ▪ Ur c'hresk gwerzhañ ar boued-laezh bio dreistordinal e 2019 e-keñver 2018 (tost da 20 % pe ouzhpenn, war-bouez al laezh pakataet : + 3,7 %). ▪ Ur c'hresk fonnus istimet evit ar bio er bloavezhioù da zont (etre 10 % ha 20 % ar bloaz e-pad ar pemp bloavezh da zont), a-raok darvoudoù degouezhet e 2021 (dreistproduiñ pe digempouez kinnig/goulenn ha digresk bevezerezh). ➤ Souvereniezh ar boued (e 2019) : 98 % eus al laezh hag ar boued-laezh bio bevezet e teu eus Frañs.
Dazont filierenn al laezh bio ?	<ul style="list-style-type: none"> • Ul lusk torret hiziv an deiz ? war grenn-dermen ? da vat ? • Un taol-fall a-raok an adlamm hag ul lusk nevez ? • Ur patrom da adkempenn ha da wellekaat sur a-walc'h.

Trede lodenn

Strategiezh uhelek ar produiñ laezh bio :

produiñ gwelloc'h ha gounit muioc'h en ur labourat nebeutoc'h

Tremenet meur a zekvloaziad abaoe fin an « Tregont vloaz glorius » dija, graet lañs d'ar labour-douar ekologel ha d'ar produiñ laezh biologel (betek re ?), e vo resisaat bremañ an hentadoù strategel -hag ar strategiezh hollek a zeu diwarno- heuliet gant ar broduerien evit ar produiñ laezh bio.

Pennaennoù bet lakaet war wel a-uc'h (eil lodenn) a vo dielfennet amañ hervez an ezhemmoù, evit a sell kaier ar c'hargoù ar produiñ laezh bio dreist-holl. Klasket e vo anavezout ar c'hemmadurioù, an « dispac'hioù » a bep seurt zoken lakaet da dalvezout gant ar broduerien evit sevel o raktresoù ha lakaat anezho e pleustr. Met da gentañ-penn, goude bezañ lakaet war wel cheñchamentoù framm-spered ar broduerien laezh, e vo pouezus respont d'ar goulenn-mañ : gant petra eo bet broudet ar broduerien da cheñch penn d'ar vazh, da cheñch a-grenn o fatrom produiñ laezh. Evit mont da heul ar c'hiz, pe dre gredenn don ?

3.1 Rakrekizoù hollbouezus ar saverien saout-laezh

E-pad pell o deus labouret al labourerien-douar pep hini en e c'horn disfiziañs enno -pe jalous a-wechoù- eus an nevezentioù kaset war-raok gant labourerien-douar all zo. Hag ouzhpenn pep hini en doa c'hoant da vezañ penn d'e draoù, da vezañ perc'henn diouzh e afer hag e vinviji produiñ (mekanikoù, aveadurioù).

Emdroadurioù ar gevedrigezh dre vras o deus lakaet ar beizanted da ziorren ivez, a-hed an amzer, ur spered digor war o endro micherel lec'hel, broadel pe etrebroadel gant ar c'hoant da gas an traoù war-raok ha da gemer perzh en un difrae araokaat.

3.1.1 Diorren ur spered digor

Dre veur a desteni produerien e c'heller lakaat war wel cheñchamentoù pennañ ar saverien saout-laezh lod anezho penn d'o c'hêr abaoe bloavezhioù a-leizh ha lod all bet en em staliet war-lerc'h o zud pe e-maez ar familhoù. Met un dra a zo boutin etrezo, etre ar remziadoù yaouank dreist-holl, war evezh emaint evit kas palioù nevez war-raok.

Un dispac'h kentañ a zo da lakaat war wel ha dreist-holl pa eo douget gant Prezidant Kambr al labour-douar Penn-ar-Bed, Hervé Caugant : n'eo ket ken ar c'hementad laezh « *Alpha* » hag « *Oméga* » ar saverien saout-laezh. N'emañ ket an dazont en ur patrom diazezet war tropelloù saout brasoc'h-brasañ a zispleg Prezidant Kambr al labour douar. Ar pal a zo adkavout gwerzh ouzhpennet. Echu eo redek war-lerc'h ar c'hementad laezh¹²⁰. Hiziv an deiz eo an darn vrasañ eus al labourerien-douar lodek en ar gredenn-se. Produiñ a gementadoù bras n'eo ket ur pal ; ar pal a zo da reiñ an tu da bep hini da gaout ar gopr a fell dezhañ gounit a zifenn André Sergent¹²¹, Prezidant Kambr rannvroel labour-douar Breizh.

Ur c'houblad saverien saout laezh bio a zo war ar memes « hed gwagen » : n'emaomp ket redek war-lerc'h ar c'hementad, produet e vez al laezh e-pad dek miz rak un arsav a ra ar saout e-pad ar goañv a-raok halañ¹²². Hervez ur produer laezh bio all, en deus entan evit e vicher ibiliyet en e c'horf, ret eo gounit korn-tro doareadel kentoc'h eget an doare kementadel¹²³.

Bet e-pad pell ar c'hementad laezh dre vuoc'h ar merker pennañ eus ar produiñ laezh (s.o. lodenn gentañ p. 13), ar cheñchamant poell-se, an dispac'h-se a zo ar bazenn gentañ ken pouezus all eus spered digor ar broduerien.

Un eil dispac'h a zo ar ret evit ar broduerien da lakaat en arvar o doare da labourat¹²⁴. Met kendrec'hiñ anezho da cheñch o doare da labourat n'eo ket re ziaes peogwir ne fell ket d'ar remziad nevez a labourerien-douar kaout goproù izel na devezhioù labour hep fin ebet, na dreistendleadur a zo kaoz eus emlazh labourerien-douar zo, na prizioù kemm-digemm¹²⁵.

Evel ma tisklêri ur saver saout : adijinañ ha krediñ, unan eus an doareoù evit padout¹²⁶. Unan all, aet war ar bio adal 1989, unan eus an difraosterien d'ar mare-se, ar pezh eo c'hoazh, a zo oc'h arnodiñ teknikoù nevez dalc'hmat¹²⁷.

Dilezet ar pleustroù labour hengounel gant al labourerien-douar evit an arnodiñ hag an neveziñ, setu ur bazenn all war-raok war hent ar vodernelezh.

Un trede dispac'h a zo bezañ emskiantekoc'h eus an talvoudoù ekonomikel. Evel a lâr ur saverez en amzer-da-zont : ar saverien saout a zo un tammig re « saverien » ha re nebeut

¹²⁰ Le Borgne, J. Agriculture bretonne, Quel virage ? S. Pichonet : *Son avenir est dans le pré*, Le Télégramme, Ils sont formidables, 11/02/2021.

¹²¹ Le Borgne, J. *Un plan pour relancer l'agriculture bretonne*, Le Télégramme, 01/12/2020.

¹²² L'Haridon, L. *La viande bio celtique*, Le Télégramme, 31/08/2019.

¹²³ Nédélec, A. exploitant laitier à Ploéven dans le Finistère, *Agriculture : prendre le virage du qualitatif*, Rencontre du 24 janvier 2017 avec Emmanuel Macron, La République En Marche ! <https://en-marche.fr/articles/actualites/agriculture-prendre-virage-qualitatif> (Consulté le 17/02/2021).

¹²⁴ Guyot, V. *Lait réussir le passage en bio*, La France Agricole // 3752 // 15 juin 2018, Dossier p. 47.

¹²⁵ Limantour, F. Agriculture bretonne, Quel virage ? *L'agriculture bretonne cherche une nouvelle voie*, Le Télégramme Enquête, 08/02/2021.

¹²⁶ Pochet, R. *L'éleveur de Kerlaz distille le bon goût du lait cru*, Le Télégramme Objectif Terre, 13/11/2020.

¹²⁷ Le Berre, A. *Jean-René Cotten, pionnier du bio depuis 25 ans*, Le Courrier - Le Progrès, 07/11/2015. https://actu.fr/bretagne/quimper_29232/jean-rene-cotten-pionnier-du-bio-depuis-25-ans_4978804.html (Consulté le 24/02/2020).

« *business men* »¹²⁸. Ekonomiezh al labour-douar a zo dibar evel-just, met ar c'hêrioù evel an embregrezhoù a bep seurt a zo frammoù ekonomikel ha ret eo dezho degas arc'hant a-walc'h evit padout. Hag ar bazenn pouezusañ eo ? Sur a-walc'h peogwir ne vo raktres padus ebet hep arc'hant a-walc'h.

Met evit kas ar palioù nevez-se war-raok e c'hall ar saverien saout kontañ war skoazelloù kuzuliañ ha skoazelloù teknik azas ouzh pazennoù o raktresoù, dre strolladoù labour ha beajoù studi da gentañ penn. Atizet eo an dud d'en em gavout er strolladoù kinniget gant Kambr al Labour-douar (da skouer unan war emrenerezh proteek, unan all war ar saout Jerze...). Labourat a-stroll a c'hell bezañ an diskoulm evit terriñ an digenvezañ, evit mont war-raok meur a zen asambles. Ezhom o deus ar saverien saout da gaout merkoù¹²⁹. Evel-se, eo bet krouiet strollad geotetek bio Penn-ar-Bed ouzhpenn dek vloaz zo gant ar volontez da sevel kêrioù laezhrezh arboellus, emren ha spletus. Arnodañ ha tennañ splet eus skiant-prenet hiniennel hag a-stroll. Degas a ra ivez ar strollad dizoleiñ ha neveziñ¹³⁰.

Setu, lakaet he deus ur gêr da dalvezout ar sistem produiñ a-vremañ tamm-ha-tamm. Frouezh kuriusted ar saverien saout eo ha kejadennoù da-geñver stummadurioù ha beajoù studi. Paouezet eo bet ganti an ed evit pradennoù berrbad gant geot-saoz ha melchon gwenn¹³¹.

Ur skouer all a ziskouez talvoudegezh ar strolladoù labour-se. Kalz a nerzh, a blijadur hag a hardizhegezh degaset gant ar re yaouank er strollad. Dindan tri bloaz e kredont lakaat e pleustr raktresoù bet lakaet gant ar re gozh ugent vloaz evit sevel anezho ; gant skouerioù a-leizh disoc'hoù teknikel hag ekonomikel : prenañ annoared berlañchet, sal-c'horro savet war ar mod zelandneveziat, postadurioù en aozadurioù tachennaouegoù padus evit aozadur mat al labour, goro ar saout ur wech bemdez kerkent staliet, dileuriadur eus hollad al labourioù er parkeier¹³².

Meur a strollad kemmesk en o zouez bio ha kustum a zo bet gorerez mennozhioù : muioc'h-mui izili ar strollad a zibab ar bio betek dont da vezañ muianiverel¹³³.

Kement a skouerioù a ziskouez « Efed strollad, efed gounit »¹³⁴ pe « krenñvoc'h eo ar strollad atav eget ar c'hrenvañ eus ar strollad »¹³⁵ pe c'hoazh, evel ma vez lâret : e-unan e yeer buhanoc'h met asambles e yeer pelloc'h.

¹²⁸ Web-agri, *Productivité laitière = rentabilité* : « *Un grand mensonge en bande organisée* », Tribune, 06/01/2017. <https://www.web-agri.fr/tribunes/article/124455/productivite-laitiere-rentabilite-un-grand-mensonge-en-bande-organisee#> (Consulté le 15/02/2020).

¹²⁹ Jégo, K. *Éleveurs laitiers : une aide bienvenue de la comcom*, Le Télégramme, 31/07/2020.

¹³⁰ Terra, *L'effet groupe, l'effet gagnant*, actualité, 28/06/2019.

¹³¹ Réseaux d'élevage - Chambre d'Agriculture et Institut de l'Élevage, *Organiser son travail pour se procurer du temps libre*, 2018.

¹³² Terra, *L'effet groupe, l'effet gagnant*, op. cit.

¹³³ Terra, *Conversion bio ne rime pas avec improvisation*, 24/05/2019.

¹³⁴ Terra, *L'effet groupe, l'effet gagnant*, oo. cit.

¹³⁵ Le Poher, *Lait biologique : une vague de conversions sans précédent*, Semaine du 16 au 22 novembre 2016.

Ar saverien a zo atav o klask nevezadurioù evit o raktres. Linenn-hent ur gêr meneget evel skouer a ziskouez pegen pouezus eo kaout un spered digor ha mont da zizoleiñ doareoù all da broduiñ¹³⁶. Mont etrebroadel evit deskiñ diouzh teknikoù ar broioù geotegek¹³⁷. Sellout a ra ur saverez saout eus ar pezh a ya en-dro e lec'h all, da skouer gant ar saverien zelandneveziat¹³⁸. Mennozhioù enporzhiet eus Zeland-Nevez : klask teknikoù a c'hall bezañ treuzlec'hiet e Breizh en ar sistemoù geotegek¹³⁹. Goude ur veaj studi e Bro-Saoz war ar sistemoù geotegek hervez un doare « *low cost* » eo bet adsavet ar patrom a-vremañ gant ur saver saout¹⁴⁰.

Birvidik eo strolladoù labour Penn-ar-Bed, un hanter-kant bennak anezho, kevreet e diabarzh *Res'Agri 29*¹⁴¹. Ha dreist-holl pa eo bet priziet unan anezho, strollad ar *GIEE*¹⁴² « *Explorons la diversité* », da-geñver an « *Trophées de l'agro-écologie* », tapet gantañ priz meur an difrae a-stroll e 2021¹⁴³. Palioù 35 ezel ar strollad labour-se a zo war teir zachenn : talvoudekaat ar peuriñ d'ar muiañ, produiñ laezh a goust izel ha digreskiñ ar skog war an endro war un dro.

Mat eo evit ar saverien en em gavout asambles evit eskemm hag evit mont da welout pleustroù all broadel pe etrebroadel, met ar pal a zo ganto da vont pelloc'h c'hoazh ha da rannañ, eskemm titouroù, skiant-prenet ha disoc'hoù. Pinvidik-tre eo an eskemmoù gant ar saverien saout, kuzulierien Kambroù al labour-douar hag ijinourien ensavadur ar sevel saout¹⁴⁴. Rannet e vez titouroù, skiant-prenet, pleustroù ha disoc'hoù evit mont war-raok ; menegerioù teknikel hag ekonomikel heuliet ganto a-hed ar bloavezhioù diwar-benn an tachennoù emrenerezh, askorusted pe goprañ al labour¹⁴⁵. En ur zegemer strolladoù en o c'hêrioù evit testenianñ ha eskemm e-keñver emdroadur o fleustroù, o sevel saout-laezh, o disoc'hoù ha merkoù efedusted tu zo d'ar broduerien da zegas cheñchamentoù en o micher¹⁴⁶.

Bez' ez eus un energiezh vat etre ar beizanted bio e Bro ar C'hab evit an eskemm hadoù pe ar c'henskoazell¹⁴⁷ ar pezh a gadarna eo bodad eskemm evit gwir : ur benveg araokaat dispar¹⁴⁸.

¹³⁶ Réseaux d'élevage, *Organiser son travail pour se procurer du temps libre*, op. cit.

¹³⁷ A2C le site de l'agriculture de conservation, *Est-il possible de bien vivre en production laitière ?* 30/09/2014. <http://agriculture-de-conservation.com/Est-il-possible-de-bien-vivre-en> (Consulté le 15/02/2020).

¹³⁸ Web-agri, *Productivité laitière = rentabilité : « Un grand mensonge en bande organisée »*, op. cit.

¹³⁹ RéussirLait, *Des idées importées de Nouvelle-Zélande*, n° 247 - mai 2011 (p. 84),

¹⁴⁰ Réseaux d'élevage, *Organiser son travail pour se procurer du temps libre*, op. cit.

¹⁴¹ Réseau départemental des groupes de développement agricole du Finistère.

¹⁴² Groupement d'intérêt économique et environnemental (kenstrollad labourerien-douar anavezet gant ar Stad).

¹⁴³ Terra, *Le Finistère à l'honneur des Trophées de l'agro-écologie*, l'évènement, 12/11/2021.

¹⁴⁴ Réseaux d'élevage - Chambre d'Agriculture et Institut de l'Élevage, *A la rencontre des systèmes laitiers économes de Bretagne*, 2018.

¹⁴⁵ Terra, *L'effet groupe, l'effet gagnant*, op. cit.

¹⁴⁶ Terra, *L'effet groupe, l'effet gagnant*, op. cit.

¹⁴⁷ Le Télégramme - Capsizun, *Esquibio. Le Gaec passe en production bio*, 15/05/2018. <https://www.letelegramme.fr/finistere/capsizun/esquibio-le-gaec-passe-en-production-bio-15-05-2018-11959057.php> (Consulté le 24/02/2020).

¹⁴⁸ Capbio-Bretagne, *Dans le Finistère, le groupe d'échange : un fantastique outil de progrès*, 2011. <http://www.capbio-bretagne.com/synagri/dans-le-finistere-le-groupe-dechange-un-fantastique-outil-de-progres> (Consulté le 16/02/2020).

Gwir e oa e 2011 dija, bet priziet ar strollad labour « *En groupe, faire progresser les systèmes herbagers finistériens* » da-geñver an « *Trophées de l'Agriculture Durable* » ; re wir eo hiziv an deiz c'hoazh, bet priziet ur strollad labour all dek vloaz war-lerc'h (s.o. p. 33).

Ouzhpenn pep tra bet lakaet war wel a-uc'h, ar saverien o deus graet ur c'hammed all war-raok c'hoazh en ur lakaat e boutin ur « bern traoù » (mekanikoù, aveadurioù...) !

Evit ar mekanikoù hag an ostilhoù bras ha ker ret eo d'un embregerezh labour-douar prenañ anezho ha lakaat anezho e servij ur strollad¹⁴⁹, evit skañvaat pouez postadurioù ar c'hêrioù ; da lâret eo, al labourerien-douar o deus dilezet ar santimant perc'hennañ a zo bet enno remziadoù-pad. Paseal a ra ivez ar cheñchamantoù dre genlabourioù kreñvaet etre al labourerien-douar dre genlodenniñ an aveadurioù hag al labour e KIBLD¹⁵⁰ dreist-holl¹⁵¹.

Diorroet ur spered digor gant ar broduerien war meur a zachenn ha war meur a vro e vo graet bremañ ur sell war ar mod eo sammet dibab ar bio hag e dalvoudoù ganto.

3.1.2 Sammañ dibab ar produiñ laezh bio hag e dalvoudoù

En em staliañ war ar mod bio a respont da hiraezh a brp seurt : teknikel, endroel, sokial, ekonomikel, klask emren...¹⁵². Un nebeud anezho a vo lakaet war wel amañ dindan en ur gregiñ gant unan pouezus-tre : adkavout frankiz ober en desped da redioù kaier kargoù al laezh bio.

Al labourerien-douar o-unan a zo o c'hentañ perzh mat a-drugarez d'o barregezh da raktresañ ha da verniañ pleustroù amc'hiz, d'o barregezh da arnodiñ ha da lakaat ar sistem produiñ da glotañ bepred¹⁵³. Setu saverien saout zo, sod gant ar genetik, o deus erlec'hiet an holsteinened gant saout a ouenn Simmental evit gwellaat kalite al laezh¹⁵⁴. Evit lod all ne glote ket frammoù ekonomikel evel kevelourioù gant o sell eus diorren al labour-douar dre ma vez lakaat al labourer-douar en ur stad sujidigezh kreñv ha termeniñ a ra o frankiz ober. Se a zo kaoz eo aet produerien zo war doareoù diorren all, troet war al labour-douar biologel dreist-holl, ar pezh a oa bihanniver pemp warn-ugent bloaz zo¹⁵⁵. Lod all c'hoazh o deus divizet cheñch mod produiñ ar gêr goude skiant-prenet vicherel e-pad pevar bloaz e broioù all (Okeania : Aostralia, Zeland-Nevez) e-lec'h ma emañ ar saout er peurlvan a-hed da hed ar bloaz. Se a zo bet an distegner evit kendrec'hiñ ur produer da vont war ar bio¹⁵⁶. En degouezhioù all, ur weladenn

¹⁴⁹ Le Télégramme - Ploéven, *Du nouveau pour les semis*, 20/09/2020.

¹⁵⁰ Kevelouri implij binvioù labour-douar (CUMA : Coopérative d'utilisation de matériel agricole).

¹⁵¹ Limantour, F. Agriculture bretonne, Quel virage ? Véronique Lucas, sociologue rurale : « *Les agriculteurs veulent gagner en autonomie* » Le Télégramme 13/02/2021.

¹⁵² Terra, *Ils ont choisi de s'installer en BIO*, 30/11/2018

¹⁵³ Institut de l'Élevage (Document réalisé par), *Réflexion globale et combinaison de techniques originales pour un système autonome*, 2017.

¹⁵⁴ Réseaux d'élevage, *Organiser son travail pour se procurer du temps libre*, op. cit.

¹⁵⁵ André, A. *Jean-René Cotten / « Les oiseaux se cachent pour mourir »*, Parchemins, 23/10/2017 <http://www.parchemins.bzh/index.php/jean-rene-cotten-oiseaux-se-cachent-mourir/> (Consulté le 24/02/2020).

¹⁵⁶ Nédellec, A. exploitant laitier à Ploéven dans le Finistère, *Agriculture : prendre le virage du qualitatif*, op. cit.

souezhus, ur gejadenn sebezus, ur strollad stummañ a zo alies distignoù an emdroadur war al labour-douar bio, en ur vezañ emskiantek eo dibab ar bio ouzhpenn emdroadur ur sistem, un dispac'h eo¹⁵⁷.

En em c'houlenn a ra ar broduerien ivez war pep tra a zo tro-dro al labourer-douar, ar pezh a zigresk e varz frankiz hag intrudu ; ha setu unan bet e darempred gant labourerien-douar bio a oa muioc'h parfet ha muioc'h seder bet gwellaet kalite o vuhez¹⁵⁸. Choazet he deus ur saverez saout al labour-douar biologel dre gredenn ; labourat a ra gant an osteopat hag implij a ra an homeopatiezh evit e saout Skos¹⁵⁹. Evit unan all, gwellekaat emrenerezh ar gêr a oa pouezus-tre en ur vezañ prest da zegemer ur produiñ izeloc'h. Merañ ar sistem boued-chatal nevez hag ar magañ a zo an elfennoù diaesañ da vestroniañ¹⁶⁰.

Met ur goulenn diazez a zo diwar-benn ar produiñ laezh bio : petra eo alc'hwez un emdroadur degaset mat ? Dont a-benn da gavout ur c'hempouez teknikel : azasaat ment an tropell ouzh danvez produiñ boued war ar gêr rak ar bio a zo labourat en emrenerezh. En ur brenañ en diavaez e vez kemeret riskloù war orin ar soja bio da skouer ha koust a ra ker ouzhpenn¹⁶¹. Setu perak eo ar bio evit saverien a-feson, kreñv war an tachennoù teknikel hag arc'hantel hag en o fenn dreist-holl¹⁶².

Daou vloaz a zo ret evit paseal er mod bio. Ar gwellañ mare eo pa eo uhel priz al laezh peogwir e c'hell digresk ar produiñ goude-se tro-dro 30 %. Ret eo kaout stad an arc'hant reizh ha bezañ ur saver saout eus ar gwellañ¹⁶³. An dibab da vont war ar bio a zo bet liammet evit ur produer gant diviz e vab da genderc'hel ar gêr. Evit e vab eo en deus divizet mont war ar bio, ur patrom a zere gwelloc'h ouzh e dalvoudoù. Ar cheñchamant spered a zo nevezig hervezañ¹⁶⁴. Adkavout frankiz ober n'eo ket trawalc'h koulskoude. Fellout a ra d'ar broduerien ivez tennañ splet eus dibab ar bio evit gwellaat talvoudekaat al laezh hag an aoziou labour. An emdroadur war ar bio a zo un digarez evit adkavout ar c'hontroll war talvoudekaat al laezh. Ar c'heñverioù nerzh gant an ardraoñ n'int ket gwall vat evit produrien ar filierenn boas, met likaouet eo ar broduerien laezh bio gant an treuzfurmerien¹⁶⁵ betek-henn. Evel-se, enkadenn 2015 al laezh en deus

¹⁵⁷ Terra, *Conversion bio ne rime pas avec improvisation*, op. cit.

¹⁵⁸ Larvor, R. *Produire bio. Le bon moment à Cosquer Vian*, Le Télégramme, 02/02/2016. <https://www.letelegramme.fr/finistere/quimper/produire-bio-le-bon-moment-a-cosquer-vian-02-02-2016-10943262.php> (Consulté le 24/02/2020).

¹⁵⁹ Terra, *Ils ont choisi de s'installer en BIO*, op. cit.

¹⁶⁰ Produire Bio en Bretagne, *Élevage de vaches laitières bio*. <http://produirebioenbretagne.fr/ressources/eleveur-de-vaches-laitieres/> (Consulté le 02/02/2020).

¹⁶¹ Le Poher, *Lait biologique : une vague de conversions sans précédent*, op. cit.

¹⁶² Le Poher, *Lait biologique : une vague de conversions sans précédent*, op. cit.

¹⁶³ Le Poher, *Lait biologique : une vague de conversions sans précédent*, op. cit.

¹⁶⁴ Le Télégramme - Fouesnant, *Eau. Éclaircies entre l'Odet et l'Aven*, 27/05/2010. <https://www.letelegramme.fr/local/finistere-sud/quimper/fouesnant/fouesnant/eau-eclaircies-entre-l-odet-et-l-aven-27-05-2010-932714.php> (Consulté le 24/02/2020).

¹⁶⁵ Guyot, V. *Lait réussir le passage en bio*, La France Agricole, p. 47, op. cit.

buanaat pleustrou a c'hallfe reiñ goprou uheloc'h a-drugarez d'al labour-douar bio¹⁶⁶. War ar memes mod eo bet gweladenn kêrioù ha dizoleiñ ar marzoù tennet gant produerien bio aet war un hent arboellusoc'h un distigner evit ar bio¹⁶⁷.

Divizet en deus ur produer d'en em staliañ e 2002 gant palioù resis war ar goprou (keñverius d'e gorröderioù goprad), al labour gant amzer frank evit ar familh, ar sistem produ a zouj an endro hag an douar. Ret e oa d'ar sistem bezañ efedus evit talvoudekaat ar produioù, mestroniañ an enkasoù hag ar postadurioù¹⁶⁸. Raktres staliañ ar produer-se a oa savet diwar palioù resis : klask ur gêr gant ur gorread bras digor ha douaroù a galite mat, ur staliadur hag ur sistem produiñ gant nebeut a dispignoù arc'hant¹⁶⁹.

Padusted ar sevel saout laezh a ya dre zigresk an holl goustoù produiñ ha gwellaat an aozioù labour¹⁷⁰. Pariet o deus produerien all war ur sistem a goustoù izel diazezet war ar peuriñ¹⁷¹. Bezañ e bio prizioù izel (« *low cost* ») evito a zo gounit muioc'h ha labourat nebeutoc'h¹⁷². Sammañ dibab ar bio a zo ivez teurel muioc'h a evezh ouzh emdroadur ar gevredigezh hag ezhemmoù ar vevezerien, da lâret eo bezañ kenstag gant ar gevredigezh hag ar vevezerien.

Ar bio a zo ur raktres sammet gant an holl gant darempredoù disheñvel d'an endro etre produerien ha bevezerien¹⁷³ a zisklêr ur produer hep kildro ebet.

Gant ar goulenn kevredigezhel o cheñch eo ar bio ar marc'had war kresk nemetañ evit al laezh produet hep temz na diastuzer ebet. Met ret eo bezañ dreist war an dachenn teknikel diwar-benn ar peuriñ en ur hadañ ar spesadoù mat d'ar mare mat, en ur beuriñ er stad vat. Ar geot a zo ar boued a goust an nebeutañ evit magañ ar saout. Ouzhpenn-se e Kreiz Breizh e boulz ar geot tost dizehan etre miz C'hwevrer ha miz Kerzu¹⁷⁴.

Setu, mont war ar bio n'eo ket evit bezañ diouzh ar c'hiz nag evit abegoù a interest arc'hant, met evit bezañ kenstag gant ar gevredigezh en deus c'hoant an dud da vevañ enni. Evit bezañ diavaez eus ur sistem ne c'heller ket mestroniañ evel en ar mod askoridik¹⁷⁵.

¹⁶⁶ Le Borgne, J. Agriculture bretonne, Quel virage ? *Les défis de l'agriculture bretonne*, Le Télégramme Enquête, 11/02/2021.

¹⁶⁷ Pezon, J. « Être en bio low cost, c'est gagner plus et travailler moins » L'Éleveur laitier, n° 271, juin 2018.

¹⁶⁸ Institut Élevage, *Réflexion globale et combinaison de techniques originales pour un système autonome*, op. cit.

¹⁶⁹ Institut Élevage, *Réflexion globale et combinaison de techniques originales pour un système autonome*, op. cit.

¹⁷⁰ Brocard, V., Portier, B., Le Meur, D., Porhiel, J.Y., Lopez, C. *Traire les vaches une fois par jour ou grouper les vêlages : deux techniques pour réduire le travail d'astreinte en élevage*, Rencontres Recherches Ruminants, 2007.

¹⁷¹ Guyot, V. *Lait réussir le passage en bio*, La France Agricole, p. 47, op. cit.

¹⁷² Pezon, J. « Être en bio low cost, c'est gagner plus et travailler moins » L'Éleveur laitier, op. cit.

¹⁷³ Le Télégramme - Fouesnant, *Agriculture. Différentes visions de la bio*, 06/11/2019. <https://www.letelegramme.fr/finistere/quimper/agriculture-differentes-visions-de-la-bio-06-11-2019-12426533.php> (Consulté le 24/02/2020).

¹⁷⁴ Le Poher, *Lait biologique : une vague de conversions sans précédent*, op. cit.

¹⁷⁵ Durand, P. Agriculture bretonne, Quel virage ? *Non, le cochon n'est pas le seul responsable de la pollution agricole*, Le Télégramme Enquête, 10/02/2021.

Met lusker emdroadur ar sistem eo ober ar bevezer. Al labourerien-douar n'int ket penn eus ar jeu, al labour-douar eo. Ma vez divizet gant ar bevezer harpañ ar produioù « *low-cost* », roet e vo dezhañ an endro a ya da-heul ; ar pezh n'eo ket padus war hir dermen¹⁷⁶. Da lâret eo e rank ar gevredigezh talañ ouzh e zislavaroù. An diferañs etre ar goulenn kevredigezhel ha goulenn ar bevezer eo an asant da baeañ¹⁷⁷.

Koulskoude, ma vez un efed tu da choaz ar bio, ret eo klask al lusk er c'henarroud hollek al labour-douar ha gant pouez brasoc'h bevezerezh ar produioù bio¹⁷⁸. Kinnig a ra ar bio diarselloù : bez' ez eus goulenn. Ha goulennoù o deus ivez ar broduerien evit mont war ar bio, diwar-benn yec'hed al loened ha diarselloù ar marc'had da skouer¹⁷⁹. Ouzhpenn bezañ kenstag gant ar gevredigezh hag ar vevezerien eo heñchet ar broduerien evit dibab ar bio ivez gant talvoudoù etik ha gwarez an endro.

Enkadenn al laezh e 2015 a zo bet ur gwir abeg, e-touez elfennoù all, evit mont war ar bio. Prest e oa danvez ar bio da ziwanañ war an dachenn endroel dreist-holl. Kalz a beizanted ne felle ket dezho kompren riskloù an tretadurioù evit o yec'hed pa c'helled ober gant doareoù disheñvel. Enkadenn al laezh a zo bet an darvoud distegner e preder ar broduerien laezh. Lakaet he deus war fiñv ar broduerien evit kavout diskoulmoù d'an enkadenn¹⁸⁰.

Hervez sokiologourez ar maezioù, Véronique Lucas¹⁸¹, ez eus un argerzh agroekologel a vouezh izel ha didrouz e-touez al labourerien-douar gall, da lâret eo e vez gwelet ur cheñchamant bras er pleustroù en ul lodenn eus al labour-douar ha n'eo ket kaset war-raok evit kudennoù an endro da gentañ-holl met kenober a ra gwellaat endroel ar sistem produiñ. Graet e vez pep tra gant al labourerien douar en ur mod didrouz. Al labourerien-douar ne yeont ket war tachenn an ekologiezh en o frezegennoù. Ne blij ket dezho implij an arguzenn ekologel. Met diorren a reont ur c'heriaoueg wir memes tra evit komz diwar-benn ar gounid ekologel (douar bev, buzhug a ya war ziorren pa vez lakaet paouez war an arat...) ¹⁸².

Evit ur saver saout-laezh abaoe 2014¹⁸³, en em staliet e-maez ar familh, testeniet « labour-douar biologel » (AB) abaoe 2019, luskedet e oa da lakaat e pleustr pennaennoù hag etik ar bio. Ouzhpenn-se eo sot gant ar pleustroù nevez ha hardizh en e zibaboù teknikel aliet-mat gant e gontroller laezh ha Kambr al labour-douar. Disklêriet en deus ur saver-saout laezh all eo nec'het

¹⁷⁶ Le Télégramme - Fouesnant, *Eau. Éclaircies entre l'Odette et l'Aven*, op. cit.

¹⁷⁷ Le Borgne, J. *FDSEA 29 : les agriculteurs s'inquiètent du discours ambiant*, Le Télégramme, 03/04/2021.

¹⁷⁸ Terra, *Ils ont choisi de s'installer en BIO*, op. cit.

¹⁷⁹ Le Poher, *Lait biologique : une vague de conversions sans précédent*, op. cit.

¹⁸⁰ Le Poher, *Lait biologique : une vague de conversions sans précédent*, op. cit. .

¹⁸¹ Limantour, F. V. Lucas, *sociologue rurale* : « *Les agriculteurs veulent gagner en autonomie* », op. cit.

¹⁸² Limantour, F. V. Lucas, *sociologue rurale* : « *Les agriculteurs veulent gagner en autonomie* », op. cit.

¹⁸³ Ouest-France, *Finistère. Pour nourrir ses vaches l'hiver, il a remplacé le soja par le lupin*, 06/11/2019. <https://www.ouest-france.fr/bretagne/cast-29150/finistere-pour-nourrir-ses-vaches-l-hiver-il-remplace-le-soja-par-le-lupin-6597221#> (Consult é le 02/02/2020).

gant filmoù zo diwar-benn ar beizanted rak « ar spered zo cheñchet » emezañ¹⁸⁴. Diouzh e du, hadañ a ra hep treiñ an douar, pe nebeut, da skouer, ha gwelloc’h eo evit ar buzhug !

Ha dre ur studi vroadel « *Cedabio* »¹⁸⁵ gouestlet d’ar c’heñveriadur « sevel-saout bio ha sevel-saout kustum » o deus saverien bio rouedad ar c’hêrioù laezherezh heuliet e Frañs dibabet ar bio evit kredennoù personel. Ar pezh a ziskouez sklaer hag anat d’an holl engouestl micherel ha personel ar saverien saout laezh bio en ur raktres pouezus-kenañ evito. Al labourerien-douar a zo emskiantek dre vras eo ret dezho klask un hent nevez. An agroekologiezh eo an hentenn meulet, anaoudegezh an douaroù hag ar gounidoù evit produiñ muioc’h en ur zoujañ an endro. Lod a fellfe dezho mont war hent ur gwall cheñchamant, ul labour-douar gant nebeutoc’h enkasoù ha muioc’h a dud labour¹⁸⁶.

Gwareziñ an endro a zo ur pal kreñv evit strollad geotegek bio Penn-ar-Bed gant sistemoù muioc’h-mui geotegek. En em c’houlenñ a ra izili ar strollad war plas ar gwez hag an « *Agroforesterie* » war o c’hêrioù da skouer. Ar strollad a zo un digarez mat evit arnodiñ ha tennañ splet eus skiant-prenet hiniennel hag a-stroll. Labourat a ra an izili evit kreñvaat al liamm « douar - plant - loen » en ur c’henarroud digresk uhel an enkasoù¹⁸⁷.

Diwar neuze e ro lañs al labourerien-douar yaouank d’o raktres buhez : bevañ diouzh ar produiñ laezh bio en ur gontañ war ar brasañ peuriñ hag an nebeutañ enkasoù¹⁸⁸. Evit unan en o zouez dibab ar bio a zo un dibab etikel ha berr-ha-berr mont war-zu ar bio a zo un distro d’ar geot¹⁸⁹.

Lakaet e vez war wel gant ar broduerien ivez ur preder brasañ evit an endro dre ziagnostikoù *CAP’2ER*¹⁹⁰ evit keñveriañ dilaoskadennoù gaz efed ti-gwer ar c’hêrioù, da lâret eo skog o fleustroù war an hin¹⁹¹.

Ar pezh a cheñch a-grenn gant ar bio a-benn ar fin eo leuskel a-gostez ar gimiezh, pa vefe louzeier evit al loened pe enkasoù er parkeier. Ret eo klask un dra all, ha gouzout diarbenn peogwir n’eus rod-eskemm ebet¹⁹². Meur a abeg da zibab ar bio, dre ar pezh a zo bet lakaet war wel a-uc’h, met ret eo d’ar broduerien derc’hel kont eus redioù an treuzkemm war ar bio, da lâret eo talañ ouzh an nebeud daeoù. Emdroadur war ar bio ne rim ket gant un taol-prim ; an testeniekat labour-douar biologel a zo un argerzh hir ha figus. Niverus eo ar poentoù evezhiañs

¹⁸⁴ Quéré, A. *Ar saout hag ar vein*, Le Télégramme, Spered ar vro, 30/01/2020.

¹⁸⁵ Terra, *Comparaison bio et conventionnel : une étude nationale « Cedabio »* (Contributions environnementales et durabilité socio-économique des élevages en agriculture biologique), 08/03/2013.

¹⁸⁶ Limantour, F. *L’agriculture bretonne cherche une nouvelle voie*, op. cit.

¹⁸⁷ Terra, *L’effet groupe, l’effet gagnant*, op. cit.

¹⁸⁸ Terra, *L’effet groupe, l’effet gagnant*, op. cit.

¹⁸⁹ Larvor, R. *Produire bio. Le bon moment à Cosquer Vian*, op. cit.

¹⁹⁰ Calcul Automatisé des Performances Environnementales en Elevage des Ruminants.

¹⁹¹ Terra, *L’effet groupe, l’effet gagnant*, op. cit.

¹⁹² Le Poher, *Lait biologique : une vague de conversions sans précédent*, op. cit.

a-raok kavout e gempouez etre kaier ar c'hargoù da zoujañ, emren boued hag efedusted teknikel-hag-ekonomikel¹⁹³. Seul vui ma bad daou vloaz dibad prantad an emdroadur. Met strolladoù a zo evit ambroug pep stad eus an emdroadur hag ur stignad « *Pass'bio diagnostic* » pe « *Pass'bio suivi* » a zo arc'hantouet gant Rannvro Breizh. Daoust da se mont war-zu ar bio a zo muioc'h eget un emdroadur, un dispac'h eo¹⁹⁴.

Mont war-zu ar bio a zo evit gwir ur maread start peogwir eo ret arloañ kaier ar c'hargoù, prenañ hadoù bio, ober hep tretañ, asantiñ un digresk askorad¹⁹⁵. E-pad daou vloaz e vez heuliet ar redioù hep talvoudekaat al label. Start eo peogwir e vez nebeutoc'h laezh hep digresk ar c'hargoù war un dro¹⁹⁶. N'eo ket aes ober ur c'hammed war-raok met talvezout a ra ar boan a zisklêr berr-ha-berr ur produer. Ur bern goulennoù a zo (diaes eo merañ ar geot met gellout a reer deskiñ da skouer) ha pouezus-tre eo bezañ aliet mat¹⁹⁷.

Bet lakaet war wel eo da vat kenlabourat e pep lec'h evit a sell mennozhioù nevez al labourerien-douar ha youl greñv ul lodenn anezho da zibab ar bio, poent eo bremañ lakaat e berr ar palioù pouezusañ a fell dezho tizhout pa ouzer eo an testenikaat AB hir ha start¹⁹⁸.

Bez' e chom dibab ar bio muioc'h eget emdroadur ur sistem ; un dispac'h eo¹⁹⁹ ha gant cheñchamantoù krenn degaset gant ar mod bio ret eo gouzout diarbenn mat an traoù dre ma ne c'hall ket ar broduerien distreiñ diwar an hentenn nevez bet divizet ganto²⁰⁰

Kemeret ar pleg da vont war ar produiñ laezh bio e vo ret d'ar broduerien talañ ouzh un nebeud daeoù evit sevel ha diorren ar strategiezh uhelek « produiñ gwelloc'h ha gounit muioc'h en ur labourat nebeutoc'h » ma 'z eo posupl.

3.2 Talañ ouzh daeoù strategiezh produiñ al laezh bio

Strategiezh uhelek al laezh bio « produiñ gwelloc'h ha gounit muioc'h en ur labourat nebeutoc'h » a c'hell bezañ kaset war-raok en ur gemer e kont un nebeud arventennoù bet lakaet war wel a-uc'h.

Da gentañ penn eo ret d'ar c'hêrioù laezherezh ober hervez kaier kargoù al laezh bio evit o raktres, da lâret eo respont d'ar reolennoù bet lakaet war wel a-uc'h (tachennoù dindan an

¹⁹³ Terra, *Conversion bio ne rime pas avec improvisation, op. cit.*

¹⁹⁴ Terra, *Conversion bio ne rime pas avec improvisation, op. cit.*

¹⁹⁵ Le Télégramme, *Esquibio, Le Gaec passe en production bio, op. cit.*

¹⁹⁶ Le Télégramme, *Eau. Éclaircies entre l'Odet et l'Aven, op. cit.*

¹⁹⁷ Scohy, D. *Pâturage, vèlages groupés et monotraite - Témoignage F. Charles (22) : « Doubler le revenu en travaillant deux fois moins »*. <https://www.web-agri.fr/reportages-elevage/article/152324/temoignage-fabrice-charles-22-paturage-monotraite-et-velages-groupes> (Consulté le 10/03/2021).

¹⁹⁸ Terra, *Conversion bio ne rime pas avec improvisation, op. cit.*

¹⁹⁹ Terra, *Conversion bio ne rime pas avec improvisation, op. cit.*

²⁰⁰ Le Poher, *Lait biologique : une vague de conversions sans précédent, op. cit. .*

amzer, batimantoù, pleustroù sevel saout, magadur, prederioù mezegele-loened). Ouzhpenn-se, delc'her a reont kont eus tri arventenn all²⁰¹ :

- war an dachenn ekonomikel : gwarantiñ ul live korvoder dereat en ur deurel evezh e vefe mestroniet ar c'houstoù produiñ,
- war an tachenn sokial : digreskiñ pe ingalañ gwelloc'h ar c'harg labour a-hed ar bloaz evit gwellaat kalite ar vuhez ha kaout amzer vak evit ar familh,
- war tachenn an endro : harpañ ur sistem produiñ en ur zoujañ an endro hag an douar (harpañ ar vevliesseurted, ar stokañ karbon hag ar pleustroù frank evit digreskiñ tommadur an hin²⁰²) gant ar pal gwareziñ an danvezioù naturel evit ar remziadoù da zont²⁰³.

A-benn ar fin strategiezh raktres ar produiñ laezh bio a c'hell bezañ diverret dre dri dae pennañ da dalañ outo.

3.2.1 An tri dae pennañ da dalañ outo

Dre an arventennoù liesseurt-se e fell d'ar broduerien en em zishualañ, bezañ muioc'h obererien eus o buhez vicherel ha personnel (da lâret eo adkavout muioc'h emrenerezh evit divizout ha merañ hag adkavout entan ar vicher), arnodiñ, klask ha rannañ neveziñ hag efedusted, adijinañ aozioù labour ha kas war-raok ekonomiezh hag ekologiezh.

Kement-se a vo disklêriet dre an tri dae pennañ-mañ :

- krouiñ talvoudegezh dre an disheñvelidigezh,
- ober diouzh ur sistem « *low cost* »,
- kas an endro hag an endro bevañ war-raok.

Studiet e vo pep dae en un doare distag en ur lakaat war wel pa vo ret al liammoù a zo etrezo.

3.2.2 Krouiñ talvoudegezh dre an disheñvelidigezh

Ret eo disklêriañ un nebeud meizadoù strategel dre vras diwar-benn ar strategiezhioù hag ar c'hrouiñ talvoudegezh a-raok mont donoc'h war tachenn strategiezh al laezh bio.

Hervez Michael Porter²⁰⁴ n'eus nemet div strategiezh c'henerek pennañ disheñvel evit an embregerezhioù diouzh an doare e vez savet ar splet kevezel ganto : ur strategiezh mestroniezh dre ar ch'oustoù hag ur strategiezh diforc'hus.

²⁰¹ Capbio-Bretagne, *Dans le Finistère, le groupe d'échange : un fantastique outil de progrès*, op. cit.

²⁰² Bignon, E. « *Le sol et l'herbe sont les moteurs de notre système* », RéussirLait n° 324, mai/2018.

²⁰³ A2C, *Est-il possible de bien vivre en production laitière ?* op. cit.

²⁰⁴ Meneget en « Garibaldi, G. *Stratégie concurrentielle, Choisir et gagner*, Les Éd. D'Organisation, Paris, 1996 ».

En ur strategiezh mestroniezh dre ar c'houstoù e vez produet ur produ izelloc'h e goust eget hini ar gevezerien all ha kinniget e vez marc'hadmatoc'h²⁰⁵ (splet kevezel dre goustoù izelloc'h).

En ur strategiezh diforc'hus e vez merzet gant ar c'hliant eo stag ouzh produioù pe servijoù an embregerezh dezverkoù dibar a asant da baeañ keroc'h²⁰⁶ (splet kevezel dre zezverk dibar ar c'hinnig merzet gant ar c'hliant).

War an tem-se, sevel dezverkoù produiñ rik evit disheñvelaat ouzh al laezh kustum (difrae ar broduerien bio) a denn d'un hentenn e c'hell al labourerien-douar degemer²⁰⁷.

An embregerezhioù a vez strategiezhioù diforc'hus ganto a ziskouez peurliesañ un dilañs war tachenn ar c'houstoù, met spletus int koulskoude dre fealded kreñvoc'h o c'hlianted hag o asant da baeañ ur priz uhelloc'h, kuit dezho da ober gant digresk ar c'houstoù evit ul lodenn²⁰⁸. Bez' ez eo hentenn ar broduerien laezh bio ivez ? Ne c'heller ket respont d'ar c'houlenn-se da vat hep displegañ un nebeudig ar meizad krouiñ talvoudegezh. Evit an darempred kenwerzhel gant ar pratikoù e komzer eus krouiñ talvoudegezh evit ar c'hliant, ar pezh a dalvez kinnig dezhañ ur c'halite merzet eus ar c'hentañ evit ur priz poellek²⁰⁹.

Evit an embregerezhioù e vez muzuliet an dalvoudegezh dre o savadoù hollek a zeu eus ur priz gwerzhañ dre un niver unvezioù gwerzhel Ma eo an dalvoudegezh-se uhelloc'h eget ar c'houstoù, eo an embregerezh neuze en ur stad buzadek hag an diforc'h a ziskouez ar marz Abalamour da se eo ret kemer e kont an dalvoudegezh termenet evel-se hag ar c'houstoù evit dielfennañ kevezusted an embregerezh²¹⁰.

Da lâret eo krouiñ talvoudegezh evit ar glianted ne dalv ket ma n'eo ket ar bevezer evezhiek ouzh ar c'halite hag ar priz war un dro²¹¹.

Setu perak eo ar c'houblad « koust - talvoudegezh » un elfenn diazez anezhi eus strategiezh uhelek ar c'hêrioù laezherezh bio bet anvet amañ « produiñ gwelloc'h ha gounit muioc'h en ur labourat nebeutoc'h ». Seul vui ma eo al laezh hag ar boued-laezh produioù a galite mezhurel mat (kalz a galkiom enno²¹²) en desped d'an dalc'hoù a vez savet evit a sell outo²¹³. Ha peogwir

²⁰⁵ Dervillé, M. (Sous la coordination de), *Comment peut se construire la compétitivité des exploitations laitières aujourd'hui ?* (Projet Competlait), Rapport Décembre 2018.

²⁰⁶ Dervillé, M. *Comment peut se construire la compétitivité des exploitations laitières aujourd'hui ? op. cit.*

²⁰⁷ Dervillé, M. *Comment peut se construire la compétitivité des exploitations laitières aujourd'hui ? op. cit.*

²⁰⁸ Dervillé, M. *Comment peut se construire la compétitivité des exploitations laitières aujourd'hui ? op. cit.*

²⁰⁹ Meneget en « Montebello, M. *Stratégie de création de valeur pour le client*, Economica, Paris 2003 ».

²¹⁰ Garibaldi, G. *Stratégie concurrentielle, Choisir et gagner, op. cit.*

²¹¹ Reynaud, E. *La création de valeur en stratégie*, Revue Française de gestion, 2009/6 n° 196, pages 107 à 111.

²¹² *Savoir laitier, L'importance du lait et des produits laitiers comme sources fiables de calcium.* www.savoirlaitier.ca/nutriments-laitiers/le-calcium/l-importance-du-lait-et-des-produits-laitiers-comme-sources-fiables-de-calcium (Consulté le 04/05/201).

²¹³ Mulo, R. *Les produits laitiers, « nos amis pour la vie » ?* Science et Avenir Santé, 29/03/2015. https://www.sciencesetavenir.fr/sante/les-produits-laitiers-nos-amis-pour-la-vie_27560 (Consulté le 04/05/201).

e kemer perzh ar produioù-se en diazez bevañs ar vevezerien n'eo ket prest ar re-mañ da baeañ forzh peseurt priz.

Penaos gwareziñ diwar neuze ar prizioù ha, war un dro, digresk produiñ ar c'hêrioù laezh bio a c'hell bezañ tro-dro 30 % (evel meneget a-uc'h p. 35).

Se a zo kaoz e vo studiet da gentañ penn an doareoù diseurt da grouiñ talvoudegezh -diwar al laezh « produ izel e werzh ouzhpenn²¹⁴ »- evit ar glianted hag ar c'hêrioù laezherezh en ur gregiñ gant an disheñvelaat diwar kaier kargoù al laezh bio. Diwar se e vez krouiet talvoudegezh evit ar bevezer ; met evit ar gêr laezherezh e vez krouiet (dre ur priz uheloc'h) ha distrujet (dre ur c'hementad laezh dre vuoc'h izeloc'h) talvoudegezh war un dro. En doare ma eo ret d'ar c'hêrioù laezherezh bio produiñ gwelloc'h, da lâret eo ober diouzh ur sistem « *low cost* » (evel displeget dindan p. 49).

Setu, penaos krouiñ talvoudegezh evit ar bevezer hag ar marc'had. Disklêriet eo bet a-uc'h e zouj al laezh bio ur c'haier ar c'hargoù resis-tre ha testeniekaet eo gant ul label biologel roet gant un aozadur grataet. Evel-se eo diazezet an dezverkoù a warrant ul laezh bio war al loen (ar ouenn), ar pezh a zebr (boued biologel diwar geot hag ed gounezet hep OGK, hep temz kimiek pe zanvez sintetek ouzhpenn) hag e endro bevañ (sevel loened ezdouar difennet²¹⁵, aoziou yec'hedel, aveladur kraou ar saout, peuriñ, mezegiezh dazeilat,...). Da lâret eo un tu kreñv evit ar vevezerien, al loened.... hag ar blanedenn²¹⁶.

Kement-se a laka war wel eo bilañs yec'hedel al laezh bio gwelloc'h eget hini al laezh kustum, ar pezh a dalvez evit ar vevezerien eo al laezh hag ar boued-laezh produioù a c'halite merzet ganto eus ar c'hentañ evit ar yec'hed... hag evit ar blanedenn. Hag an dalc'h a zo : pegement bennak ouzhpenn eo prest ar vevezerien da zispign evit laezh ha boued-laezh bio²¹⁷ ?

Bez' ez eus tu gant an dazrann marc'had a ya da-heul da vont war ziorren pe deuet eo d'e vent ?

Evit lod, ne vefe ket gouest ar marc'had bio koulskoude, leun a lusk ennañ, da zegemer kresk trumm ar produiñ laezh bio²¹⁸. Ar produiñ boas a c'hell kemer skouer diwar ar bio moarvat, da lâret eo paouez redek war-lerc'h ar c'hementad²¹⁹. Aon o deus lod all, daoust d'ur gortoz kevredigezhel nevez, e vefe distabilaet ar marc'had pa erruo ar produiñ laezh bio nevez savet ;

²¹⁴ Scaglia, O. *Vachettes gabérisiennes : du lait en vente directe*, Le Télégramme, 06/06/201.

²¹⁵ Guyot, V. *Lait réussir le passage en bio*, La France Agricole, *op. cit.* p. 49.

²¹⁶ Izané, L. *Le lait bio, un véritable gage de qualité ?* 20/06/2019. <https://www.cuisineaz.com/articles/le-lait-bio-un-veritable-gage-de-qualite-2912.aspx> (Consulté le 05/05/2021).

²¹⁷ Izané, L. *Le lait bio, un véritable gage de qualité ? op. cit.*

²¹⁸ Clément C. « *Trop de bio tue le bio* », *un risque en lait*, Web-agri, Paroles de lecteurs, 05/11/2021. <https://www.web-agri.fr/les-forumeurs-en-parlent/article/202931/paroles-de-lecteurs-trop-de-bio-tue-le-bio-un-risque-en-lait> (Consulté le 23/01/2022).

²¹⁹ Le Borgne, J. S. *Pichonet : Son avenir est dans le pré*, *op. cit.*

ret eo klask ur c'hempouez etre ar c'hinnig hag ar goulenn. Ma teufe c'hoant d'an holl vevezerien da gaout laezh bio, an holl broduerien a rafe laezh bio neuze²²⁰.

Met, hervez meur a c'hourstal eo gwer ar merkoù evit an estajerenn bio²²¹. Bez' ez eus ur goulenn war gresk evit ar bio met ret eo e chomfe ar priz da glotañ gant galloud-prenañ ar vevezerien. Prest eo ar glianted da baeañ ar c'halite dre ma ne vefe ket re uhel ar prizioù²²². Eus e du, e kred un dastumer-treuzfurmer en diorren ar bio ha lakaat a ra da dalvezout ar servijoù ret evit heuliañ e broduerien war an dachenn teknikel-hag-ekonomikel. Kreñv eo ivez evitañ ar goulenn bio war marc'hadoù ezporzhiañ en Azia dreist-holl²²³.

Koulskoude eo ar bio (laezh ha produioù laezh) ul log-marc'had ha ret eo e chomfe er memes live ha diwall da zegas kudenn al laezh kustum war al laezh bio²²⁴.

Berr-ha-berr e vesk ar bevezer « goulenner talvoudegezh » ur gizidigezh brasoc'h evit ar c'halite hag ur gizidigezh uheloc'h evit ar priz²²⁵. War ar memes mod e vesk ar gêr laezherezh krouiñ talvoudegezh (dre ur priz uheloc'h) ha distruj talvoudegezh (dre ur c'hementad laezh dre vuoc'h izeloc'h), ar pezh a vo displeget bremañ.

Diwar-benn an distruj talvoudegezh e c'heller lavarout e tigrask ar c'hementad laezh produet er c'hêrioù testenikaet AB eus 8 %, da lâret eo 20 000 l nebeutoc'h dre unvezh a dud labour²²⁶. Met, evit lod all eo kalz izeloc'h ar produiñ gant un digresk tro-dro 30 % goude bezañ aet war-zu al laezh bio²²⁷.

Setu perak eo talvoudekaat al laezh pe ar produioù aozet war al lec'h gantañ diouzh ar gwellañ ar goulenn a bouez a sav d'ar broduerien laezh bio. Priz gwerzhañ al laezh a zo mammenn gentañ talvoudegezh evit ar broduerien.

Disklêriañ a ra ur produer laezh bio n'eus nemet al labourerien-douar n'int ket mistri war o frizioù²²⁸. Anavezet mat eo ar gudenn-se ha savet eo bet al lezenn *EGalim* evit ma vefe dalc'het kont eus priz koust produioù al labour-douar (s.o. p.15). Diaes eo lakaat al lezenn da dalvezout betek-henn war a seblant. Ouzhpenn-se e rank ar broduerien ober gant neuennadoù prizioù al laezh boas pa chomont ingal war tachenn ar produiñ bio²²⁹. Evel-se e c'hell ar broduerien laezh bio stabilaat o gounidoù ha bevañ en un doare dereatoc'h diwar o froduerezh.

²²⁰ Le Poher, *Lait biologique : une vague de conversions sans précédent*, op. cit.

²²¹ Le Poher, *Lait biologique : une vague de conversions sans précédent*, op. cit.

²²² Le Poher, *Lait biologique : une vague de conversions sans précédent*, op. cit. .

²²³ Le Poher, *Lait biologique : une vague de conversions sans précédent*, op. cit.

²²⁴ Le Poher, *Lait biologique : une vague de conversions sans précédent*, op. cit.

²²⁵ Reynaud, E. *La création de valeur en stratégie*, Revue Française de gestion, op. cit. p. 107.

²²⁶ Terra, *Comparaison bio et conventionnel : une étude nationale « Cedabio »*, op. cit.

²²⁷ Le Poher, *Lait biologique : une vague de conversions sans précédent*, op. cit.

²²⁸ Moëlo S. ha Stervinou M. *Produerien laezh bio*, Le Télégramme, Spered ar vro, 24/03/2016.

²²⁹ Terra, *Comparaison bio et conventionnel : une étude nationale « Cedabio »*, op. cit.

Hag ouzhpenn bezañ ingal e briz, gwerzhet e vez al laezh bio 30 % keroc'h eget ar memes produ nann-bio²³⁰. Evit ur produer all eo an diferañs brasoc'h c'hoazh : etre 280 ha 290 €/1 000 l evit al laezh boas hag etre 420 ha 430 €/1 000 l evit al laezh bio, da lâret eo tost da 50 % muioc'h evit al laezh bio²³¹. Ar brasoc'h diforc'h-mañ a c'hell dont eus kenaoz al laezh bio evit ul lodenn ivez marteze, peogwir eo al lezh bio fonnusoc'h e zanvezioù talvoudus (danvezenn druz, protein) peurliesañ. Evit unan all c'hoazh eo talvoudekaet gwelloc'h al laezh bio eget al laezh kustum : tro-dro 150 €/1 000 l²³², ar pezh a glot gant diferañs ar priz diaraok.

Un doare da c'hrouiñ talvoudegezh evit ar c'hêrioù laezh bio eo priz an danvez laezh diaoz evel-just. Diorren ur strategiezh enframmanñ a-blom a zo un doare all da c'hrouiñ talvoudegezh evit ar c'hêrioù laezh bio en ur ober laezh beveziñ ha boued-laezh war al lec'h diwar an danvez diaoz produet (s.o. dindan p. 45 ha 46). Er mod-se e zalc'h ar c'hêrioù laezherezh muioc'h a c'hontroll war chadenn grouiñ talvoudegezh al laezh adalek ar produiñ betek ar gwerzhañ.

Met, mont war-zu ar bio a zo ivez un digarez evit ar broduerien laezh bio da vestroniañ gwelloc'h talvoudekaet al laezh bio kuit da cheñch dastumer laezh -pa eo posupl- pe da vont da gavout aozadurioù produerien²³³ (broudet kreñv gant ar gouarnamant abaoe breujoù bevañs *-États Généraux de l'Alimentation-* evit kreñvaat barregezh kevraouiñ ar broduerien labour-douar), Biolait da skouer. Evel-se, ur produer en deus dibabet kenwerzhelañ e laezh da v/Biolait, ur gevredigezh produerien hag a zastum un drederenn eus al laezh bio broadel, ar pezh a bouez war kinnig ha priz ar produ kinniget d'al laezherezhioù²³⁴. Muioc'h a emrenerezh a zo bet kinniget dezhañ gant Biolait ouzhpenn. Ur produer all a blij dezhañ bezañ dibabet Biolait ivez gant an termenou-mañ : « Dieuboc'h omp, goût a reomp pep tra, ar prizioù, pep hini en deus ur vouezh, a c'hell lavar e soñj. Evel ur gevredigezh eo »²³⁵. War ar memes mod, e c'heller spisaat eo bet lañset ar merk laezh reizh « FaireFrance »²³⁶ gant ur strollad 500 produer laezh e 2013 (da lâret eo goude enkadenn al laezh 2009) evit degas goprou reizh d'ar broduerien. Gwarantet e vez d'ar broduerien ur priz 0,45 € dre litrad (dek santim euro ouzhpenn ar rouedadoù dasparzhañ klasel). Ouzhpenn laezh, dienn, e vez kinniget amann reizh bremañ d'ar vevezerien²³⁷. A-hend-all kenlabourat a ra ar strollad gant Biolait evit al laezh bio.

²³⁰ Ouest-France, *Remise des trophées de l'agro-écologie*, 13/07/2019.

²³¹ Moëlo S. ha Stervinou M. *Produerien laezh bio*, Le Télégramme, Spered ar vro, *op. cit.*

²³² Le Poher, *Lait biologique : une vague de conversions sans précédent*, *op. cit.*

²³³ Guyot, V. *Lait réussir le passage en bio*, La France Agricole, p. 51, *op. cit.*

²³⁴ Larvor, R. *Produire bio. Le bon moment à Cosquer Vian*, *op. cit.*

²³⁵ Moëlo S. ha Stervinou M. *Produerien laezh bio*, Le Télégramme, Spered ar vro, *op. cit.*

²³⁶ Lupieri, S. *FaireFrance : quand les producteurs lancent leur marque de lait*. Les Echos, 07/02/2020. <https://www.lesechos.fr/industrie-services/conso-distribution/fairefrance-quand-les-producteurs-lancent-leur-marque-de-lait-1169873> (Consulté le 01/03/2021).

²³⁷ Violette, C. *Après le lait, Faire France sort son beurre équitable*, Ouest-France, 17/10/2020. <https://www.ouest-france.fr/economie/agriculture/apres-le-lait-faire-france-sort-son-beurre-equitable-7018939#> (Consulté le 01/03/2021).

Kenwerzhelañ al laezh bio d'un dastumer ha treuzfurmer pe d'un aozadur produerien a zo un doare kentañ pouezus da grouiñ talvoudegezh evit ar broduerien. Un doare all a zo evit lod anezho da ober laezh beveziñ ha boued-laezh war al lec'h diwar an holl pe ul lodenn eus an danvez diaoz ha da lakaat ar produioù e gwerzh war-eeun er gêr pe e stalioù dre zasparzherien. Ha bez' ez eus diskoulmoù all c'hoazh. Setu meur a zoare da grouiñ talvoudegezh estreget kaier kargoù al laezh bio evit ar c'hêrioù laezherezh, ar pezh a vo studiet amañ dindan.

Adc'hounit talvoudegezh, klask muioc'h a werzh ouzhpennet a zo un tem dezverkus muic'h-mui difennet evit ar filieren laezherezh, en ur treuzfeurmiñ al laezh e boued-laezh pe en ur lakaat da dalvezout difraeoù all. Sevel a ra ul luskad nevez da rannañ ar marc'had. Evit respont d'ar c'hoantoù kevredigezhel, lakaat a ra ar broduerien difraeoù evit disheñvelaat ar produioù (saout maget hep OGM, hep eoul palmez, laezh izelgarbon kalz a omega 3 ennañ...)²³⁸.

Dre ma ne vo ket an tropelloù brasoc'h an dazont evit ar produiñ laezh eo ret adkavout gwerzh ouzhpennet a zisklkêri Prezidant Kambr al labour-douar Penn-ar-Bed, Jean-Hervé Caugant²³⁹. Klask gwerzh ouzhpennet brasoc'h a zo ivez unan eus luskerioù an treuzkemm ekologel. « Dre ma kresk ar goprou e vo buanaet an treuzkemm » a istim Prezidant Kambr al labour-douar Penn-ar-Bed ha produer laezh²⁴⁰.

Evit produerien a zo krouiñ talvoudegezh a dremen dre implij an danvez diaoz war al lec'h evit aozañ laezh beveziñ ha boued-laezh. Ar broduerien a glask priz goprou uheloc'h evit o froduiñ laezh evit ma vefe o c'hêrioù spletusoc'hch dre sevel fourmajoù da skouer²⁴¹ pe laezh, amann, koñfitor laezh²⁴². Unan anezho a zo aet ur bazenn nevez war-raok e 2011 en ur grouiñ un atalier pleuskañ (evit fardañ yaourt) en e gêr gant ar c'hoant da dalvoudekaat ur produ a galite : al laezh. Ar c'halite-se a vez kavet, hervezañ, en douar, e-barzh ar plant, al loen hag er produioù aozet a zo ar yaourtoù²⁴³. Gwerzh war-eeun a zo ivez unan eus loc'henoù implijet gant al labourerien-douar evit adkavout gwerzh ouzhpennet²⁴⁴. Setu boued-laezh biologel pe gustum lakaet e gwerzh war-eeun er gêr²⁴⁵. Ur produer laezh bio all hag a dreuzfurm an darn vrasañ eus e laezh er gêr en deus divizet fardañ yaourtoù izelgarbon ha menegiñ o louc'h karbon war ar

²³⁸ Le Gall, F. *Le lait coule à flots d'Armor en Argoat*, Le Télégramme, Bretagne 2020, 15/04/2020.

²³⁹ Le Borgne, J. S. *Pichonet : Son avenir est dans le pré*, op. cit.

²⁴⁰ Le Borgne, J. *Les défis de l'agriculture bretonne*, op. cit.

²⁴¹ Le Borgne, J. S. *Pichonet : Son avenir est dans le pré*, op. cit.

²⁴² Le Télégramme - Châteaulin, *Fête du lait bio : un goûter et une visite à la ferme des Pâtureurs du Tonnerre*, 11/09/2020.

²⁴³ André, A. *Jean-René Cotten / « Les oiseaux se cachent pour mourir »*, Parchemins, op. cit.

²⁴⁴ Le Borgne, J. *Les défis de l'agriculture bretonne*, op. cit.

²⁴⁵ Le Télégramme - Quimper, *Briec. Un laboratoire dans un ancien poulailler*, 22/05/2010. <https://www.letelegramme.fr/local/finistere-sud/quimper/ville/briec-un-laboratoire-dans-un-ancien-poulailler-22-05-2010-926042.php> (Consulté le 24/02/2020).

podoù (tost da 25 % nebeutoc'h eget ur yaourt industriel)²⁴⁶. An intrudu eus ar rouedad « *Invitation à la ferme* » gant skoazell an AAEME²⁴⁷ eo evit kinnig ul « *laitcolo-score* ».

Paeet e vez al laezh d'ar broduerien diwar ur priz diazez, ur priz standart 38/32 (38 gramm danvezenn druz dre litrad ha 32 gramm protein dre litrad ; danvez talvoudus a vez anvet an div elfenn-se), da lâret eo pep kementad danvez talvoudus ouzhpenn a grou muioc'h a werzh ouzhpennet evit ar broduerien. Pal ar broduerien a zo da broduiñ eta ul laezh kalz a zanvezioù talvoudus ennañ, da lâret eo ar muiañ a c'hilogrammad danvez talvoudus evit gwellekaat kengreadur laezh ar gêr²⁴⁸.

Evit tizhout al pal-se eo bet erlec'hiet gant produerien a zo ar saout a ouenn Holstein gant gouennoù Jerze, Brizh-du ha gouennoù berlañchet. Ar gouennoù-se a zo brudet mat evit puilhed dienn o laezh hag evit o c'hig fin²⁴⁹. Klasket e vez ivez gouennoù gant kaliteoù diennek hag amannek kadarnaet : buoc'h velen Bro-Leon ha buoc'h Werne. Gouennoù e vez posupl ganto talvoudekaat al laezh digant an treuzfurmieren lec'hel. Ar vuoc'h Werne he deus ar perzh dibar ouzhpenn da broduiñ laezh stank e « *béta-caseines de type A2* » treizhusoc'h ha hep degas allergiezh²⁵⁰.

Evel-se, e c'hell bezañ tizhet an disoc'hoù-mañ. Produet e vez 3 400 l laezh ar vloaz gant ar saout, danvezioù talvoudus uhel el laezh a-drugarez da feurioù uhel e zanvezenn druz (65 g dre litrad) ha proteek (45 g dre litrad). Ouzhpenn kalite al laezh, frouezhusted ha hirhoal a zo ivez atoudoù ar gouennoù-se. En ur zalc'her kont eus an elfennoù-se eo bet priz al laezh 595 € / 1 000 l e 2017, savet pouez an danvez druz hag ar protein ennañ da 81 € / 1 000 l²⁵¹.

Bez' ez eus tuioù all evit mont pelloc'h diwar-benn kalite al laezh hag elfennoù a zo deuet da vezañ a-hed an amzer arouezioù yec'hedel pe endroel. Ha klask a ra ar broduerien difraeoù all evit disheñvelaat al laezh pe ar boued-laezh. Evel-se e c'heller degouezhout gant ur producer laezh bio a galite testeniet « *Bleu Blanc Cœur* » ha pinvidik en « *Oméga 3* »²⁵². Gouestlañ a ra ar gevredigezh *Bleu Blanc Cœur*, bet krouiet e 2000, da gas ul labour-douar yac'hoc'h war-raok, en ur wellaat talvoudegezh vevhurel ar boued loened en « *Oméga 3* » evit o yec'hed hag hon hini. Meur a zanevell savet gant skiantourien o deus diskouezet ul liamm etre ar boued loened hag ar boued²⁵³. Pal ar gevredigezh a zo da ginnig d'ar muiañ-niver ur boued en un doare

²⁴⁶ Le Borgne, J. *L'éleveur produit des yaourts bas carbone*, Le Télégramme Économie, 13/04/2021.

²⁴⁷ Ajañs an endro ha mestroni an energiezh (ADEME : Agence de l'environnement et de la maîtrise en énergie).

²⁴⁸ Institut Élevage, *Réflexion globale et combinaison de techniques originales pour un système autonome*, op. cit.

²⁴⁹ L'Haridon, L. *La viande bio celtique*, Le Télégramme, op. cit.

²⁵⁰ Institut Élevage, *Réflexion globale et combinaison de techniques originales pour un système autonome*, op. cit.

²⁵¹ Réseaux d'élevage, *Organiser son travail pour se procurer du temps libre*, 2018, op. cit.

²⁵² Ferme de Kerheu, *Produits laitiers fermiers, Vente directe aux particuliers*. <http://www.farmedekerheu.com/> (Consulté le 24/02/2020).

²⁵³ Aqualeha, *Bleu Blanc Cœur, le label du bien manger*. <https://aqualeha.com/bleu-blanc-coeur-le-label-du-bien-manger/> (Consulté le 30/03/2021).

kempouesoc'h en *Omega 3*, lipid hollbouezus evit hor yec'hed. En ur lakaat en-dro greun lin ha spesadoù plant all enno kalz a *Omega 3*, evel ar geot pe al luzern e boued al loened, e vez aozet produioù a galite vezhurel kempouesoc'h²⁵⁴.

Al laezh stank e « *béta-caseines de type A2* » treizhusoc'h ha hep degas allergiezh meneget a-uc'h a zo ur skouer all lakaet e pleustr gant ur produer evit disheñvelaat al laezh. Unan all c'hoazh a zo troet war ur produ anvet « laezh foenn ». Kaoz a zo bet anezhañ en un abadenn skinwel « *E=M6 - Spécial agriculture : les secrets de nos aliments* » skignet war ar skinwel d'ar 1añ a viz Meurzh 2021. Anavezet eo al « laezh foenn » abaoe miz Meurzh 2016 evel un dibarded hengounel gwarantet²⁵⁵ anavezet gant Unaniezh Europa²⁵⁶. An anvadur-se a ra dave da voued al loened laezherezh ha testeniekaet eo ar boued loened hep *OGM* hag a zo ennañ 75 % geot pe foenn. 70 produer laezh-buoc'h a zo testeniekaet « *STG Laezh foenn* » e Frañs hiziv an deiz²⁵⁷

Meur a zoare da zisheñvelaat ar produiñ laezh ha boued-laezh a-benn ar fin gant ma vo kaliteoù ar produioù merzet gant ar bevezer ha gant ma vo prest da baeañ anezho.

Met ouzhpenn krouiñ talvoudegezh gant an danvez diaoz meur a embregerezh a gav diskoulmoù evit kreñvaat e gorvoderioù. Lies a-walc'h eo bet gounidoù embregerezhioù a zo diazezet war postadennoù arc'hant da skouer. War ar memes mod, eo diazezet gounidoù ar c'hêrioù laezherezh war mammennoù all e diavaez d'o micher pennañ dre ar gwerzhañ loened (eilproduioù, koulz lavaret) hag ar skoazelloù arc'hant evit mont en-dro ar gêr laezherezh bio.

Da gentañ penn e vez pratenned ha leueioù da werzhañ er c'hêrioù laezherezh ar pezh a zegas ur c'horvoder ouzhpenn d'ar broduerien laezh. Krouiet e vez talvoudegezh evel-se dre genbrodu kig ar gwerzhañ loened. Ar saverien saout laezh a nevesa o zropell en ur zizonañ annoared bep bloaz ha sevel a reont anezho evit halañ da 24 miz. Feur an nevesaat a rank bezañ dereat evit koshadur an tropell ha kaout un hirhoal a-zoare evit ar saout. Ar pal eo tizhout 6 laezherezh well-wazh evit an annoared deuet da vezañ perzh eus an tropell²⁵⁸.

Al leueioù par diouzh un tu hag al leueioù parezel n'int ket dalc'het war ar gêr evit dont da vezañ annoared evel ar pratenned diouzh un tu all a vez gwerzhet ivez evel-just evit kaout ur produ kig dedennus evel korvoder ouzhpenn. Evit krouiñ talvoudegezh eo bet erlec'hiet gant produerien a zo ar saout a ouenn Holstein gant gouennoù Jerze, Brizh-du ha gouennoù

²⁵⁴ Aqualeha, *Bleu Blanc Cœur, le label du bien manger, op. cit.*

²⁵⁵ Spécialité traditionnelle garantie (STG).

²⁵⁶ Lait de foin, *Focus sur la Spécialité Traditionnelle Garantie (STG)*. <https://www.laitdefoin.fr/lait-de-foin/la-stg/> (Consulté le 04/03/2021).

²⁵⁷ Ministère de l'Agriculture et de l'Alimentation, « *Qu'est-ce que la STG « Lait de Foin » ?* » <https://agriculture.gouv.fr/quest-ce-que-la-stg-lait-de-foin> (Consulté le 04/03/2021).

²⁵⁸ Réseaux d'élevage, *Organiser son travail pour se procurer du temps libre, 2018, op. cit.*

berlañchet ; gouennoù a zo brudet mat evit puilhenn dienn o laezh hag evit o c'hig fin evel eo bet lakaet war wel a-uc'h (s.o. p. 46). Evit ur produer e zegas evel-se talvoudekaat mat al loened-saout eus an tropell un dedaolad kig dedennus eus 112 €/1 000 l²⁵⁹. Ur produer all a ra eus kalite al laezh ha kenprodu ar c'hig tu-kreñv e gêr²⁶⁰. War tachenn an ekonomiezh e fell d'ar broduerien kenderc'hel da glask gwerzh ouzhpennet er laezh hag er c'hig dre vras²⁶¹. Met dedaolad an atalier laezh a zo diazezet ivez war skoazelloù arc'hant evit ar produiñ laezh bio. Ur mod all da grouiñ talvoudegezh dre skoazelloù arc'hant gouestlet d'ar bio.

Ouzhpenn skoazelloù evit staliadur al labourerien-douar yaouank ha mont war-zu al labour-douar biologel peseurt skoazelloù all (padus pe get) a c'hell ar broduerien laezh goulenn goude bezañ roet lañs d'al laezh biologel (skoaziadennoù PBLD²⁶² : plant, loened ha diouzh ar gorreadoù). Ret eo pouezañ ivez war ar fed e vo -hervez tredeogezhioù kentañ ministr al labour-douar, Julien Denormandie- cheñchamantoù a-bouez en dasparzh skoazelloù gall PBLD er c'houlzad 2023-2027 : steuziadur skoazelloù dibar d'al labour-douar bio evit al labourerien-douar emdroet war ar bio dija ha kreñvaat ar skoazelloù evit mont war-zu ar bio. Savet o deus al labourerien-douar bio o mouezh en ur vanifestiñ e Pariz d'an 3 a viz Even 2021 a-enep d'ar c'holl korvoder en dazont^{263,264}.

A-benn neuze e c'heller dielfennet talvoudegezh hollek ha marz kriz, da lâret eo gounidoù hollek, ar c'hêrioù laezherezh war-bouez ur gael lenn gentañ. Eus an holl vammennoù talvoudegezh bet lakaet war wel a-uc'h e vez savet gant ar broduerien ur marz kriz uheloc'h eget priz al laezh. Da lâret eo gwerzhañ ar pratenned hag al leueioù a c'holo ouzhpenn holl gargoù an oberiadennoù²⁶⁵.

Harpet eo an dielfennañ-se dre an daou skouer amañ dindan.

Skouer kentañ : priz al laezh = 513 € / 1 000 l ; marz kriz = 521 € / 1 000 l²⁶⁶.

Eil skouer : priz al laezh = 514 € / 1 000 l ; marz kriz = 564 € / 1 000 l²⁶⁷.

Mat eo tennañ ur marz kriz uheloc'h eget priz al laezh a-drugarez d'ar produ kig dreist-holl, met ret eo e vefe an holl c'hounidoù brasoc'h eget ar c'houstoù evit tizhout ur stad ekonomikel c'hounidek gant ur c'horvoder laosk uhel a-walc'h.

²⁵⁹ Institut Élevage, *Réflexion globale et combinaison de techniques originales pour un système autonome*, op. cit.

²⁶⁰ FIDOCL Conseil Elevage, *Gestion de l'exploitation : les repères économiques pour piloter son élevage*, <http://www.fidocl.fr/content/gestion-de-l'exploitation-les-reperes-economiques-pour-piloter-son-elevage> (Consulté le 15/02/2020).

²⁶¹ Institut Élevage, *Réflexion globale et combinaison de techniques originales pour un système autonome*, op. cit.

²⁶² Poliikerezh boutin al labour-douar (PAC : Politique agricole commune).

²⁶³ Le Borgne, J. *L'éleveur bio attend une Pac plus ambitieuse*, Le Télégramme Économie, 02/06/2021.

²⁶⁴ Le Télégramme, Économie, Et aussi, *À Paris, près de 300 manifestants contre la « bio à poil »*, 03/06/2021.

²⁶⁵ En o zouez : frejoù sevel loened, boued-chatal, medisin-loened.

²⁶⁶ Segrafo / Chambres d'agriculture de Bretagne, *GAEC de Kerdennet*, 2019.

²⁶⁷ L'Éleveur laitier, « *Être en bio low cost, c'est gagner plus et travailler moins* », op. cit.

Evit se eo ret d'ar brodurien n'eo ket hepken mestroniañ o c'houstoù met ober diouzh ur sistem « *low cost* », en ur zerc'hel soñj eo ar produiñ laezh bio dre vuoc'h un tamm mat nebeutoc'h eget ar produiñ laezh boas (zoken ma eo priz al laezh bio un tamm mat uheloc'h ivez).

3.2.3 Ober diouzh ur sistem « *low cost* »

Ur sistem « *low cost* » an hini eo a ra ar broduerien laezh bio gantañ evit gwellekaat o c'horvoderioù laosk.

Lies a-walc'h e vez liv an dispriz war an droienn-se. Soñjal a ra an dud n'eo ket ar pourchasoù servijoù eus ar c'hentañ pa vez graet dave d'an droienn « *low cost* ». Ar c'hontrol tout eo amañ²⁶⁸. Ober labourioù niverus ar gêr hep dispign re a arc'hant a dalvez lakaat war wel pegen dedennet eo ar brodueien laezh bio da ziazezañ ur sistem produiñ hag un doare d'ober war-dro an tropell disheñvel-bras diouzh an doareoù boas, da lâret eo « produiñ gwelloc'h » dre an div loc'henn pennañ-se eus chadenn talvoudegezh ar gêr laezherezh. Met da gentañ penn eo dav dezho mestroniañ ar font hag ar postadurioù.

Saverien saout a zo o deus da dalañ ouzh prizioù uhel ar font gant kalz a resteuler amprestoù²⁶⁹. Lod all o deus graet postadurioù evit mekanikoù arbennik²⁷⁰. Met n'eo ket an darn vrasañ anezho pa vez ret ober diouzh ur sistem « *low cost* ». Hervez e vez lâret gant unan anezho : peogwir n'omp ket mestr eus prizioù gwerzhañ hor produioù e rankomp gounit war ar pezh a vez prenet ganeomp eta. Ugent vloaz zo eo bet prenet an traktorioù met mont a reont en-dro c'hoazh²⁷¹. Pe gant unan all : hor c'hêr ne gas ket da hunvreal peogwir n'eus ket mekanikoù bras ken²⁷² ; met n'eus tec'hadenn war-raok ebet er patrom produiñ produadurour²⁷³.

Klasket e vez meur a ziskoulm gant ar broduerien evit dont a-benn da vestroniañ ar font hag ar postadurioù. Ar gwellañ degouezh eo pa vez treuzkaset ur gêr gant postadurioù traolet, dre ma n'eus ket ezhomm d'ober un endleadur nevez gant ar mod bio hervez ur produer²⁷⁴. Dibab ur gêr evit termeniñ ar prenamennoù diavaez a zo bet talvoudekaat ar savadurioù a zo anezho dija ha lakaat ul lodenn vras eus ar mekanikoù ha binviji e boutin gant al labourerien-douar amezeg dre ur « *CUMA* » (foenn, labour an douar)²⁷⁵.

²⁶⁸ Heñvelster eus « *Low risk* » eo an droienn « *Low cost* » evit ar saverien-loened zelandneveziat hervez Isabelle Pailler, kuzulierez war ar laezh bio ha kustum e Kambri rannvroel labour-douar Breizh.

²⁶⁹ Ouest-France, *Finistère. Pour nourrir ses vaches l'hiver, il a remplacé le soja par le lupin*, op. cit.

²⁷⁰ Ouest-France Quimper, *Les éleveurs de Prim'Holstein s'intéressent au bio*, 06/06/2017. <https://www.ouest-france.fr/bretagne/landudec-29710/les-eleveurs-de-prim-holstein-s-interessent-au-bio-5046287> (Consulté le 09/03/2020).

²⁷¹ Larvor, R. *De Ronan à Sébastien, transmission douce à Pluguffan*, Le Télégramme, 18/09/2020.

²⁷² Queillé, H. *Conversion : pourquoi ils ont choisi de passer au bio*, Le Télégramme Economie, 15/10/2020.

²⁷³ Larvor, R. *De Ronan à Sébastien, transmission douce à Pluguffan*, op. cit.

²⁷⁴ Larvor, R. *Produire bio. Le bon moment à Cosquer Vian*, op. cit.

²⁷⁵ Réseaux d'élevage - Chambre d'Agriculture et Institut de l'Élevage, *Des vaches productives en toute simplicité et efficacité*, 2018.

En degouezhioù all e c'hell ar broduerien tremen dre ar Safer²⁷⁶ da skouer, prenet ganti an douaroù dre ar portezañ font (da lâret eo prenadenn ampellet an douaroù gant hini a gemer penn ar gêr), e c'hellont termeniñ postadurioù ar staliadur pe an astennadur²⁷⁷.

Goude bezañ lakaet war wel an hentennoù pennañ a glask heuliañ ar broduerien evit termeniñ o fostadurioù e vo displeget ar sistem produiñ -disheñvel-bras diouzh an doareoù boas- diorret ganto, a goustoù izel ivez evel-just.

Ar pennad-mañ a zo gouestlet d'ar magañ saout-laezh ha d'ar mod e klask ar broduerien mont war emrenrezh boued an atalier laezh dreist-holl. Pouezus-kenañ eo evel ma vo gwelet un tammig pelloc'h, met mat eo degas da soñj a-raok eus dezverk ar spesad saout a zo geotdebrer.

Setu perak e vo sellet ouzh ar vuoc'h evel uzin-treuzfurmiñ gounit plant e laezh koulz lavaret. A-drugarez d'he sistem koazhañ e vez treuzfurmet ar geot e boued gant ar vuoc'h²⁷⁸. Da lavaret eo, talvoudekaet e vez ar gounit plant e laezh gant uzin-treuzfurmiñ eo ar vuoc'h-laezh²⁷⁹. Al liamm-se etre magadur ha produiñ laezh ar vuoc'h a zo skeudennaouet brav-tre gant P. Mellouët²⁸⁰ dre un dresadenn hag e zisklêriadur « *Dre ar penn e vez goroet ar vuoc'h*²⁸¹ ».

Diwar neuze, klask treuzfurmiñ ur geotdebrer en ur greundebrer na zegas netra d'ar saverien saout met a zo mat evit argrec'h ar filieren²⁸². Emskiantek eus an dra-se e ya ar broduerien hardizh war-raok war klask emrenrezh boued an atalier laezh, seul vui ma eo ret kaout ur sistem kempoell : evit ur produiñ laezh bio izeloc'h e rank ar broduerien ober diouzh ur c'houst boued izeloc'h, da lâret eo hervez poell ar sistem « *low cost* » a zisklêri Isabelle Pailler, kuzulierez war al laezh bio ha kustum e Kambr rannvroel labour-douar Breizh²⁸³. Kaset e vez war-raok ivez gant ar broduerien, evel an distro da vat, ar geot hag un toullad plant boued-chatal all. Koulz lâret eo adperc'hennet ar geot hag ar vevliesseurtes boued-chatal gant ar broduerien.

Adal ar bloavezhioù 1970 eo bet enporzhiet protein a-vil-vern e stumm soja evit al loened peogwir e oa bet dilezet gant al labourerien-douar ar magañ hengounel diazezet war ar geot. Ne oa ket ar gounid-se askorus a-walc'h war verr dermen ha ne oa ket evit bezañ ardivinkaet tra-walc'h²⁸⁴. Met tamm-ha-tamm eo deuet ar broduerien da vezañ emskiantek eus ar pezh e oa e dalc'h : en ur zipaseal live ar produiñ laezh a veze tizhet gant ar geot, pep tra a

²⁷⁶ Société d'aménagement foncier et d'établissement rural.

²⁷⁷ Le Borgne, J. *Le portage foncier séduit les jeunes agriculteurs*, Le Télégramme, 11/12/2020.

²⁷⁸ Keilling, J. *Des sols & des hommes : un agronome se penche sur son passé*, op. cit. p. 107.

²⁷⁹ Eck, A. *Le lait et l'industrie laitière*, PUF, coll. « Que sais-je ? », Paris, 1967, op. cit. p. 83.

²⁸⁰ Mellouët, P. *La vache et le paysan*, op. cit. p. 30.

²⁸¹ « C'est par la tête que l'on trait la vache » ont coutume de dire les anciens pour traduire la relation entre nourriture et production laitière.

²⁸² Web-agri, *Productivité laitière = rentabilité : « Un grand mensonge en bande organisée »*, op. cit.

²⁸³ Guyot, V. *Lait réussit le passage en bio*, La France Agricole, op. cit. p. 48.

²⁸⁴ Durand, P. *Non, le cochon n'est pas le seul responsable de la pollution agricole*, op. cit.

greske ... nemet ar gopr. Ret e oa produiñ muioc'h a laezh evit arc'hantaouiñ pep enkas ouzhpenn²⁸⁵. Setu perak en deus ur produer cheñchet penn d'ar vazh. Bet heuliet gantañ ur patrom askoridik diazezet war maiz, soja, geot saoz ha temzoù nitrogenek... a-raok kemer un hent all e 1992 hini an agroekologek²⁸⁶. Evit magañ ar saout e-pad ar goañv, erlerc'hiet en deus unan all ar soja gant pez-c'hwerv, legumineg kalz a brotein enni²⁸⁷. Aet eo unan all war gounit al luzern dre ma eo doubl ar pal evit al legumineg-se : kaout ur boued-chatal kalz a brotein ennañ ha mirout da enporzhiañ soja evel protein²⁸⁸.

Nebeutoc'h a vaiz e vez gounezet er mod bio dre ma n'eo ket ur blantenn eus an dibab kennebeut. Kalz a energiezh a zo enni met paour eo e protein. En enep d'ar geot hag a zo ur boued peurvat evit an daskirieren rak mat-tre eo e feur energiezh-protein²⁸⁹.

Respont a ra ar skouerioù a-benn ar fin d'ar goulenn diazez-mañ : petra eo danvez naturel ar gêr, kuit da brenañ magadur evit an desaverezh loened na c'hounit anezhañ kennebeut ; ar geot an hini eo²⁹⁰.

Ouzhpenn distro ar geot da vat eo aet ar brouduerien laezh bio war hent ar vevliesseurtes ivez bet levezonet gant eskemmoù skiant-prenet. Lakaet en deus ur produer e pleustr teknikoù bet desket gantañ e penn all ar bed : plantañ meur a spesad geot da skouer evit mirout hervez ur mod naturel ar peurvanoù. « Nebeutoc'h a zispignoù evel-se eget gant temz biologel a zo atav keroc'h²⁹¹ ».

Bez' ez eus ivez ur *GIEE*²⁹² anvet « *Explorons la biodiversité des réponses biologiques afin de renforcer le lien sol-plante-animal en système herbager et/ou biologique* » lañs roet dezhañ gant Isabelle Pailler, kuzulierez war al laezh bio ha kustum e Kambr rannvroel labour-douar Breizh, hag en deus heñchet ar saverien saout war ar vevliesseurtes²⁹³.

Muioc'h-mui e klask al labourerien-douar talvoudekaat danvezioù o c'hêrioù, digreskiñ ar c'houstoù ha prenañnoù enkasoù eta. Gounit a reont legumenegi da skouer hag a binvidika an douaroù en azot kentoc'h eget tretañ anezho²⁹⁴.

²⁸⁵ Web-agri, *Productivité laitière = rentabilité : « Un grand mensonge en bande organisée »*, op. cit.

²⁸⁶ Bignon, E. « *Le sol et l'herbe sont les moteurs de notre système* », RéussirLait, op. cit.

²⁸⁷ Ouest-France, *Pour nourrir ses vaches l'hiver, il a remplacé le soja par le lupin*, op. cit.

²⁸⁸ Limantour, F. Agriculture bretonne, Quel virage ? *La bataille de l'eau n'est pas encore gagnée*, Le Télégramme, Enquête, 09/02/2021.

²⁸⁹ Le Poher, *Lait biologique : une vague de conversions sans précédent*, op. cit.

²⁹⁰ L'Haridon, L. *La viande bio celtique*, Le Télégramme, op. cit.

²⁹¹ Le Télégramme - Châteaulin - Agriculture, *Le pari gagnant de l'expatriation*, 04/03/2019. <https://www.letelegramme.fr/finistere/chateaulin/agriculture-le-pari-gagnant-de-l-expatriation-03-03-2019-12221364.php> (Consulté le 24/02/2020).

²⁹² Groupement d'intérêt économique et environnemental ; kenstrollad labourerien-douar anavezet gant ar Stad eo ar GIEE.

²⁹³ Réseaux d'élevage, *Organiser son travail pour se procurer du temps libre*, op. cit.

²⁹⁴ Limantour, F. *Véronique Lucas, sociologue rurale : « Les agriculteurs veulent gagner en autonomie »*, op. cit.

Gant unan eus al labourerien-douar eo kaset war-raok ur strategiezh diazezet war pradennoù a spesadoù plant liesseurt, an agronomiezh ha digresk an enkasoù ; « an douar hag ar geot a zo luskerien hor sistem » emezañ. Ar pradennoù a spesadoù plant liesseurt (geot-saoz, geot tanav, « *fléole* », melchon gwenn, melchon limestra...) a zo pennraktres o sistem abaoe 1992. Gounezet eo bet ganto war ar c'halite ha war ar broduusted. Ouzhpenn-se, gant ar pradennoù a spesadoù plant liesseurt (un dek spesad disheñvel) hag en ur adperc'hennañ ar gounid geot e vez gwellaet kelc'hiad ar c'harbon hag e vevhegerzded en douar. Diazez end-eeun produusted an tachenoù hag askorusted ar c'hêrioù eo ar poent-se. Gant kenstroll plantenoù e vez tizhet ivez meur a bal, efed dilouzaouer ar c'herc'h (hadegoù ar pradennoù gant kerc'h e-touez ar meskad plant) pe uzin azot al leguminegi da skouer ; arallpatiezh a vez anvet an dra-se (etregwered bevgimiek etre ar plant)²⁹⁵.

Ar brasañ eus ar peuriñ a vez graet gant lod all war pradennoù berrbad liesseurt spesadoù, gramineged ha melchon gwenn met ivez sikorea ha stlañvesk (implijet an div blantenn-se er peurvanoù Zeland-Nevez). Enno ez eus kalz tannin ha perzhioù o deus a-enep an arvevaded ha magus dedennus int. Ouzhpenn ar plant-se a zo dalc'husoc'h ouzh ar sec'hor eget ar gramineged²⁹⁶.

Ha gounezet e vez gant produerien a zo plantenoù evit ezhommoù dibar. Evel-se ur produer en deus hadet e 2012 un dachenn louzeier²⁹⁷ a vez peuret gant ar saout evel ur « *paddock* » boas²⁹⁸. Evit kreñvaat immuniezh viologel al loened, had louzaouus ouzhpenn a vez degaset war un dachenn beuriñ (ur meskad 8 plantenn²⁹⁹) gant ur produer all³⁰⁰. Gant distro ar geot liesseurt spesadoù da vat dreist-holl eo kendrec'het ar broduerien eo ar peuriñ an alc'hwez kevezusted ar c'hêrioù³⁰¹. Met, daoust ma vefe dre ar geot « pal uhelañ peuriñ » ret eo ober hervez an doareoù hin a zo kemm-digemm eus an eil bloaz d'egile (2017 : 217 devezh peuriñ geot-hep boued all-, 2018 : 90 devezh nemetken³⁰²), ha dreist-holl pa eo pal pennañ ar broduerien mont war klask emrenerezh boued an atalier laezh.

Evit paseal er bio eo ret diouzh un tu azasaat sistem boued-chatal ar gêr evit lemel a-grenn an enkasoù kimiek hag ober war-dro an douar diouzh ar gwellañ³⁰³. Ret eo ivez d'ar broduerien diouzh un tu all heuliañ ur reolenn embannet gant kaier ar c'hargoù bio europat : « digor

²⁹⁵ Bignon, E. « *Le sol et l'herbe sont les moteurs de notre système* », RéussirLait, *op. cit.*

²⁹⁶ Réseaux d'élevage, *Organiser son travail pour se procurer du temps libre*, *op. cit.*

²⁹⁷ Plantain, chicorée, trèfle violet, lotier, achillée millefeuille, persil sauvage, etc.

²⁹⁸ Institut Élevage, *Réflexion globale et combinaison de techniques originales pour un système autonome*, *op. cit.*

²⁹⁹ Cumin des prés, pimprenelle, carotte sauvage, persil, fenouil, chicorée, achillée millefeuille et cerfeuil.

³⁰⁰ Réseaux d'élevage, *Organiser son travail pour se procurer du temps libre*, 2018, *op. cit.*

³⁰¹ A2C le site de l'agriculture de conservation, *Est-il possible de bien vivre en production laitière ? op. cit.*

³⁰² Segrafo / Chambres d'agriculture de Bretagne, *GAEC de Kerdennet*, *op. cit.*

³⁰³ Terra, *Conversion bio ne rime pas avec improvisation*, *op. cit.*

hollbadus eo ar peuriñ d'ar saout hervez an amzer ». Kaout a-walc'h peuriñ a zo ur rakdiviz memes a-raok mont war ar bio³⁰⁴.

Ha gant monedoneoù kreñvaet prizioù an enkasoù hag ar produioù, abaoe 2007-2008, o deus al labourerien-douar muioc'h-mui a youl da gaout un emrenerezh brasoc'h³⁰⁵. Prenadennoù koazhadur a zo ivez da dermeniñ d'ar muiañ, hervez o frizioù dre unanenn. Un abeg ouzhpenn da briziañ emren boued³⁰⁶.

Setu perak eo pouezus-kenañ mont war klask an emrenerezh diazezet war ar geot hag ar peuriñ gant koazhadur an nebeutañ ar gwellañ. Lakaet e vo war wel un nebeud skouerioù evit herzel ouzh ar blegenn-mañ. Lod eus ar broduerien a zo war hent an emrenerezh pa eo bet tizhet ar pal gant lod all dija. Boued pennañ eo ar geot atav. Etre ar 15 a viz Meurzh hag ar 15 a viz Here e vez bouetaet ar saout nemet gant peuriñ ur meskad geot-saoz ha melchon-gwenn. Graet e vez hervez ur mod peuriñ dinamek, da lâret eo cheñch tachenn ingal-tre d'ar saout evit ma c'hallfe ar geot adneveziñ³⁰⁷. Hag ar pradennoù liesseurt spesadoù a zo azasaet evit gwellekaat ar produiñ laezh dre c'heot³⁰⁸.

Brientekaat ar produiñ laezh gant ar geot a dalvez produiñ an niver brasañ eus al laezh er peurvan hep koazhadur ha hep boued-chatal ouzhpenn³⁰⁹. Hag evit se kaout an douaroù tro-dro d'ar gêr a zo un atoud evel-just dre ma vez aesaet al lec'hioù peuriñ d'ar saout³¹⁰. Gant ur produer all ne vez koazhadur ebet e lodenn voued al loened a-hed o buhez. Ne vez prenet nemet maenadoù, halen ha pri-prad en emservij³¹¹.

Met, diazezet boued ar saout war geot peuret da gentañ-penn pe berniet hepken³¹², lodenn voued ar saout-laezh a-hed ar bloaz a zo evit ur produer : 70 % peuriñ, 10 % foenn, 20 % geot rubanennet diwar ur sistem boued-chatal 100 % pradennoù pad³¹³.

Saverien saout strollad geotegek bio Penn-ar-Bed³¹⁴ a fell dezho gwellaat da skouer kementad ha kalite ar boued-chatal evit tizhout emren boued pe dost gant 98 % eus ar boued produet war ar c'hêrioù³¹⁵.

³⁰⁴ Terra, *Conversion bio ne rime pas avec improvisation*, op. cit.

³⁰⁵ Limantour, F. V. Lucas, *sociologue rurale* : « *Les agriculteurs veulent gagner en autonomie* », op. cit.

³⁰⁶ Terra, *Conversion bio ne rime pas avec improvisation*, op. cit.

³⁰⁷ Ouest-France, *Finistère. Pour nourrir ses vaches l'hiver, il a remplacé le soja par le lupin*, op. cit.

³⁰⁸ Réseaux d'élevage, *Organiser son travail pour se procurer du temps libre*, op. cit.

³⁰⁹ Réseaux d'élevage, *Organiser son travail pour se procurer du temps libre*, op. cit.

³¹⁰ Le Télégramme - Pont-l'Abbé - Agriculture, *Les quatre frères font du bio aux Deux Vallées*, 29/08/2014. <https://www.letelegramme.fr/finistere/pont-labbe/agriculture-les-quatre-freres-font-du-bio-aux-deux-vallées-29-08-2014-10316317.php> (Consulté le 09/03/2020).

³¹¹ L'Éleveur laitier, « *Être en bio low cost, c'est gagner plus et travailler moins* », op. cit.

³¹² L'Éleveur laitier, « *Être en bio low cost, c'est gagner plus et travailler moins* », op. cit.

³¹³ Institut Élevage, *Réflexion globale et combinaison de techniques originales pour un système autonome*, op. cit.

³¹⁴ Anavezet evel GIEE (Groupement d'intérêt économique et environnemental) gant Ministrerezh al Labour-douar (s.o. p. 33).

³¹⁵ Terra, *L'effet groupe, l'effet gagnant*, op. cit.

Klask tizhout an emrenerezh boued a zo pal pennañ ar broduerien. An doareoù hin a zo dre vras un atoud eus ar re bouezusañ-tout evit kaout geot a-hed ar bloaz ha da vagañ ar saout gant geot hepken evel-just ; 70 % eus lodenn voued ar saout laezh a zo diazezet war ar peuriñ ; ar rubanennañ hag ar foenn a vez implijet e-pad ar goañv ha pa ne vez ket geot a-walc’h e-pad an hañv³¹⁶. Ar pezh a dalvez : ar geot peuret ar muiañ ar gwellañ hag ar geot dastumet dre foenn evit stokañ³¹⁷.

En ur gêr 80 hektar ne vez roet nemet geot d’ar saout da skouer ; seul vui ma kresk ar geot e-unan e Breizh ha nebeutoc’h a labour a zo ouzhpenn evit ar saverien saout³¹⁸. Gant ur produer eo bet tizhet emrenerezh boued an atalier laezh. Savet en deus ur sistem 100 % geot ha 100 % emren ; meret eo ar peuriñ dre « *paddocks* » ha ment an tachennoù pemdeziek a zo jedet bep sizhun. Pa vez un diouer peuriñ e vez implijet ar stokadoù foenn ha rubanennañ³¹⁹.

Abaoe pevar bloaz ne vez ket adhadet ken ar pradennoù, an holl gorread labour-douar talvoudus (GLDT) a zo e stumm pradennoù hollbadus gant ar pal da dermeniñ priz ar produiñ geot ha gwellaat produusted ar pradennoù war dermen. Mont a ra en-dro ar gêr en emren klok war an talvoudekaat geotek ar pezh a glot gant ur c’houst gwellekaet-tre evit ar boued. An Emrenerezh a zo hollek evit ar boued-chatal hag an danvez proteek hep koazhadur evel-just³²⁰.

Maenadoù diouzh dibab hag en emservij a zo kinniget d’ar saout hag un nebeud danveziou diaoz all evit o efedoù koazhadel hag an oligoelfennoù naturel a zo enno. An hentenn maenadel a genaoz magañ ar vuoc’h hag an douar, evit gwellekaat enteuziñ ar maenadoù gant ar plant (dielfennadurioù bloaziek an douar, boued-chatal, blevad evit anavezout ar faktorioù termeniñ)³²¹.

Ne c’hell ket bezañ tizhet pal emrenerezh koulskoude hep doujañ un nebeud diarbennoù evel lakaet war wel gant ur saver saout : buhez an douar (ne c’heller ket lezel a-gostez buhez an douar, ar pep pouezusañ eo !), treiñ trevadoù, bevliesseurted... kement a sujedoù a servij da verkoù evit e gêr³²². Padal e chom evit unan all merañ ar stok boued tu gwan bras ar bio³²³.

Disklêriet e vez gant ur saver saout all eo an emrenerezh evel heñvelster d’al labour-douar biologel ; met emrenerezh divizout evitañ dreist-holl. Peogwir e ra gant ar bio evit bezañ muioc’h mestr war e blanedenn³²⁴. Hag evit daou saver saout all, dibabet ar bio ganto ugent

³¹⁶ Guyot, V. *Lait réussir le passage en bio*, La France Agricole, *op. cit.* p.49.

³¹⁷ Segrafo / Chambres d’agriculture de Bretagne, *GAEC de Kerdennet*, *op. cit.*

³¹⁸ Moëlo S. ha Stervinou M. *Produerien laezh bio*, Le Télégramme, Spered ar vro, *op. cit.*

³¹⁹ Institut Élevage, *Réflexion globale et combinaison de techniques originales pour un système autonome*, *op. cit.*

³²⁰ Institut Élevage, *Réflexion globale et combinaison de techniques originales pour un système autonome*, *op. cit.*

³²¹ Institut Élevage, *Réflexion globale et combinaison de techniques originales pour un système autonome*, *op. cit.*

³²² Bignon, E. « *Le sol et l’herbe sont les moteurs de notre système* », *RéussirLait*, *op. cit.*

³²³ Ouest-France Quimper, *Les éleveurs de Prim’Holstein s’intéressent au bio*, *op. cit.*

³²⁴ Le Poher, *Lait biologique : une vague de conversions sans précédent*, *op. cit.*

vloaz a-raok, gounezet eo pariadenn ar boued emren bremañ. Ne vez ket prenet koazhadur na magadur ebet war ar marc'had evit magañ ar saout³²⁵. Tizhet an emrenerezh pe dost gant ar broduerien da-geñver ur sistem « *low cost* » ouzhpenn, pouezus-tre eo ivez al labourioù kaset war-raok gant kêr arnod Trevarez aboe 1970, bet lakaet war wel ganti ul liamm eeun etre kalite ar peuriñ hag efedusted produiñ laezh ar saout³²⁶.

Dre vras, e sav koust produiñ ar bouedoù-chatal da 15 €/ha evit an hadoù ha 183 €/ha evit al labourioù dileuriet (kempenn an douaroù, hadeier, temzañ hag eostoù). Koust ar boued a zo hini ar boued-chatal hepken a sav da 57 €/1 000 l, labourioù dileuriet e-barzh³²⁷. Evit saverien saout all eo koust ar boued 40 €/1 000 l ha gant priz al laezh a oa 474 €/1 000 l e 2017 e seblant evito eo talet ivez ouzh dae an askorusted³²⁸.

Goude bezañ displeget al lodenn gentañ eus ar sistem « *low cost* » : pourchas boued d'an atalier laezh, e vo studiet bremañ an atalier laezh ent strizh, an uzin-treuzfurmiñ gounit plant e laezh da lâret eo an tropell -desavet disheñvel-bras diouzh an doareoù boas- a zo pennobererezh ar gêr laezherezh. War an dachenn labour-se e rank ar broduerien diorren meur a varregezh evit gwellaat hag evezhiañ o zropell en ur zoujañ ivez ar sistem « *low cost* » bet heuliet ganto a-uc'h evit ar magañ saout-laezh. Ha dibab da gentañ gouennoù a glot gant ar sistem « *low cost* ».

Evit ar produiñ askoridik laezh boas e ra ar saverien saout gant ar c'houenn Holstein alies-tre. Anavezet eo ar c'houenn-se evit bezañ fonnus al laezh ganti dre ma vez bouetaet mat ha gant koazhadur zoken. Ne glot ket ar c'houenn-se gwall vat, anat eo, gant ar patrom bet disklêriet a-uc'h. Astennidikoc'h eo ar sevel loened er produiñ biologel gant nebeutoc'h laezh dre vuoc'h ha nebeutoc'h koazhadurioù³²⁹. Se a zo kaoz eo bet erlec'hiet gant ur produer ar saout gouenn Holstein bep a damm gant saout Jerze a zo rustoc'h, a beur e-pad pelloc'h hag a ro ul laezh pinvidikoc'h³³⁰. Gant ur produer all e vo prenet tamm-ha-tamm gouennoù saout solutoc'h eget ar re Holstein (gouennoù Jerze, Brizh-du ha gouennoù berlañchet), reoù a vez aesoc'h ober war o zro : azasaet ouzh ar vuhez dindan an amzer ; en em blijout a reont er peurlerc'h a-hed da hed ar bloaz, war pradoù ma poulz un tregont seurt plant bennak : stlañvesk a blij kalz d'ar saout, melchon gwenn, sikorea pe bleunioù c'hoazh hervez ar mare^{331,332}. Ar gouennoù rust-se, maget gant geot hepken, a vez kalz a dienn en o laezh ha brudet int evit o c'hig fin ivez³³³.

³²⁵ Guyot, V. *Lait réussir le passage en bio*, La France Agricole, *op. cit.* p. 49.

³²⁶ Magazine Penn ar Bed, Ferme expérimentale de Trévarez, *Améliorer la production laitière*, N° 158, Nov. 2020.

³²⁷ Réseaux d'élevage, *Organiser son travail pour se procurer du temps libre*, *op. cit.*

³²⁸ Guyot, V. *Lait réussir le passage en bio*, La France Agricole, *op. cit.* p. 49.

³²⁹ Terra, *Comparaison bio et conventionnel : une étude nationale « Cedabio »*, *op. cit.*

³³⁰ Ouest-France, *Finistère. Pour nourrir ses vaches l'hiver, il a remplacé le soja par le lupin*, *op. cit.*

³³¹ Moëlo S. ha Stervinou M. *Produerien laezh bio*, Le Télégramme, Spered ar vro, 24/03/2016, *op. cit.*

³³² L'Haridon, L. *La viande bio celtique*, Le Télégramme, *op. cit.*

³³³ Le Télégramme, *Fête du lait bio : un goûter et une visite à la ferme des Pâturiers du Tonnerre*, *op. cit.*

Berlañchadurioù a-feson a zo bet graet evit sistemoù geot penn-da-benn, da lâret eo azasaet mat gant ur sistem « *low cost* »³³⁴. Bet diorroet gant ur produer ur sistem 100 % geot e dropell a zo savet diwar 45 buoc'h a ouenn berlañchet (holsteinenn, jerzeenn, zelandneveziat ha ruz swedad)³³⁵. Evit ur produer all eo ar berlañchañ etre gouenn Holstein, Skandinaviat ha Jerze gant ar pal da dizhout ur c'hempouez gwelloc'h dre ma eo ret bezañ en e wellañ war an dachenn teknik e filierenn bio³³⁶. Paret e vez muioc'h ar saout en ar sevel saout-laezh bio eget en ar sevel saout-laezh boas³³⁷. Ar pal a zo evit ur produer all kaout saout « hanter eus ar c'houenn Jerze », ar c'houenn efedusañ er peurlvan. Berlañchañ a ra etre pemp gouenn³³⁸. Gant lod all e vez savet an tropell war berlañchañ ar gouennoù dre beder hent evit an holl dropell dre lakaat ar gouennoù da genglotañ evit kaout ur vuoc'h a c'hobari bihan a zere mat ouzh ar sistem peuriñ geotegek. Diuz an tropell a zo da gentañ tout dibab ar saout a glot ar gwellañ gant ar sistem produiñ met tennañ a ra ivez da wellaat kaliteoù frouezhusted ha hirhoal ar saout hag ivez da reiñ laezh eus ar c'hentañ evit an dienn hag an amann da skouer³³⁹.

Deuet eo ar c'houenn Jerze da vezañ un dibab a-bouez evit tropell saverien saout all. Dibab ur c'houenn a c'hobari bihan ha nebeutoc'h produus a zo stag evito ouzh ur raktres hollekoc'h : lakaat e pleustr halañ a-stroll en nevezamzer, magañ ar saout nemet gant geot hep koazhadur ha paseal d'ar goro ur wech bemdez a-benn ar fin³⁴⁰. Gant ar skouer-mañ e weler ez eus gouennoù hag a glot gant meur a bennaenn nevezus arnodet ha lakaat e pleustr gant ar broduerien a glask ivez an halañ abred hag a-stroll ha hirhoal an tropell.

Gortoz a ra ar saverien perzhioù uhel eus o zropelloù war-bouez efedusted bouedel, danvezioù talvoudus, frouezhusted, hirhoal... en ur sistem gant nebeud a blas evit ar prenadennoù, ar pezh a glot gant ar gouennoù berlañchet meneget a-uc'h³⁴¹. Diwar-benn hirhoal an tropell, seul goshoc'h an tropell seul welloc'h marz kriz an atalier laezh. Ha diwar-benn an halañ, seul abretoc'h an halañ (tro-dro 24 miz evelkent) seul nebeutoc'h a deizioù hep produiñ laezh³⁴². Ar saverien saout a faot dezho aozañ o labour tro-dro an halañ a-stroll, en nevezamzer dre vras³⁴³, evit talvoudekaat ar peuriñ³⁴⁴. Un doare da ren an tropell diazezet war an halañ a-stroll hag ar goro ur wech bemdez eo pennaenn dibabet gant ur produer. Halañ a-stroll en nevezamzer evit

³³⁴ Terra, *L'effet groupe, l'effet gagnant*, op. cit.

³³⁵ Terra, *Portes ouvertes conversion/installation en lait bio*, octobre 2016.

³³⁶ Le Poher, *Lait biologique : une vague de conversions sans précédent*, op. cit.

³³⁷ Pleinchamp, *Bio ou conventionnel : un comparatif des performances zootechniques*, 06/12/2017. <https://www.pleinchamp.com/actualite/elevage~bio-ou-conventionnel-un-comparatif-des-performances-zootechniques> (Consulté le 11/01/2021).

³³⁸ L'Éleveur laitier, « *Être en bio low cost, c'est gagner plus et travailler moins* », op. cit.

³³⁹ Institut Élevage, *Réflexion globale et combinaison de techniques originales pour un système autonome*, op. cit.

³⁴⁰ Réseaux d'élevage, *Organiser son travail pour se procurer du temps libre*, op. cit.

³⁴¹ Terra, *L'effet groupe, l'effet gagnant*, op. cit.

³⁴² Terra, *Conversion bio ne rime pas avec improvisation*, op. cit.

³⁴³ Terra, *L'effet groupe, l'effet gagnant*, op. cit.

³⁴⁴ Guyot, V. *Lait réussir le passage en bio*, La France Agricole, op. cit. p. 48.

lakaat emdroadur an ezhemmoù da glotañ gant poulz ar geot ha merañ gwelloc'h ar c'houstoù produiñ ; koust ar boued hag ar marz kriz a zo diouzh ar gwellañ hag an ezhemmoù postadurioù termenet. Halañ a ra an annoared da 24 miz. En ur sistem peuriñ arboeller, ur vuoc'h goroet ur wech bemdez n'eus ket ezhomm koazhadur ken. Ar goro ur wech bemdez a zegas ouzhpenn ur wevned vras en aozadur al labour a-hed ar bloaz³⁴⁵.

Gant ur produer pa vez dizonet an annoared etre 6 ha 8 miz, e chomont er peuriñ e-pad ar goañv zoken ; ensperiet int da 15 miz ha halañ a reont da 2 vloaz³⁴⁶. En ur seurt kenarroud eo ivez adneveziñ an tropell un elfenn pouezus-tre evit ar saverien saout. Implijet e vez ganto saout-magerezed evit magañ an annoared bihan adneveziñ. Lakaet e vez gant ar broduerien ar saout o vont war bratenned da vezañ saout-magerezed evit ar sevel leueioù³⁴⁷.

Merañ ar peuriñ a zo pennraktres ar sistem bio evel ar gouennañ a vez aozet evit ma vefe hesket an tropell fin miz Kerzu. Evel-se e c'hell ar goro adkregiñ tro-dro ar 1añ a viz Meurzh³⁴⁸, en ur lakaat da glotañ ezhemmoù al loened war kresk ar geot.

Gant ur produer all e vez jedet bep bloaz evit pep buoc'h he reñverad korvoiñ kriz gallus. Evel-se e vez graet renkador ar saout evit ar bloaz. An drederenn wellañ a vez choazet evit adneveziñ an tropell. Saout-magerezed a vez choazet gantañ ivez (hervez o froduiñ laezh hag o c'halite-mamm) evit magañ an annoared bihan adneveziñ (tri leue perc'hennet dre vuoc'h-vagerez)³⁴⁹. Gant produerien all c'hoazh e vez dizonet 25 annoar bep bloaz ha savet evit halañ da 24 miz. Feur adneveziñ 19 % a zo dereat evit koshadur an tropell ha da gaout ur hirhoal a-zoare. Ar pal a zo da dizhout 6 laezherezh well-wazh evit an annoared deuet da vezañ perzh eus an tropell³⁵⁰. Tizhet e vez gant saverien saout all betek 7 laezherezh well-wazh³⁵¹ ar pezh a zo gwelloc'h evit an efedusted ekonomikel evel-just.

Evit ma vo produet laezh diouzh ar gwellañ eo dav dibab gouennoù saout azasaet, klask an halañ abred hag a-stroll ha hirhoal an tropell hag implij saout-magerezed evit magañ an annoared adneveziñ. Kement a bennaennoù a c'hell pep hini bezañ a-du ganto en ur sistem « *low cost* ». Er c'hontrol eo chomet bev e spered an dud goro ar saout div wech bemdez a-hed ar bloaz hep direizhadenn ebet. Peadra da vezañ souezhet un tamm e vefe ul luskad evit ar goro ur wech bemdez. Arnodiñ ha degemer goro ar saout ur wech bemdez a zo lakaet e pleustr gant meur a broduer.

³⁴⁵ Institut Élevage, *Réflexion globale et combinaison de techniques originales pour un système autonome*, op. cit.

³⁴⁶ Réseaux d'élevage - Chambre d'Agriculture et Institut de l'Élevage, *Un couple d'éleveurs heureux et qui gagne bien sa vie*, 2018.

³⁴⁷ Guyot V. *Lait réussir le passage en bio*, La France Agricole, op. cit. p. 48.

³⁴⁸ L'Éleveur laitier, « *Être en bio low cost, c'est gagner plus et travailler moins* », op. cit.

³⁴⁹ Institut Élevage, *Réflexion globale et combinaison de techniques originales pour un système autonome*, op. cit.

³⁵⁰ Réseaux d'élevage, *Organiser son travail pour se procurer du temps libre*, op. cit.

³⁵¹ Institut Élevage, *Réflexion globale et combinaison de techniques originales pour un système autonome*, op. cit.

Goro ar saout ur wech bemdez a gemer perzh eus ur gwir preder hollek diwar-benn an tropell war an dachenn ekonomikel ha kalite ar vuhez. Se a zo kaoz eo diazezet efedusted ekonomikel tropell ur produer war an emrenerezh, goro ar saout ur wech bemdez hag an halañ en nevezamzer³⁵². Displegañ a ra e chemet en doare-mañ : saout berlañchet goroet ur wech bemdez (ar pezh a zo pouezus-tre evit kalite bevañ ar familh) ; pemp pe c’hwec’h buoc’h-vagerez evit laezhañ an annoared ; an halañ en nevezamzer (evit lakaat da glotañ ezhemmoù al loened gant kresk ar geot) gant arsav ar goro daou viz e-pad ar goañv

Met arsav ar goro e-pad ar goañv n’eo ket evit plijout d’al laezhzerzh a zastum al laezh peogwir ne glot ket gant he ezhemmoù treuzfurmiñ. Ma yafe an holl broduerien war an tu-se ne vefe ket yaourtoù ken en nevezamzer e tispleg un dastumer. Setu perak o deus dalc’het saverien saout a zo daou vare halañ en nevezamzer hag en diskaramzer³⁵³. A-du krenn gant ar goro ur wech bemdez, arnodiñ goro ar saout ur wech bemdez a zo degemer anezhañ a lavar ur produer en deus divizet mont gant ar pleustr-se da vat. Gant ar goro ur wech bemdez e vez gwellaet hervezañ frouezhusted ar saout tra ma eo istimet gant studioù war an dachenn ur c’holl eus 30 % war ar c’hementad laezh hag ur c’hresk eus niver ar c’helligoù (gant kastizoù war priz al laezh a c’hell bezañ e-pad an tri miz diwezhañ al laezhzerzh). Kendrec’het gant ar goro ur wech bemdez a chom ar broduerien koulskoude³⁵⁴.

Peogwir eo an tropell maen-korn ar produiñ laezh bio eo ret kemer preder eus ar gwellañ dioutañ evit merañ yec’hed al loened en ur zerc’hel kont eus redioù kaier kargoù al laezh bio evel-just, un digarez evit mont war doareoù nevez, dre hentennoù dazeilat evit prederiañ al loened. Dre ma ne c’hell ket ar broduerien ober gant ar gimiezh ken pe vefe an enkasoù er parkeier pe al louzeier evit al loened eo ret dezho bezañ en diarbenn evit prederiañ al loened³⁵⁵. Ret-groñs eo d’ar broduerien bezañ stummet war hentennoù dazeilat evel plant, nadozwanerezh, osteopatiezh, homeopatiezh, ha fitoterapiezh³⁵⁶.

Evel-se e vez prederiet saout ur produer gant eoulioù esañs ha homeopatiezh ; met ar prederioù-se n’int ket da brimaozañ ; kenderc’hel a ra d’en em stummañ evit se. Ret eo bezañ resis-tre ; mod-all e c’haller ober gwastoù bras hervezañ. Ouzhpenn-se e e vez lakaet gantañ ur gwiskad ispisial war ar gwenodennoù evit mont eus un eil park d’egile evit gwareziñ karnioù ar saout³⁵⁷. Ur skouer vrav-tre eus ar preder a gemer gant e dropell. Met evit mont betek penn ur raktres bio a-seurt-se eo ret, hervez ur medisin-loened, ober gant ur strategiezh dizarbenn, da

³⁵² L’Éleveur laitier, « *Être en bio low cost, c’est gagner plus et travailler moins* », *op. cit.*

³⁵³ L’Éleveur laitier, « *Être en bio low cost, c’est gagner plus et travailler moins* », *op. cit.*

³⁵⁴ Scohy, D. Témoignage F. Charles (22) : « *Doubler le revenu en travaillant deux fois moins* », *op. cit.*

³⁵⁵ Le Poher, Lait biologique : *une vague de conversions sans précédent*, *op. cit.*

³⁵⁶ Guyot, V. *Lait réussir le passage en bio*, La France Agricole, *op. cit.* p. 49.

³⁵⁷ Le Berre, A. *Jean-René Cotten, pionnier du bio depuis 25 ans*, Le Courrier - Le Progrès, *op. cit.*

lâret diwall kempouez ar boued dreist-holl, yec'hedrezh an tropell, aezamant lojeiz al loened hep lezel a-gostez loc'henn ar genetik ivez³⁵⁸.

Pa vefe evit ar font hag ar postadurioù pe ar sistem produiñ (en agrech'h d'an atalier laezh) hag ar sevel saout (an atalier laezh), ar broduerien a labour bemdez war bep tra gant ar pal krouiñ talvoudegezh hag ober diouzh ur sistem « *low cost* ». Met ouzhpenn-se e kemer perzh ar raktres produiñ laezh bio en ur c'helc'h frank a gas an endro hag an endro bevañ war-raok war un dro.

3.2.4 Kas an endro hag an endro bevañ war-raok

An daou bennaenn-se a zo liammet dre ma o deus an doareoù pleustrek nevez d'ober a zouj an endro ur skog pozitivel ivez war endro bevañ ar broduerien

Kaier kargoù al laezh bio a zo da gentañ penn ur mod da wareziñ an endro dre ma eo ret d'ar broduerien ober er parkeier hep diastuzer ebet, hep dilouzaouer ebet, na hep temz kimiek. Ret eo dezho lezel a-gostez ivez an antibiotikoù evit prederiañ al loened ar muiañ ar gwellañ. Met mont a reont kalz pelloc'h da gas an endro war-raok. Emañ al labour-douar breizhat o klask un dazont. Un difrae talvoudegezh uhel a-fet endro (TUE³⁵⁹) a zo unan eus an diforc'hoù ijinet e-skoaz ar bio³⁶⁰. Niverus eo ar broduerien da sevel saout en ur zoujañ an diarbennoù labour-douar, endro hag hin (DLEH³⁶¹), da lâret eo termeniñ an enkasoù e-barzh ar gêr en ur harpañ an emvastañ. Lakaet e vez ar saout da beuriñ e-pad eizh pe nav miz en tachennoù aozet e stumm logelloù. Maget int gant geot hepken pe dost (98 %). Implijet e vez nebeut ludu ha produioù fitoyec'hed hag an distaoladoù loened a zo implijet evel temzañ evit an douar. Tost null eo al louc'h karbon. Nebeut a louzeier a vez implijet evit al loened ha diwar alioù ar medesin loened en deus graet ur saver saout gant an aromaterapiezh ha mat eo an disoc'hoù³⁶².

Tud leun a intrudu eo ar broduerien ha dizehan a zo war ar stern ganto un hollad diarbennoù n'int ket ken noazus d'an endro pe evit gwareziñ anezhañ.

Ur reolenn aour a zo da heuliañ gant ar broduerien : lakaat ar produiñ laezh da glotañ gant ar boued-chatal a c'haller kaout ha pas ar c'hontrol. Ha klask sinergiezh etre plant ar boued-chatal a zo eus an dibab evit gwareziñ an endro. Gant ar meskad piz-c'hwerv ha heiz da skouer eo an heiz ur harpell evit ar piz-c'hwerv, hemañ en ur c'holeiñ an douar a vir ouzh al louzeier fall da greskiñ re vuan. Hag erlec'hiet e vez an dilouzaouiñ kimiek gant an dilouzaouiñ mekanikel ; adplantañ girzhier³⁶³ war ar gêr a zo ur mod all ivez da wareziñ an endro hag ar vevliesseurded.

³⁵⁸ Guyot, V. *Lait réussit le passage en bio*, La France Agricole, *op. cit.* p. 49.

³⁵⁹ TUE : Talvoudegezh uhel a-fet endro (HVE : Haute valeur environnementale).

³⁶⁰ Le Borgne, J. *Les défis de l'agriculture bretonne*, Le Télégramme, *op. cit.*

³⁶¹ DLEH : Diarbenn labour-douar, endro ha hin (MAEC : Mesure agro-environnementale et climatique).

³⁶² Jégo, K. *A 21 ans, il se lance dans la vente directe de viande*, Le Télégramme Économie, 18/09/2021.

³⁶³ Ouest-France, *Finistère. Pour nourrir ses vaches l'hiver, il a remplacé le soja par le lupin*, *op. cit.*

An oberoù dibabet gant ar broduerien a zo graet n'eo ket hepken war tachenn an endro met dre genlabourat war an tachennoù armerzhel, sokial, sevenadurel koulz ha war tachenn an endro.

Evel-se e respont da skouer implij an niverel n'eo ket hepken d'an dalc'h askorusted ar c'hêrioù, met da zalc'hoù ekonomikel hag endroel e gwirionez. Implij an niverel gant ar mekanikoù (traktorioù aveet gant ur sistem *GPS*³⁶⁴) a zo ur skoazell a-bouez evit hadañ pe temzañ ar pezh a zo ret nemetken diouzh an ezhemmoù titouret gant lunerezh dre loarell.

Hadañ pe temzañ an douaroù hervez an ezhemmoù, an traoù-se a glot gant respont ul labour-douar modern ha doujus eus an douaroù hag al loened ha d'ar meno foran « a sell tostik-tost ouzhomp »³⁶⁵.

Implij an niverel a zo ivez evit ar broduerien ober ur c'hlaoustre war an dazont en ur vezañ war ar rouedadoù sokial evit diskouez gwirvoud o micher ha stourm ouzh an « *agribashing* » ; ret eo ober fiziañs deomp a zisklêri ur broduerez en ur lakaat war wel eo dedennus implij an niverel evit ul labour-douar a skiant vat³⁶⁶. Evel e lâr ar c'hannad, Olivier Damaisin, kinniget gantañ un danevell war emlazh al labourerien-douar d'ar gouarnamant e miz Kerzu 2020 « Ha spi am eus ne vo ket kaozeet ken e Frañs eus an « *agribashing* » met eus an « *agriloving* »³⁶⁷.

Filierenn al laezh a daol kalz a evezh ouzh dilaoskadennoù gaz efed ti-gwer an tropelloù dre ar programm « Kêr laezherezh izelgarbon » arnodet abaoe 2014. Prometet he deus filierenn al laezh digresk he gazoù efed ti-gwer eus 20 % ac'hann 2025, kêr ha kêr, ur pezh mell chanter dre ma n'eo ket mestr ar broduerien, pe nebeut, war 50 % eus an dilaoskadennoù-se a zeu eus sistem koazhañ ar saout³⁶⁸. Ar vicherelezh a fell dezhi, dre vras, lakaat war wel skog izel ur produiñ diazezet, evit ar brasañ, war ar peuriñ, gwir puñs karbon ; spi he deus ar vicherelezh war ur politikerezh boutin al labour-douar glasoc'h³⁶⁹.

Met ret eo bezañ emskiantek en deus al labour-douar e Breizh da dalañ ouzh patromoù ekonomikel re vresk doublet gant ur gwask kevredigezhel war greskiñ. En ur mare tonkus emeur evit al labour-douar e Breizh ha digor emaoamp war raktresoù a bep seurt gant ma vefent padus ha spletus a zispleg Loïc Guines, prezidant kambr al labour-douar Il-ha-Gwilen³⁷⁰. Ur mod da lavarout e rank ar raktresoù kompezañ endro hag efedusted ekonomikel.

³⁶⁴ GPS : Géolocalisation par satellites.

³⁶⁵ Le Borgne, J. *L'agriculture 2.0 trace son sillon*, Le Télégramme, Le fait du jour, 04/09/2020.

³⁶⁶ Le Borgne, J. *L'agriculture 2.0 trace son sillon*, op. cit.

³⁶⁷ Le Berre, P. (Propos recueillis par), *Suicide des agriculteurs : des propositions pour y remédier*, Le Télégramme, 07/12/2020.

³⁶⁸ Pouliquen, F. *Empreinte carbone : Les éleveurs laitiers lancent la chasse aux émissions de gaz à effet de serre*, 20 minutes, 12/09/2018. <https://www.20minutes.fr/planete/2334731-20180912-empreinte-carbone-eleveurs-laitiers-lancent-chasse-emissions-gaz-effet-serre> (Consulté le 18/02/2020).

³⁶⁹ Le Borgne, J. S. *Pichonet : Son avenir est dans le pré*, op. cit..

³⁷⁰ Le Borgne, J. *Un plan pour relancer l'agriculture bretonne*, Le Télégramme, op. cit.

Met n'eo ket tout ret eo d'ar raktresoù laezh biologel bezañ ivez azasaet hiziv an deiz da gas an endro bevañ war-raok, da lâret eo ar c'halite bevañ -a zo dalc'het gant an aozioù labour- ha mad al loened. Kement-se evit adskoulmañ an diviz etre al labourerien-douar hag ar vevezerien ha, dre vras, klotañ gant ar gevredigezh.

An doare amzer labour a zo deuet da vezañ hiziv an deiz un afer bouezus evit dazont ar filierenn³⁷¹. Ne fell ket d'ar broduerien bezañ sklav eus o micher ken evel eo bet ar beizanted remziadoù-pad. Digreskiñ an amzer labour evit degas ur c'hempouez mat etre buhez vicherel ha buhez personel eo ar pal. Disklêriet en deus ur produer da skouer bezañ tostoc'h eus 35-40 eurvezh bep sizhun eget 70 e a-drugarez d'al label laezh bio. Hag e c'hall kemer un dibenn-sizhun vak diwar zaou ha peder sizhun vakansoù.

Ouzhpenn ar c'halite bevañ-se e blij d'ar broduerien laezh bio adkavout emrenerezh divizout ha merañ hag entan o micher³⁷². Produerien all a ro da c'houzout pegen laouen int gant o micher, bezañ er-maez alies, en natur, hag ober labour-korf. Ha peogwir e gont kalz evito ar vuhez familh, neuze ne vez ket astennet an deizoù betek re³⁷³ ! Gallout enfredañ ur goprad, pa vez tennet askorusted a-walc'h eus ar gêr evit se, a ro an tu ivez da gaout amzer vak gant ar familh³⁷⁴.

Redi goro ar saout a zo anavezet mat gant ar saverien saout laezh. Ar goro a zo 50 % eus amzer pemdez ret ur sevel saout laezh (da vintin ha da noz 365 deiz ar bloaz dre vras). Evit respont da volontez ar saverien saout da gaout muioc'h a amzer vak (buhez familh, vakansoù, dudioù...) o deus studiet savlec'hioù a vicher laezherezh ar c'hornôg bras skog niver a c'horio hag o c'houlzad war ar produiñ laezh³⁷⁵.

Studioù kaset war-raok e-keñver doujañs ar saverien saout war yec'hed ha mad ar saout. Meur a zoare-ober evit ar goro betek ar c'horio ur wech bemdez. Gallout a reer cheñch an teknikoù hep postadur. Ur respont int e-keñver dedennañ izel ar vicher : muioc'h gwevnded hag euriou a zere ouzh ar vuhez familh pe gargoù all.

Ar c'holl ekonomikel « bihan », diouzh an niver a c'horio hag o c'houlzad, a c'hell bezañ kempouezet gant kalite bevañ gwelloc'h. Met ar c'hementad laezh produet a zigresk eus 25 % koulskoude ma vez goroet ar saout ur wech bemdez. Da lâret eo e rank ar broduerien kreskiñ ment o zropell ma fell dezho derc'hel ur produiñ laezh ingal³⁷⁶.

³⁷¹ Jégo, K. *Éleveurs laitiers : une aide bienvenue de la comcom*, Le Télégramme, *op. cit.*

³⁷² Queillé, H. *Conversion : pourquoi ils ont choisi de passer au bio*, Le Télégramme, *op. cit.*

³⁷³ Moëlo S. ha Stervinou M. *Produerien laezh bio*, Le Télégramme, Spered ar vro, *op. cit.*

³⁷⁴ Ouest-France, *Finistère. Pour nourrir ses vaches l'hiver, il a remplacé le soja par le lupin*, *op. cit.*

³⁷⁵ Réseaux d'élevage - Chambre d'Agriculture et Institut de l'Élevage, *Faut-il vraiment traire les vaches toutes les 12h ?* 2018.

³⁷⁶ Réseaux d'élevage, *Faut-il vraiment traire les vaches toutes les 12h ?* *op. cit.*

Lakaet en deus war wel ar c'hannad, Olivier Damaisin, kinniget gantañ un danevell war emlazh al labourerien-douar d'ar gouarnamant e miz Kerzu 2020 (s.o. p. 60), formulenn ar pevar « r »³⁷⁷ o deus ezhomm al labourerien-douar a zo fall en o groc'hen da heuliañ : kemer diskuizh (vakansoù,...), pellaat e-keñver e obererezh (prederiañ war e zachenn danvez), kemer perzh e rouedadoù (tiegezhel, a vignoniezh, a vicherel), ha liammet gant an tri all dazlammat³⁷⁸.

Aozadur al labour a zo evel-just ur faktor pennañ eus buhez, eus doare bevañ ar saverien saout laezh bio kentoc'h. Setu perak e reont hervez doareoù dibar peurvuiañ en ur adkempenn aozadur al labour.

Ar saverien saout laezh bio a zistro ouzh doareoù labour hengounel a-benn ar fin. Labourat a reont diouzh lusk an natur hervez ar c'houlzioù-amzer hag an amzer ; en ur mod, heuliañ a reont mod o zud-kozh ; emaint gant ar santimant n'eus ket bet krouiet tra ebet ganto peogwir e rae o zud-kozh evel-se³⁷⁹.

Met evit Isabelle Paillet, kuzulierez war al laezh bio ha kustum e Kambr rannvroel labour-douar Breizh, e vez arnodet kalz er mod bio dre ma eo ret kaout ur plan « B » bepred evel e vez lâret evit suraat an danvezioù boued-chatal dreist-holl³⁸⁰. Ha gant ar mod bio e vez ezhomm muioc'h a dud labour hag ur gorread labour-douar talvoudus (GLDT) un tammig brasoc'h ivez, gant ur c'horvoder laosk kreñvoc'h dre unvez tud labour koulskoude³⁸¹.

Evit ur c'houblad produerien eo uheloc'h prizioù al laezh met an doare da labourat a gont ivez evito. Er bio, int boas da labourat en un doare marc'had-mat. Ne vez ket prenet mekanikoù bras, ha graet e vez gant embregerezhioù labour-douar al labourioù n'int ket gouest d'ober pe ne fell ket dezho ober, evel treiñ an douar, hadañ, troc'hañ ar geot, tennañ an hañvouezenn bep pempzektez... « Gounezet e vez amzer evit bezañ tostoc'h d'al loened » emezo. Ganto e vez goroet, maget ar saout, graet war-dro an orjalennoù, war-dro ar saout klañv, halañ ar saout³⁸². Ne vez ket troet ar pradoù kennebeut evit harpañ kempouez ar plant hag al loened eta³⁸³.

Troet eo aozadur labour ur produer war an halañ a-stroll hag ar goro ur wech bemdez a-hed ar bloaz gant lodennoù labour hag a glot gant ar pevar amzer, nevezamzer : an halañ, hañv : ar gouennañ hag ar stokoù geot, diskaramzer : fin laezherezh ar saout hag aozadur ar blaoz a zeu (pradennoù ha loened), goañv : kas ar saout da hesk ha prederiañ anezho ha kaout muioc'h a

³⁷⁷ « repos », « recul », « réseau », « rebond ».

³⁷⁸ Le Berre, P. *Suicide des agriculteurs : des propositions pour y remédier*, Le Télégramme, *op. cit.*

³⁷⁹ Queillé, H. *Conversion : pourquoi ils ont choisi de passer au bio*, Le Télégramme, *op. cit.*

³⁸⁰ Guyot, V. *Lait réussir le passage en bio*, La France Agricole, *op. cit.* p. 50.

³⁸¹ Terra, *Comparaison bio et conventionnel : une étude nationale « Cedabio »*, *op. cit.*

³⁸² Moëlo S. ha Stervinou M. *Produerion laezh bio*, Le Télégramme, Spered ar vro, *op. cit.*

³⁸³ L'Haridon, L. *La viande bio celtique*, Le Télégramme, *op. cit.*

amzer vak evit ar raktresoù personnel³⁸⁴. Hervez ar produer-se e c'heller goro ar saout ur wech bemdez en ur zerc'hel ar memes live gopr gant ur c'harg labour izeloc'h³⁸⁵.

Emañ an teknologiezhioù niverel o kemer plas war tachenn ar sevel saout ivez evit bezañ kevreet gant ar saout 24e/24. Ma c'hoarvez ur gudenn bennak gant ur vuoc'h eo kemennet ar produer gant ur sinal kemenn war e bellgomzer hezoug³⁸⁶. Implijet e vez ivez an niverel evit heuliañ an tropell hag evezhiañ an halañ³⁸⁷.

Dre an elfennoù lakaet war wel a-uc'h e klask ar broduerien labourat war ar produiñ laezh arboeller ha digresk an amzer labour³⁸⁸. Splann a-walc'h eo e kemer an amzer labour, dre an aozioù labour, ur plas dreistpouezus gant ar broduerien laezh bio. Istim a ra lod anezho o deus aozioù labour c'hoantaet gant kalz a amzer gouestlet da evezhiañ al loened. Ha pa eo dilaezhet ar saout an amzer labour pemdeziek a zo tro-dro 2 eurvezh. Ar familh a gemer ivez peder sizhun vakansoù e miz Eost gant skoazell ur strollad implijerien³⁸⁹.

Ouzhpenn soursial ouzh o endro bevañ eo prederiet ar broduerien ivez gant mad al loened estreget reolennoù kaier kargoù al laezh bio.

Lakaet eo bet war wel a-uc'h meur a dra a gemer perzh e mad al loened (dre ar mod da sevel, da vagañ, da brederiañ, da c'horho anezho, e-touez traoù all). Da-geñver an aoditoù e laka an aozadurioù testeniekaat ar pouez war ar c'hemer e kont eus mad al loened, evit ar sevel leueioù dreist-holl. Ret eo a-wechoù ober postadurioù evit doujañ kaier ar c'hargoù³⁹⁰.

Fest al laezh bio aozet bep bloaz gant Strollad al labourerien-douar bio Penn-ar-Bed³⁹¹ a zo un digarez da ziskouez d'an dud hervez peseurt mod e vez labourer : peuriñ a ra ar saout er peurllec'hioù a-hed ar bloaz, er Pradoù ma boulz un tregont seurtad plant (stlañvesk, melchon-gwenn, sikorea pe bleunioù hervez ar maread) ; ne vez ket troet an douaroù ; goroet e vez ar saout ur wech bemdez nemetken. Skuizhet ar saout nebeutoc'h evel-se, e vez gwellaet yec'hed, frouezhusted ha kalite al laezh hag ar c'hig³⁹².

Soursius eo ar broduerien d'ober pep tra en ur zoujañ an natur, mab-den hag al loen en ur zalc'her kont eus ment armerzhel evel-just, peadra bezañ un digarez mat evit adskoulmañ an

³⁸⁴ Institut Élevage, *Réflexion globale et combinaison de techniques originales pour un système autonome*, op. cit.

³⁸⁵ Goualan, N. *Allier cohérence économique et performance environnementale*, Journal Paysan Breton, 16/10/2015. <https://www.paysan-breton.fr/2015/10/allier-coherence-economique-et-performance-environnementale/> (Consulté le 21/02/2020).

³⁸⁶ Nédélec, A. exploitant laitier à Ploéven (29), *Agriculture : prendre le virage du qualitatif*, op. cit.

³⁸⁷ Le Borgne, J. *L'agriculture 2.0 trace son sillon*, Le Télégramme, op. cit.

³⁸⁸ Réseaux d'élevage, *A la rencontre des systèmes laitiers économes de Bretagne*, 2018, op. cit.

³⁸⁹ Réseaux d'élevage, *Un couple d'éleveurs heureux et qui gagne bien sa vie*, op. cit..

³⁹⁰ Terra, *Conversion bio ne rime pas avec improvisation*, op. cit..

³⁹¹ Groupement des agriculteurs bio du Finistère (GAB 29).

³⁹² L'Haridon, L. *La viande bio celtique*, Le Télégramme, op. cit. ha Le Télégramme, *Fête du lait bio : un goûter et une visite à la ferme des Pâturiers du Tonnerre*, op. cit.

diviz etre al labourerien-douar hag ar vevezerien ha, dre vras, klotañ gant ar gevredigezh. Emdroadurioù ar pleustroù a c'hell gwellaat an diviz etre al labourerien-douar hag ar vevezerien³⁹³. Gant ma vo ar vevezerien emskiantek eus an diarbennoù nevesaet ha gwellaet kemeret gant al labourerien-douar. Merzout a ra kevredigezh « Labourerien-douar Breizh » koulskoude dianaoudegezh ar vevezerien war al labour-douar a-vremañ. Setu perak e ya bep bloaz aboe dek vloaz izili ar gevedrigezh da gejañ ar Vretoned evit displegañ o micherioù ludresadennet re lies war ar rouedadoù sokial hervezo. Un digarez eo an emgavioù bloazek-se gant ar vevezerien evit komz eus kudennoù an endro ha mad al loened ha reiñ c'hoant d'al labourerien-douar da glask penaos gwellaat o fleustroù³⁹⁴.

Gouel al laezh bio (ar c'hwezekvet lid) aozet e departamant Penn-ar-Bed gant Strollad labourerien-douar viologel Penn-ar-Bed (GAB 29) e 2020 a glask ar memes pal : lakaat an dud da anavezout micher al labourerien-douar vio³⁹⁵. Evit respont d'ar goulenn kevredigezhel e rank patrom al labour-douar Breizh, enket etre ar c'hevezañ bedel izelbriz ha gwask an dasparzherezh bras, frankaat muioc'h eget biskoazh. Dibab ar produiñ laezh bio a glot gant al luskad-se seul vui ma Kambr al labour-douar Breizh he deus merket en e raktres strategel nevez eo diwallerezh ar vevliesseurtes hag ar meteier unan eus an daeoù er bloavezhioù a zeu³⁹⁶.

Met n'eo ket aes bezañ « disheñvel » hervez daou broduer yaouank dibabet ar produiñ laezh bio ganto ha direnket eo bet o zud hag o amezeien gant o difrae. Soñjal a rae dezho e oamp aet war-gil ; diaes ivez da gendrec'hiñ ar banker hag ar c'hontour en desped d'ar bilañsoù. Dre chañs e cheñch ar selloù diavaez ha ret eo klotañ hervezo gant ar gevredigezh ha lakaat mab-den e-kreiz o micher³⁹⁷.

Evit respont da c'houlennoù ar gevredigezh e vez muioc'h-mui a broduerien ivez da ginnig difraeoù diforc'hiñ : saout maget hep OGM, hep eoul palmez, laezh louc'h karbon izel kalz omega 3 ennañ...³⁹⁸, kement a zezverkoù na c'hellfent ket leuskel diseblant ar vevezerien ma int prest da baeañ ar produioù savet diwar ar patrom-se un tamm keroc'h.

War ar memes mod, he deus an enkadenn yec'hedel degaset cheñchamantoù boazioù beveziñ evit an amredoù berr n'int ket, war a seblant, un efed giz : « war un tuadur don emeur, ur cheñchamant sevenadurel »³⁹⁹ ; ul luskad e c'hellfe ar broduerien laezh tennañ splet dioutañ marteze ?

³⁹³ Le Borgne, J. *Les défis de l'agriculture bretonne*, Le Télégramme, *op. cit.*

³⁹⁴ Le Borgne, J. *Les défis de l'agriculture bretonne*, Le Télégramme, *op. cit.*

³⁹⁵ Le Télégramme, *Fête du lait bio : un goûter et une visite à la ferme des Pâturiers du Tonnerre*, *op. cit.*

³⁹⁶ Le Borgne, J. *Le moment de s'émanciper*, Le Télégramme, Point de vue, 11/02/2021.

³⁹⁷ Queillé, H. *Conversion : pourquoi ils ont choisi de passer au bio*, Le Télégramme, *op. cit.*

³⁹⁸ Le Gall, P. Bretagne 2020, *Le lait coule à flots d'Armor en Argoat*, Le Télégramme, *op. cit.*

³⁹⁹ J. Le Borgne, J. (Propos recueillis par), *À Bubry, le drive solidaire et déconfiné*, Le Télégramme, France, 22/11/2020.

Daoust d'ar gortoz kevredigezhel nevez eo ret klask ur c'hempouezh padus etre ar c'hinnig hag ar goulenn evit mirout ouzh ar marc'had na vefe distabilaet⁴⁰⁰. Hag ouzhpenn-se, un diforc'h don a zo etre ar goulenn kevredigezhel hag ar brenadenn. Eno emañ an dalc'h⁴⁰¹.

Ober diouzh ur sistem « *low cost* » en ur gas an endro hag an endro bevañ war-raok war un dro eo pal ha buhez pemdeziek ar broduerien laezh bio. Ha dont a reont a-benn da dizhout disoc'hoù dedennus bet lakaet war wel a-uc'h ? Bez' e c'hallont ivez gounit muioc'h en ur labourat nebeutoc'h ?

3.2.5 Gounit muioc'h en ur labourat nebeutoc'h ?

Ober a ra ur produer gant ur sistem e c'heller anvet « prizioù izel » pe « *low cost* » gant an disterañ prenadennoù, ar goro ur wech bemdez (digresk ar produiñ eus 30 %), mennad pennañ d'ar « *CUMA* », un embregerezh labour-douar evit dastum ar geot. Da notenniñ zo e kemer perzh ar « *quad* » ivez en dafar ar gêr evel benveg pennañ ar geoteger. Kement-se a ro an tu, hervezañ, da c'hounit muioc'h en ur labourat nebeutoc'h hag en ur dermeniñ an arc'hantañ⁴⁰².

Ur c'houblad produerien all en deus liammet ur sevel saout simpl hag efedus, en ur dalvoudekaat diouzh ar gwellañ al lodenn voued diazez (boued-chatal a galite dreist-holl) hag en ur dermeniñ ar prenadennoù diavaez hag ar c'harg labour evit tizhout efedusted armerzhel ar gêr⁴⁰³. Ur produer all c'hoazh en deus diazezet e strategiezh war ur sevel saout arboeller hag ur sistem evit kaout amzer vak ha gounit mat e damm kreun gant ar palioù pennañ-mañ⁴⁰⁴ :

- saout berlañchet, saout-magerezed hag annoared savet evit halañ da 24 miz,
- saout bouetaet dre ar pradennoù e stumm peuriñ ha foenn evit magañ anezho e-pad ar prantad goañv berr ha saout goroet ur wech bemdez evit en em zieubiñ amzer evit ar familh,
- an holl labourioù er parkeier dileuriet evit aesaat ar c'harg labour ha kuit da zegas postadurioù mekanikoù nevez.

Gant ur produer, ur mailh war e vicher, e vez kaset war-raok tri fal : 100 % peuriñ, goro ur wech bemdez ha halañ a-stroll ha ken dibar all eo frouezh e zoare-ober : karg labour hanter nebeutoc'h, teir gwech zoken, met disoc'h ekonomikel div wech brasoc'h⁴⁰⁵ !

Entanet gant o micher, war klask arnodiñ bepred evit krouiñ talvoudegezh dre an disheñvelidigezh pe gwellekaat o sistem produiñ « *low cost* » evit gounit muioc'h en ur labourat

⁴⁰⁰ Le Poher, *Lait biologique : une vague de conversions sans précédent*, op. cit.

⁴⁰¹ Le Borgne, J. Enquête, *Les défis de l'agriculture bretonne*, Le Télégramme, 11/02/2021, op. cit.

⁴⁰² L'Éleveur laitier, « *Être en bio low cost, c'est gagner plus et travailler moins* », op. cit.

⁴⁰³ Réseaux d'élevage, *Des vaches productives en toute simplicité et efficacité*, op. cit.

⁴⁰⁴ Réseaux d'élevage, *Un couple d'éleveurs heureux et qui gagne bien sa vie*, op. cit.

⁴⁰⁵ Scohy, D. Témoignage F. Charles (22) : « *Double le revenu en travaillant deux fois moins* », op. cit.

nebeutoc'h hag en ur gas an endro hag an endro bevañ war-raok, petra eo faktorioù berzh pennañ strategiezh produiñ al laezh bio a-benn ar fin ?

3.3 Faktorioù berzh pennañ strategiezh produiñ al laezh bio

Dre ar pezh a zo bet lakaet war wel a-uc'h e vo diverret an dek faktor pennañ difrae strategiezh hollek produiñ al laezh bio a grog gant an emdroadur peurliesañ hag a ya gwall belloc'h eget kaier kargoù al laezh bio ar peurliesañ ivez (s.o. skeudenn 3 p. 67).

Heuliet ar faktorioù berzh pennañ-se gant ar broduerien bez' eo difrae produiñ al laezh bio ur wir strategiezh c'hounit evito hag evit ar « gevelerien » all ?

Skeudenn 3

An dek faktor berzh pennañ strategiezh produiñ al laezh bio

Faktor berzh pennañ	Skouerioù efedoù hag oberoù
Studiañ ar raktres ha titouriñ anezhañ	Kemer perzh e strolladoù labour (eskemm skiant-prenet), e beajoù studi etrebroadel... e darempred gant kambroù al labour-douar hag aozadurioù aliañ all.
Aozañ dibaboù pennañ strategiezh ar raktres	Displegañ ar palioù da dizhout : askorusted, skog endroel, amzer vak....
Diarbenn efedoù mont war-zu ar bio	Dibab ar mod da emdreiñ dindan daou vloaz (emdroadur par an douaroù hag an tropell pe emdroadur an douaroù da gentañ hag an tropell goude). Talañ ouzh digresk ar produiñ hep cheñchamant priz al laezh. Priziañ ar skoazelloù arc'hant evit an emdroadur ha goude (reolennoù, padelezh).
Mestroniañ ar font hag ar postadurioù	Gant skoazell ar Safer ma eo talvoudus (dre ar portezañ font) hag en ur dileuriañ labourioù a zo pe en ur lakaat mekanikoù ha binviji e boutin dre ur « CUMA ».
Ober diouzh ur sistem produiñ « <i>low cost</i> »	Emrenerezh boued an tropell (diazezet war ur sistem geotegek, hep koazhadur ebet pe dost), gouennoù saout azasaet....
En em ouestlañ d'an tropell	Berlañchañ, gouennañ, halañ, hirhoal, frouezhusted, prederiañ, adneveziñ, saout-magerezed... mad al loened.
Adc'hounit gwerzh ouzhpennet ha talvoudekaat anezhañ	Dre genaot al laezh (ennañ kalz a zanvezioù talvoudus). Dre genwerzhelañ al laezh (dastumer/treuzfurmer pe strollad produerien). Dre dreuzfurmiñ al laezh war al lec'h ha gwerzhañ ar produioù war-eeun er gêr, dre amredoù berr pe d'an dasparzherien.
Kas an endro hag an endro bevañ war-raok	Gwareziñ an endro (diastuzer ebet, temz kimiek ebet, antibiotikoù an nebeutañ ar gwellañ). Kaout amzer vak evit ar familh hag ar gevredigezh...
Rannañ pleustroù frank ar gêrioù gant ar vevezerien hag ar gevredigezh	War ar rouedadoù sokial, da-geñver dorioù-digor pe festoù al laezh bio. Evit gwellaat an diviz etre labourerien-douar hag an dud ha kas war-raok an « <i>agriloving</i> » e-lec'h an « <i>agribashing</i> »
Sevel menegerioù disoc'h hag efedusted (s.o. pevare lodenn)	En un daolenn-stur a dalvezo da briziañ ar strategiezh lakaet e pleustr ha da eskemmañ er bodadoù-labour (keñveriañ an disoc'hoù evit adaozañ ha respont war dachenn pe dachenn, en ur arnodiñ teknikoù all ma eo ret)

Pevare lodenn

Strategiezh c'hounit ar produiñ laezh bio ?

Penaos diskouez eo an dek faktor berzh pennañ bet bodet e skeudenn 3 (p. 67) diazez ur wir strategiezh c'hounit evit ar broduerien hag ar gevredigezh. Aze emañ an dalc'h.

Un nebeud elfennoù hag un nebeud menegerioù a zo bet laket war wel a-uc'h (kenaoz al laezh, kementad ha priz al laezh, dedaolad hollek an atalier laezh, koustoù produiñ, marz kriz... gounit muioc'h en ur labourat nebeutoc'h), met re zisheñvel eo pep talvoud hiniennel evit tennañ un disoc'h hollek a-walc'h diwar-benn efedusted ar strategiezh bet lakaet e pleustr.

Ar goulenn a bouez a sav ennomp-holl neuze a zo : penaos muzuliañ efedusted ar strategiezh implijet gant ar broduerien, en ur zegas da soñj eo efedusted gentañ ar broduerien mirout strizh kaier kargoù al laezh bio evit kenderc'hel da vezañ testeniekaet.

Se a zo kaoz e vo ret kregiñ gant un nebeud displegadurioù diwar-benn ar menegerioù a-raok kinnig disoc'hoù ar c'hêrioù laezh bio hag astenn anezho evit a sell efedusted ar strategiezh heuliet ganto.

4.1 Ar menegerioù hag o azasted

An evezhiadennoù amañ da-heul a dalvez evit an embregerezhioù dre vras hag evit ar c'hêrioù laezherezh evit lod anezho dreist-holl.

4.1.1 Diwar-benn ar menegerioù dre vras

Ur meneger e-unan ne dalv ket kalz a dra ; heuliañ anezhañ a-hed an amzer a zo ur mod dija da greñvaat e ster. Gwelloc'h eo kaout un nebeud menegerioù robust evel-just (tanavaet e vez ar c'heleier pa vez re anezho koulskoude) heuliet war ur c'houlz amzer hir a-walc'h.

Ouzhpenn-se, ret eo bewech ma c'halled keñveriañ ho tisoc'hoù gant reoù ar memes gennad micherel⁴⁰⁶. Un doare mat eo evit dielfennañ ho nerzhioù ha dinerzhioù, evit gwellaat pe gadarnaat tachenn-mañ-tachenn.

⁴⁰⁶ Kinniget e vez gant Bank Frañs da skouer stobadoù menegerioù dre c'hannad.

War tachenn askorusted ar gêr eo ar reñverad korvoiñ kriz (RKK) ur meneger eus ar c'hentañ evit dielfennañ disoc'hoù ur gounezerezh. Jedet e vez hep derc'hel kont eus derannadoù d'an traoladoù hag eus an elfennoù arc'hant ha dreistordinal. Klotañ a ra gant barregezh penn embregerezh da « c'hounit arc'hant » war e vicher⁴⁰⁷.

Ret eo bezañ war evezh koulskoude evit dielfennañ ar menegerioù hervez dezverkoù ar gennad micherel (sellet amañ dindan) hag evit ar pezh a dalvezont e gwirionez. Evel-se e oa bet divizet gant ar gouarnamant da skouer taosañ ar reñverad korvoiñ kriz da geñver raktres al lezenn arc'hant evit 2014. Trawalc'h evit lakaat un taol gurun da ziwan er batromelezh a damalle ar gouarnamant da gastizañ an embregerezhioù, ar re a vent etre a bost arc'hant e Frañs dreist-holl. Ha deuet ar gouarnamant war-gil, amzer dezhañ da gompren eo uheloc'h ar reñverad korvoiñ kriz pa emañ an traoladoù -hag ar postadur eta- war gresk⁴⁰⁸. Fazi an deraouer evel ma vez lâret !

Bez' ez eus dezverkoù diwar-benn menegerioù a zo evit ar gêrioù laezherezh, ar reñverad korvoiñ kriz da skouer ?

4.1.2 Diwar-benn reñverad korvoiñ kriz ar c'hêrioù laezherezh

Evit an embregerezhioù dre vras e vez diskontet ar mizoù koskor (goproù, kargoù sokial) evit jedañ ar reñverad korvoiñ kriz. Da lâret eo eo al labour, ul elfenn eus ar c'houst produiñ, ur c'houst eta. Ha dre ma eo ur c'houst, e c'heller pouezañ warnañ, digresk anezhañ, tra ma vez graet dioutañ, gant ar gêrioù laezherezh, pal an argerzh produiñ zoken. E doare ma n'eo ket ur c'houst moarvat met ur pal goprañ⁴⁰⁹.

Setu perak reñverad korvoiñ kriz ar gêrioù laezh e vez jedet hep diskontañ ar mizoù koskor. En ur seurt kenarroud e rank ar sevel saout gwarantiañ ul live uhel a-walc'h evit bastañ d'an ezhemmoù : resteuler, postañ, suraat ha bevañ⁴¹⁰ !

Se a zo kaoz eo ret bezañ evezhiek war ar menegerioù hag an doare da intent anezho, bet e-pad pell da skouer ar c'hementad laezh bloaziek dre vuoc'h ar pezh a gonte evit remziadoù produerien, tra ma tisklêri ur producer « Hor saout 4 000 l dre laezherezh ganto a zo spletusoc'h eget re a brodu 10 000 l⁴¹¹ ».

⁴⁰⁷ Lefever, S. *L'EBE : le premier indicateur de rentabilité de l'exploitation*, FDSEA80. (<https://fdsea80.fr/?s=1%27exc%C3%A9dent+brut+d%27exploitation+%3A+un+bon+indicateur+de+rentabilit%C3%A9>) (Consulté le 18/04/2021).

⁴⁰⁸ Pluyette, C. *Taxe sur l'EBE : Bercy modifie ses plans*, Le Figaro, 02/10/2013. <https://www.lefigaro.fr/impots/2013/10/02/05003-20131002ARTFIG00489-taxe-sur-l-ebe-bercy-modifie-ses-plans.php> (Consulté le 16/06/2021).

⁴⁰⁹ Dervillé, M. *Comment peut se construire la compétitivité des exploitations laitières aujourd'hui ?* 2018, *op. cit.*

⁴¹⁰ Maréchal, N. *Résultats Marge Brute Lait*, Avenir Conseil Elevage. <https://www.avenir-conseil-elevage.com/actualites/resultats-marge-brute-lait/> (Consulté le 15/02/2020).

⁴¹¹ Scohy, D. Témoignage F. Charles (22) : « Doubler le revenu en travaillant deux fois moins », *op. cit.*

An doare gwellañ a zo sur a-walc'h da geñveriañ e zisoc'hoù gant re ur strollad produerien en ur vezañ evezhiek ur wech adarre. Uheloc'h eo da skouer ezhemmoù arc'hant ur gêr he deus da bostañ eget ur gêr he madoù (savadurioù, mekanikoù) traolet ha n'he deus ket raktresoù postadurioù nevez da gas war-raok.

Daoust da se e vo lakaet war wel dre venegerioù foran an embannadennoù bet studiet da-geñver ar memor-mañ -ha n'int ket atav klok nag unvan eus an eil kêr d'eben- disoc'hoù ekonomikel, sokial ha kevredigezhel ar c'hêrioù laezh bio.

4.2 Menegerioù an disoc'hoù ekonomikel

Ar roadennoù dastumet a vo kinniget e stumm taolennoù en ur lakaat war wel an disoc'hoù pennañ war produiñ al laezh bio, en ur gregiñ gant ar produiñ laezh hag e dalvoudekaat.

4.2.1 Menegerioù produiñ ha talvoudekaat al laezh

Meur a zezverk bet lakaet war wel a-uc'h a zo kadarnet dre venegerioù ar skeudennoù 4.1, 4.2 ha 4.3 (s.o. p. 71).

Da gentañ penn, ar produiñ laezh bio bloaziek dre vuoc'h a zo etre 3 500 l hag ouzhpenn 5 000 l, un diferañs a bouez war-dro 50 % a ziskouez groñs n'eo ket hepken dre ar c'hementad laezh e denn ar borduerien o c'horvoder. Gwelet e vez ivez eo ar produiñ laezh bio bloaziek dre vuoc'h war-dro pe ouzhpenn 20 % izeloc'h eget ar produiñ laezh boas.

Gouennoù saout an tropelloù (hag ar mod da vegañ anezho sur a-walc'h) o deus ivez efedoù kreñv war feur danvezenn druz (etre 44,4 g/l ha 52,7 g/l) ha proteek (etre 34 g/l ha 38,1 g/l) al laezh bio, ar pezh a bouez war priz al laezh a zo etre 20 % ha 50 % uheloc'h er mod bio eget er mod boas.

Peogwir e c'heller chom berr gant menegerioù ar produiñ laezh hag e dalvoudekaat e vo poursuiet an dielfennadur war tachenn an efedusted ekonomikel.

4.2.2 Menegerioù efedusted ekonomikel

Menegerioù 6 skouer a vo dielfennet a-raok astennañ an dachenn da geñveriadur ar c'hêrioù laezh boas ha laezh bio (ur standilhon ledan e Frañs gant 96 kêr laezherezh, un hanterenn e mod boas hag an hanterenn all e mod bio, hag ur standilhon bihanoc'h e Breizh gant 22 kêr laezherezh, un hanterenn e mod boas hag un hanterenn all e mod bio ivez).

Skeudenn 4.1

Menegerioù produiñ ha talvoudekaat al laezh un nebeud kêrioù laezh bio

Menegerioù	Skouer 1 ⁴¹²	Skouer 2 ⁴¹³	Skouer 3 ⁴¹⁴	Skouer 4 ⁴¹⁵	Skouer 5 ⁴¹⁶	Keitad GIEE ⁴¹⁷	Skouer 6 ⁴¹⁸
Laezh produet dre vuoc'h			3 913 kg	4 400 l	3 760 l	4 412 l	3 500 l
Feur danvezenn druz			45 g/l	44,4 g/l	48,7 g/l	45,3 g/l	52,7 g/l
Feur proteek			34 g/l	35,4 g/l	35,5 g/l	34,1 g/l	38,1 g/l
Priz al laezh (dre 1000 l)	425 € ⁴¹⁹ (2016)		474 € (2017)	513 € (2018)	514 € (2016/2017)	433 € (2016/2017)	515 € (2016)

Skeudenn 4.2

Menegerioù produiñ laezh kêrioù gall laezh boas ha bio^{420,421}

Meneger	Keitad kêrioù laezh boas	Keitad kêrioù laezh bio
Laezh produet dre vuoc'h	6 547 l	5 162 l (- 21,1 %)

Skeudenn 4.3

Menegerioù produiñ laezh kêrioù breizhat laezh boas ha bio^{422,423}

Meneger	Keitad kêrioù laezh boas	Keitad kêrioù laezh bio
Laezh produet dre vuoc'h	6 512 l	5 234 l (- 19,6 %)

⁴¹² Moëlo S. ha Stervinou M. *Produerien laezh bio*, Le Télégramme, Spered ar vro, *op. cit.*

⁴¹³ Bignon, E. « *Le sol et l'herbe sont les moteurs de notre système* », RéussirLait, *op. cit.*

⁴¹⁴ Guyot, V. *Lait réussir le passage en bio*, La France Agricole, *op. cit.*

⁴¹⁵ Segrafo / Chambres d'agriculture de Bretagne, *GAEC de Kerdennet*, *op. cit.*

⁴¹⁶ L'Éleveur laitier, « *Être en bio low cost, c'est gagner plus et travailler moins* », *op. cit.*

⁴¹⁷ *Op. cit.* (167). Keitad ar GIEE (Groupement d'intérêt économique et environnemental) eo produer ar skouer 5 izel, hag a vod ur strollad 25 saver saout, en o-zouez div drederenn e mod bio (an holl saverien e mod bio hiziv an deiz : pennad-kaoz gant Isabelle Pailler, kuzulierez war ar laezh bio ha kustum e Kambr rannvroel labour-douar Breizh, d'an 3 a viz Du 2021).

⁴¹⁸ Institut Élevage, *Réflexion globale et combinaison de techniques originales pour un système autonome*, *op. cit.*

⁴¹⁹ Etre 420 € ha 430 € e-lec'h etre 280 € ha 290 € evit al laezh boas, e-maez ar c'hoprou kalite.

⁴²⁰ Terra, *Comparaison bio et conventionnel : une étude nationale « Cedabio »*, *op. cit.*

⁴²¹ Keñveriadur etre keitad 96 kêr-laezhreth gall (48 e mod boas ha 48 e mod bio).

⁴²² Terra, *Comparaison bio et conventionnel : une étude nationale « Cedabio »*, *op. cit.*

⁴²³ Keñveriadur etre keitad 22 kêr-laezhreth breizhat (11 e mod boas ha 11 e mod bio).

Dre ar skeudenn 5.1 (s.o. p. 73) e c'heller lakaat war wel eo pouezus en dedaolad hollek an atalier laezh an dedaolad kig a zeu eus gwerzh pratenned ha leueioù. E doare ma eo marz kriz an atalier laezh uheloc'h eget priz al laezh ! Seul izeloc'h eo kargoù an oberiadennoù⁴²⁴, seul vrasoc'h eo ar marz kriz evel-just.

Ur goulenn a bouez a sav diwar-benn ar skoazelloù politikerezh boutin al labour-douar. Ma eo, hiziv an deiz, ul elfenn a bouez eus korvoder ar broduerien bio (114 €/1 000 l evit al laezh bio e-skoaz 49 €/1 000 l evit al laezh kustum⁴²⁵), ez eus riskloù e vefe harpet en dazont emdroadur war ar bio kentoc'h eget an oberezh bio end-eeun. Ar c'houst boued, izel evit ar produiñ laezh bio dre vras, a zigresk seul vui e reer gant ur sistem geotegek emren pe dost. Lakaat lodenn ar geot hag ar geot peuret da greskiñ a zo ouzhpenn-se evel ul loc'henn evit kompezañ perzhioù ekonomikel hag endroel⁴²⁶.

Evit a sell ar reñverad korvoiñ kriz (RKK), ur meneger eus ar c'hentañ evit dielfennañ disoc'hoù ar gounezerezh (s.o. p. 69), eo an niver en tu-hont da 50 %⁴²⁷ eus an dedaolad hollek (skeudenn 5.1 p. 73). Ne c'haller ket dielfennañ ar menegerioù-se o-unan hep ober ur sell war keñveriadur keitad ar c'hêrioù laezh boas ha laezh bio⁴²⁸ (skeudennoù 5.2 ha 5.3 p. 74).

Souezhus a-walc'h eo an disoc'hoù. Diouzh un tu eo un tamm mat izeloc'h kentoc'h keitad reñverad korvoiñ kriz ar c'hêrioù laezh bio e feur o dedaoladoù hollek (evit ar standilhon broadel pe ar standilhon rannvroel breizhat) eget ar 6 skouer bet dielfennet a-uc'h. Ha diouzh un tu all, ma eo un tamm mat uheloc'h ar meneger-se evit ar c'hêrioù laezh bio er standilhon broadel (40 % e-lec'h 33 %, da lâret eo 90 € ouzhpenn dre 1 000 l laezh), eo an diferañs tanavoc'h evit ar standilhon rannvroel breizhat (43 % e-lec'h 40 %). Met uheloc'h eo eget hini ar standilhon broadel (43 % e-lec'h 40 %).

Peadra da chom gant un nebeud diaezamantoù evit gallout displegañ an disoc'hoù-se (a vareoù disheñvel koulskoude) a zo, nemet e vefe kadarnaet gant produerien a zo o-unan efedusted o mod produiñ laezh, da lâret eo, petra eo o emzalc'h e-keñver stad o c'hêrioù. Setu perak eo dastumet o savboent er skeudenn 6 (p. 74). Kendrec'het eo ar broduerien gant efedusted ekonomikel o mod produiñ laezh bio dre ma e c'hellont talañ ouzh ezhemmoù arc'hantel o c'hêrioù ha personel war un dro. Kejañ a ra, berr-ha-berr, efedusted ekonomikel uheloc'h ar gêrioù laezh bio (dre ar reñverad korvoiñ kriz e dregantad an dedaolad hollek) gant savboent pozitivel ar broduerien war o micher.

⁴²⁴ Mizoù sevel saout dreist-holl.

⁴²⁵ Pennad-kaoz gant Isabelle Pailler, kuzulierez war ar laezh bio ha kustum e Kambr rannvroel labour-douar Breizh, d'an 3 a viz Du 2021.

⁴²⁶ Dervillé, M. *Comment peut se construire la compétitivité des exploitations laitières aujourd'hui ? op. cit.*

⁴²⁷ N'eo ket heñvel disoc'h ar skouer 5 dre ma eo gwreg penn ar gêr goprad ar *Gaec*.

⁴²⁸ En ur notenniñ eo bet embannet ar studi e dave e 2013.

Skeudenn 5.1

Menegerioù efedusted ekonomikel un nebeud kêrioù laezh bio⁴²⁹

Menegerioù ⁴³⁰	Skouer 1	Skouer 2	Skouer 3	Skouer 4	Skouer 5	Keitad GIEE	Skouer 6
Dedaolad hollek	162 000 €			671 €	655 €	538 €	751 €
Dedaolad laezh			474 €	513 €	514 €	433 €	515 €
Dedaolad kig					141 €	105 €	112 €
Kargoù an oberiadennoù ⁴³¹	16 000 €			143 €	91 €	118 €	
Marz kriz				521 €	564 €	420 €	
Skoazelloù PBLD ⁴³²				173 €	101 €		
Koust produiñ ⁴³³		448 €					399 €
Koust boued	25 € ⁴³⁴	61 €	40 € ²⁶	46 € ⁴³⁵	26 € ²⁶		29 €
Kargoù stabil	61 000 €			218 €			
RKK ⁴³⁶ a-raok labour	85 000 €	294 €		482 €			
% Dedaolad hollek	52,5 %			57 %	40 % ⁴³⁷	57 % ⁴³⁸	58 %
Kargoù arc’hantel	50 000 €			154 €			
Arc’hant laosk evit an dud labour	35 000 €			328 € ⁴³⁹			
Produusted labour an atelier laezh							1 248 hl/UL ⁴⁴⁰

⁴²⁹ Ar memes skouerioù ha re er skeudenn 4.1.

⁴³⁰ An holl venegerioù a zo en €/1 000 l war-bouez ar re a zo meneget en % ha war-bouez ar skouer 1 (an disoc’hoù a zo hollek evit ar bloavezh 2016 - 2017, ar maread adalek ar 01/04/2016 betek an 31/03/2017), nemet ar c’houst boued a zo ivez en €/1 000 l.

⁴³¹ Mizoù sevel saout dreist-holl : ensperiadur, frejoù medis-in-loened ha produioù ar sal c’horho ; nebeud pe brenadenn ebet koazhadur, temz ha produ fitoyec’hed.

⁴³² PBLD : politikerezh boutin al labour-douar.

⁴³³ E-maez labour.

⁴³⁴ Koazhadur ebet.

⁴³⁵ Hanter voued-chatal, hanter goazhadur.

⁴³⁶ RKK : Reñverad korvoiñ kriz.

⁴³⁷ Da notenniñ zo eo gwreg penn ar gêr goprad ar *Gaec*.

⁴³⁸ Pennad-kaoz gant Isabelle Pailler, d’an 3 a viz Du 2021, *op. cit.*

⁴³⁹ En o zouez 50 € evit an dispignoù sokial.

⁴⁴⁰ UL : Unvez labour (UMO : Unité de main-d’œuvre).

Skeudenn 5.2

Menegerioù produiñ laezh kêrioù gall laezh boas ha bio⁴⁴¹

Meneger	Keitad kêrioù laezh boas	Keitad kêrioù laezh bio
RKK ⁴⁴² a-raok labour	171 €	261 €
% Dedaolad hollek	33 %	40 %

Skeudenn 5.3

Menegerioù produiñ laezh kêrioù breizhat laezh boas ha bio⁴⁴³

Meneger	Keitad kêrioù laezh boas	Keitad kêrioù laezh bio
RKK ³² % Dedaolad hollek	40 %	43 %

Skeudenn 6

Savboent un nebeud produerien⁴⁴⁴ war efedusted o mod produiñ laezh bio

Skouer 1	Tri den gopret, gant ur produiñ etre 350 000 ha 400 000 litrad laezh ar bloaz, ar pezh n'eo ket posupl evit ar nann-bio.
Skouer 3	Dae askorusted a zo talet ivez war a seblant.
Skouer 4	Ur marz kriz uheloc'h eget priz al laezh (gwerzhañ ar pratenned hag al leueioù a c'holo ouzhpenn holl gargoù an oberadiennoù). Un efedusted ekonomikel da vat : an arc'hant laosk evit an dud labour a zo dereat evit goprañ mat a-walc'h an daou geveler hag evit talañ ouzh an endalc'hioù bank.
Skouer 5	Ur marz kriz uheloc'h eget priz al laezh. Uhel a-walc'h eo ar RKK evit gwarantiñ ur varregezh emarc'hantañ vat en ur dalañ ouzh an ezhemmoù prevez bet paeet ar goprad a zo gwreg penn kêr war un dro. Ar skoazelloù arc'hant a zo nebeutoc'h eget 50 % eus ar RKK.

⁴⁴¹ Ar memes kêrioù ha re er skeudenn 4.2.

⁴⁴² Reñverad korvoiñ kriz.

⁴⁴³ Ar memes kêrioù ha re er skeudenn 4.3.

⁴⁴⁴ Ar memes kêrioù ha re er skeudennoù 4.1 ha 5.1.

Splann a-walc'h eo ne c'hell ar broduerien laezh bio tizhout an disoc'h-se nemet en ur heuliañ ar pennaennoù bet displeget a-uc'h : kas war-raok ur sistem produiñ « *low cost* » diazezet war an emerenezh boued pe dost, ober war-dro an tropell dalc'mat evit gwellaat anezhañ, arnodiñ ingal war pep tra ha mestroniañ ar postadurioù (en ur lakaat ostilhoù e boutin dre ur gevelourie implij binvioù labour-douar pe en ur zileuriañ al labourioù bras da embregerezhioù labour-douar : ELD⁴⁴⁵) evit dere'hel ur c'horvoder laosk uhel a-walc'h, da lâret eo dereat. Ar pezh a zo easoc'h dezho ivez dre ma ne anavez ket -betek-henn da nebeutañ- priz al laezh neuennadoù er filierenn laezh bio evel er filierenn laezh boas.

Met ar broduerien a venn ivez, ouzhpenn ur c'horvoder laosk dereat, aozioù bevañ evit ma c'hallfent bevañ e kenglotadur gant ar gevredigezh, ar pezh a vo displeget dre ar menegerioù sokial.

4.3 Menegerioù an disoc'hoù sokial

Evit a sell ar menegerioù a glot gant ar gevredigezh, an amzer labour eo an hini kentañ. Penaos aozañ, gwellaat pe gwellekaat e amzer labour evit kaout amzer vak evit ar familh, evit prederiañ d'e raktresoù, evit stummañ, evit enklask, e berr gomzoù evit bezañ ur c'heodedour digor war ar gevredigezh a ziskouez e breder evit an dazont.

An efedusted sokial dre an amzer laosk a vez degaset ganti hag an derez digoradur war ar gevredigezh a zo ivez ul loc'henn evit arnodiñ, neveziñ hag azasaat ha dre se suraat ha kreñvaat an efedusted ekonomikel⁴⁴⁶.

Evel eo bet graet diaraok e vo dastument er skeudenn 7 (p. 76) savboent produerien en ur zerc'hel ar memes skouerioù pa eo posupl.

Ar skouerioù bet dielfennet a ziskouez ne vez ket atav un troc'h dre ret etre prederiadennoù ekonomikel ha sokial. Ar c'hontrol eo memes. En ur lakaat e pleustr ur sistem produiñ emren pe dost -da lâret eo « *low cost* »-, en ur verañ an tropell gant gouennoù azasaet (pinvidik o laezh en danvez talvoudus, halañ a-stroll, goro ur wech bemdez,...), en ur zileuriañ labourioù a zo hag en ur boellekaat hag eeunaat al labour d'ar muiañ e c'hell ar broduerien tizhout efedusted ekonomikel, sokial hag endroel (s.o. amañ dindan).

Berr-ha-berr eo an efedusted sokial, dre amzer vak degaset ganti hag an derez digor war ar gevredigezh, ul loc'henn evit arnodiñ hag azasaat ha kreñvaat an efedusted ekonomikel evel-se. Da lâret eo e c'heller, e ranker kentoc'h, kas war-raok efedusted ekonomikel hag efedusted sokial en ur c'helc'h frank evit ijinañ an dazont en un doare seder.

⁴⁴⁵ ELD : Embregerezh labour-douar (ETA : Enreprise de travaux agricoles).

⁴⁴⁶ Dervillé, M. *Comment peut se construire la compétitivité des exploitations laitières aujourd'hui ? op. cit.*

Skeudenn 7

Menegerioù efedusted sokial un nebeud kêrioù laezh bio⁴⁴⁷

Skouerioù	Obererezhioù	Disoc'hoù
Skouer 1	<p>Sevel gouennoù saout solutoc'h eget ar re Holstein, reoù a vez aesoc'h ober war o zro.</p> <p>Goro ar saout ur wech bemdez gant ur arsav etre ar 15 a viz Kerzu hag ar 1añ a viz Meurzh ha halañ a-stroll en nevezamzer.</p> <p>Bezañ aveet gant ur sal c'horho efedus evit aozioù labour mat.</p> <p>Dileuriañ holl al labourioù er parkeier.</p> <p>Goulenn servijoù ur stroll implijerien evit erlec'hiañ ar broduerien pa gemeront amzer vak.</p>	<p>Skañvaat ar c'harg labour ar muiañ ar gwellañ evit kaout amzer vak, ur c'halite mat a vuhez familh dreist-holl (ha termeniñ ar postadurioù en dafar war un dro).</p> <p>Kemer peder sizhun vakansoù e miz Eost.</p> <p>A-drugarez d'an doare d'ober arboellus en ur lezel dezho amzer vak, produerien laouen a c'hounit mat o buhez.</p>
Skouer 5	<p>Mererezh ar sevel saout diazezet war an emrenerezh, ar goro ur wech bemdez gant un arsav daou viz e-pad ar goañv ha halañ a-stroll en nevezamzer.</p> <p>An tropell en e bezh kaset d'an hesk fin miz Kerzu d'an diwezatañ.</p> <p>Ur plas bras graet d'ar gevelouri implij binvioù labour-douar ha d'an embregerezh labour-douar evit dastum ar geot.</p> <p>Ezel eus ar <i>GIEE</i> « <i>Explorons la biodiversité</i> » eo ar <i>GAEC</i>⁴⁴⁸, ur stroll 25 kêr geotegek (div drederenn e bio), bolontez dezho d'en em geñveriañ ha da genderc'hel da vont war-raok a-stroll en ur heuliañ poell ur sistem arboellus.</p>	<p>Dibab ar goro ur wech bemdez a zo hollbouezus evit kalite bevañ ar familh.</p> <p>Ouzhpenn bezañ doujus d'an endro e laka ar sistem produiñ implijet da glotañ efedusted ekonomikel ha kalite ar vuhez.</p> <p>A-benn ar fin, gounezet e vez muioc'h, labourat e vez nebeutoc'h hag en ur dermeniñ an arc'hantañ e vo aesoc'h treuzkas ar benveg labour.</p>
Skouer 6	<p>Mererezh ar sevel saout diazezet war an emrenerezh, ar goro ur wech bemdez a-hed ar bloaz ha halañ a-stroll en nevezamzer.</p> <p>An tropell kaset d'an hesk kreiz miz Kerzu.</p> <p>Dibab gouennoù saout mat-kenañ da reiñ laezh eus ar c'hentañ evit an dienn hag an amann ha sevel anezho evit tizhout 7 laezherezh well-wazh.</p> <p>Barregezh ar broduerien da arnodiñ ha da beurgempenn dalc'hmat o sistem produiñ.</p> <p>Taolenn-stur diazezet war pevar meneger, tri anezho ekonomikel, ar pevare endroel.</p>	<p>Poellekaet hag eeunaet e vez al labour d'ar muiañ evit aesaat an erlec'hiadur gant ur goprad.</p> <p>Gwevned bras en aozadur al labour degaset gant ar goro ur wech bemdez ; echu e vez gant ar redi diouzh ar mintin.</p> <p>Ur vicher evit ar pevare amzer ; nevezamzer : halañ, hañv : gouennadur ha stokañ ar geot, diskaramzer : fin al laezherezhioù hag aozañ ar bloaz da zont (pradoù ha loened), goañv : heskiñ ha prederiañ al loened ha kemer amzer ivez evit ar raktresoù personnel.</p> <p>Div sizhun vakansoù an hañv, un nebeud deizioù e-pad ar vakansoù-skol ha dibennoù-sizhun a-hed ar bloaz.</p> <p>Ur sistem efedus-tre a laka da glotañ korvoder, labour hag endro, sinergizhoù gounit etrezo.</p>

⁴⁴⁷ Ar memes kêrioù ha re er skeudennoù 4.1 ha 5.1.

⁴⁴⁸ Stroll labour-douar da diekaat e boutin (GAEC : Groupement agricole d'exploitation en commun).

Evel e vo gwelet bremañ, kemer a ra perzh ivez an efedusted gevredigezhel en ar c'helc'h frank-se.

4.4 Menegerioù an disoc'hoù kevredigezhel

Ar broduerien, ibiliet en o c'horf an disheñvelidigezh (evit ar sistem produiñ « *low cost* » koulz ha desevel an tropell), kemeret ganto an hent da vont dre hentennoù dazeilat evit prederiañ al loened o deus lakaet o doareoù ober teknikel da emdreiñ. Gopret gwelloc'h da labourat hervez ar patrom-se, e fell dezho neveziañ dalc'hmat ha kemer perzh, en o zu, en dalc'hoù kevredigezhel.

Ar skouerioù dastumet er skeudenn 8 (p. 78) a ziskouez splann eo ar sistem produiñ izelgoust (« *low cost* »), ar sevel saout (dre ar gouennoù desavet, ar mod d'ober war-dro al leueioù, an annoared hag ar saout laezh, an doare da brederiañ anezho) ha produioù ar gêrioù (pe vefe al laezh gwerzhed evel danvez laezh diaoz pe treuzfurmet war al lec'h) ur patrom da gas war-raok diwallerezh ar vevliesseurtes (hag ar maezioù), digresk krignerezh an douareier, ar reoliñ hinel, mad al loened ha da glotañ gant goulenn ar vezezerien niverus, hiviz an deiz, da vrientekaat boued yac'hoc'h. Laket eo bet war wel a-uc'h e c'hell ar broduerien a-drugarez d'ar sistemoù laezherezh geotegek ha d'ur mererezh arboellusoc'h kaout goprou uheloc'h. Ma vez dalc'het kont ouzhpenn eus an disoc'hoù gortozet evit an endro, ar vevliesseurtes hag ar maezioù eo ar bilañs pozitivel-tre evit ar gevredigezh. Setu perak eo ken pouezus all d'ar broduerien reiñ da c'houzout o chemet d'ar gevredigezh (dre vanifestadgoù evel fest al laezh bio, kêrioù digor...) evit ma cheñchfe he sell war ar vicher labour-douar ha produer laezh dreist-holl.

Hag ar programmoù a zo war ober, pa vefe ar raktres war digresk al louc'h karbon (e kêr arnod Trévarez⁴⁴⁹) pe ar programm « Kêr laezherezh izelgarbon » arnodet aboe 2014⁴⁵⁰, a zo merkoù eus bolontez ar broduerien da vont pelloc'h war an dachenn-se. Un engouestl kevredigezhel kreñv eo. Respont a ra a-benn ar fin ar pennad-mañ d'an dalc'h : bez' eo ar produiñ laezh bio ur strategiezh c'hounit evit ar broduerien hag ar gevredigezh ? Ur strategiezh c'hounit eo evit an holl obererien a sell ar patrom-se outo hep mar ebet, da lâret eo kalz pelloc'h en tu-hont d'ar broduerien da gentañ-penn evit an treuzfurmiñ, an dasparzherezh, ar bevezerezh en ur zalc'her kont eus dalc'hoù an endro hag ar gevredigezh. Evit diverrañ ur strategiezh roerig-kaverig eo.

Lakaet eo bet war wel gant an elfennoù bet displeget war an dachennoù ekonomikel, sokial ha kevredigezhel eo ar broduerien hag ar gevredigezh degemererien ar c'helc'h frank savet gant ar produiñ laezh bio.

⁴⁴⁹ Magazine Penn ar Bed, *Ferme expérimentale de Trévarez : Améliorer la production laitière*, op. cit.

⁴⁵⁰ Pouliquen, F. *Les éleveurs laitiers lancent la chasse aux émissions de gaz à effet de serre*, op. cit.

Skeudenn 8

Menegerioù efedusted kevredigezhel un nebeud kêrioù laezh bio⁴⁵¹

Skouerioù	Obererezhioù	Disoc'hoù
Skouer 1	Implij danvezioù naturel ar gêr : ar geot. Peuriñ pradennoù un tregont spesad disheñvel bennak enno. Ne vez ket troet ar pradennoù evit harpañ kempouez ar plant hag al loened eta.	Mirout mat an douaroù hag ar vevliesseurtes. Gwareziñ an endro gant ar stokañ karbon (gwir puñs karbon ar geot).
Skouer 2	Ur strategiezh kreizet war pradennoù liesspesadoù, an agronomiezh ha digresk an enkasoù.	Pep tra a vez kaset war-raok, en o zu, evit harpañ ar vevliesseurtes, stokañ ar c'harbon hag an holl bleustroù frank evit stourm ouzh tommadur an hin.
Skouer 3	Graet e vez gant hentennoù dazeilat evit prederiañ al loened : implij plant, nadozwanerezh, osteopatiezh, homeopatiezh ha fitoterapiezh.	Difennet louzaouiñ boas ar medisin-loened er mod bio, an hentennoù dazeilat kaset war-raok a zo un elfenn a bouez ivez eus mad al loened.
Skouer 4	Monedusted ar saout d'ar peuriñ ha geot peuret ar muiañ ar gwellañ.	Monedusted d'ar peuriñ : un elfenn kreiz eus mad al loened.
Skouer 5	Hentenn voueta an tropell diazezet war ar geot peuret pe stoket hepken.	Ur sistem produiñ doujus eus an endro.
Skouer 6	An holl c'horread labour-douar talvoudus a zo e stumm pradennoù pad. Un hentenn maenadel a genaoz magañ ar vuoc'h hag an douar, evit gwellekaat enteuziñ ar maenadoù gant ar plant Savet ur c'houenn saout stank e laezh e « <i>béta-caséïnes de type A2</i> » treizuhsoc'h hep degas allergiezh.	Chemet ar produer evit mestroniañ an enkasoù, emrenerezh boued an atalier laezh en ur skoulmañ sinergizhioù etre al loen, an douar hag ar blantenn. Pebezh argerzh frank evit an endro ! Un arguzenn nevez evit yec'hed an dud.
Skouer 7 ⁴⁵²	Adober girzhier war ar gêr gant ur produer.	Un doare da virout ouzh krignerezh an douareier ha da harpañ ar vevliesseurtes war un dro... ha mad al loened.
Skouer 8 ⁴⁵³	Labourioù enklask war digresk louc'h karbon al laezh.	Goude daou vloaz enklask eo digresket war-dro 5 % louc'h karbon ar gêr arnod a oa izel dija e deroù ar raktres.
Skouer 9 ⁴⁵⁴	Programm « Kêr laezherezh izelgarbon » arnodet aboe 2014.	Prometet he deus filierenn al laezh digresk he gazoù efed ti-gwer eus 20 % ac'hann 2025, kêr ha kêr.
Skouer 10 ⁴⁵⁵	Implij an niverel gant ar mekanikoù evit hadañ pe temzañ ar pezh a zo ret nemetken, pe evit heuliañ an tropell hag evezhiañ an halañ.	Kas war-raok ul labour-douar modern ha doujus eus an douaroù al loened hag an endro.
Skouer 11 ⁴⁵⁶	Yaourtoù izelgarbon aozet gant ur produer.	Ul louc'h karbon tost da 25 % nebeutoc'h eget ur yaourt industriel.
Skouer 12 ⁴⁵⁷	Laezh bio a galite testenikaet « Bleu Blanc Cœur ».	Kinnig d'ar muiañ-niver ur boued en un doare kempouesoc'h en Oméga 3, lipid hollbouezus evit hor yec'hed.

⁴⁵¹ Ar skouerioù 1 betek 6 a glot gant ar memes kêrioù ha re er skeudenoù 4.1, 5.1, ha 7.

⁴⁵² Ouest-France, *Finistère. Pour nourrir ses vaches l'hiver, il a remplacé le soja par le lupin, op. cit.*

⁴⁵³ Magazine Penn ar Bed, *Ferme expérimentale de Trévarez : Améliorer la production laitière, op. cit.*

⁴⁵⁴ Pouliquen, F. *Les éleveurs laitiers lancent la chasse aux émissions de gaz à effet de serre, op. cit.*

⁴⁵⁵ Le Borgne, J. *L'agriculture 2.0 trace son sillon, op. cit.*

⁴⁵⁶ Le Borgne, J. *L'éleveur produit des yaourts bas carbone, Le Télégramme, op. cit.*

⁴⁵⁷ Bleu Blanc Cœur, *le label du bien manger, op. cit.*

Dav eo lakaat da dalvezout koulskoude e rank ar broduerien mont un tamm mat pelloc'h eget kaier kargoù al laezh bio dre o fleustroù liesseurt (emrenezh boued an atalier laezh, mererezh an tropell diazezet war gouennoù azasaet, halañ en nevezamzer, goro ur wech bemdez...) evit tizhout an disoc'hoù-se ha da gentañ penn efedusted ekonomikel o c'hêrioù.

Evit se e c'hellont kontañ ivez war ar strolladoù labour e kemeront perzh enno (evit deskiñ pe gouzout hiroc'h diwar-benn teknik-mañ-teknik ha keñveriañ an disoc'hoù) ha war kuzulioù aozadurioù arbennik, kuzulierien kambroù al labour-douar dreist-holl (Stignad « *Innov'action* » Kambroù labour-douar Breizh da skouer evit kas war-raok nevezadurioù lakaet e pleustr gant al labourerien-douar evit an dud labour-douar⁴⁵⁸) evit azasaat o c'hêrioù ha neveziñ dalc'hmat da brientiñ amzer da zont ar gennad.

Dre an efedusted ekonomikel, sokial ha kevrevigezhel bodet en ur c'helc'h frank hag an neveziñ war ar stern bepred, eo ar patrom kaset war-raok gant ar broduerien laezh bio, war a seblant, peurvat ha padus.

Ret eo koulskoude klask respont d'un nebeud goulennoù reizh. Daoust ha padus eo ar patrom-se da vat ? Kenderc'hel a raio da gresk ha gant peseurt lusk pe mont a raio war stabilaat ? Bez' ez eus riskloù e vefe un distroenn duadur pe un enkadenn bennak evel an enkadennoù o deus skoet ar filierenn laezh boas ? Setu an dalc'h a vo studiet en pempvet lodenn : Peseurt dazont evit filierenn broduiñ al laezh bio ?

⁴⁵⁸ Le Télégramme, Chez Vous, Ploéven, *L'exploitation de la famille Nédélec présente ses innovations*, 26/06/2021.

Pempvet lodenn

Dazont filierenn broduiñ al laezh bio ?

Efedusted ekonomikel, sokial ha kevredigezhel ar produiñ laezh bio a zo diazezet war un nebeud pennaennoù bet lakaet war wel a-uc'h hag un endro lañsus a-wechoù hag enep mui pe vui gwechoù all.

Ret e vo arsellout berr-ha-berr an elfennoù-se evit klask diarbenn emdroadurioù da zont ar produiñ laezh bio hag an endro a sell dioutañ, ar pezh n'eo ket gwall aes dija. Evel-se e c'hell al lezennadur war al laezh bio emdreiñ ha dont da vezañ figusoc'h-figusañ a-hed an amzer diouzh un tu hag ar produiñ laezh boas emdreiñ war-zu pleustroù frankoc'h diouzh un tu all. Hag ouzhpenn-se e c'hell al lezennadur sellout ouzh al laezh boas ivez ha meur a elfenn all an endro, yec'hed an dud, mad al loened hag all. Ret e vo ivez ijinañ dispac'hoù all, da lâret eo nevezadennoù terriñ a c'hallfe degouezhout war an tachennoù-se, ar pezh a zo diaesoc'h c'hoazh.

Goulennataet e vo an dalc'hoù-se dre un dielfennadur strategel diazezet war ur benveg anavezet mat evel « *SWOT*⁴⁵⁹ » e saozneg, « *FFOM*⁴⁶⁰ » e galleg ha « *NDTG*⁴⁶¹ » e brezhoneg (gant aozer ar memor-mañ) (s.o. ar skeudenn 9 « Dielfennadur strategel filierenn al laezh bio » p. 82).

Evel e oa bet emdroadur produusted al labour-douar disoc'h meur a faktor : teknik, agronomek, energiezh mekanikel, mekanikoù galloudus, ludu ha dibab mat plant ha hadoù (s.o. lodenn gentañ p. 11) e vo an dazont dindan levezon meur a faktor ivez : agronomiezh (bevliesseurded, sinergiezh etre ar plant), teknik (implij an niverel, naouegezh artifisiel, mekanikoù bleinet dre GPS da skouer), genetek ha kalz a draoù all sur a-walc'h. Niveruso'h-niverusañ e vo an dud da vagañ war ar bed (7,7 miliard bremañ, 9,7 miliard e 2064 gant ur c'hresk dibaouez a-raok un diskar da 9,7 miliard e 2100⁴⁶²) ; hag evit produiñ 1 000 kalorienn e stumm kig, ret eo kaout div pe deier gwech muioc'h gorread labour-douar eget evit produiñ anezho e stumm edaj (s.o. lodenn gentañ p. 11).

⁴⁵⁹ Teskanv diwar ar saozneg : Strengths, Weaknesses, Opportunities, Threats.

⁴⁶⁰ Forces, Faiblesses, Opportunités, Menaces.

⁴⁶¹ Nerzhioù, Dinerzhioù, Troioù, Gourdrouzoù.

⁴⁶² 6médias, *La population mondiale va-t-elle décliner ?* Capital, 15/07/2020. <https://www.capital.fr/economie-politique/la-population-mondiale-va-t-elle-decliner-1375344> (Consulté le 26/10/2021).

Ar boazioù produiñ a zo o cheñch dre ar bed ivez : kêrioù a-blom evit produerezh legumaj da skouer (pas c'hoazh evit ar produiñ laezh !). Heñvel dra gant ar boazioù debriñ : treiñ a ra tud zo ouzh an danvezioù plant hag an amprevaned. Da lâret eo e rank ar c'hêrioù laezh evel an embregerezhioù labour-douar hag agrobouedel dre vras bezañ troet ouzh an amzer da zont.

Gwir eo, evel e tiskouez an teulfilm « *Le dernier des laitiers*⁴⁶³ » bet skignet war Tébéo d'an 9 a viz Gwengolo 2021, e c'hellfe chom e Breizh, diouzh al lusk-mañ, nemet un toullad produerien laezh e penn dek miliadoù a saout kraouiet gant robotoù-goro ? Bez' e vo ar broduerien a-vremañ en arvar da vont da get pe bez' ez eus senarioioù all ? Goude bezañ adkaset da soñj gant an teulfilm eo ar vuoc'h ur geotdebrer -da lâret eo ul loen a zebr nemet glasvez sañset, ar pezh a glot gant ar pennaennoù heuliet gant ar broduerien laezh bio a zo bet meneget a-uc'h- div filosofiezh disheñvel a zo lakaet war wel evit ar produiñ laezh bio hag ar produiñ laezh boas.

Evit ar produiñ laezh bio, ar c'horvoder eo ar pezh a gont da gentañ ha diazezet eo war mestrioniañ ar c'houstoù produiñ. Ouzhpenn-se, gwerzhet e vez -keroc'h betek-henn- peogwir e asant bevezerien zo da baeañ ur priz uheloc'h evit talvoud en deus evito al laezh bio hag ar produioù a vez graet gantañ e marc'hadoù lec'hel pe broadel kentoc'h. Evit ar produiñ laezh boas eo ret d'ar broduerien ober gant prizioù divizet hervez lezenn ar c'hinnig hag ar goulenn war ar marc'had broadel ha muioc'h-mui war ar marc'hadoù diavaez, da lâret eo ar marc'had bedel, izeloc'h o frizioù (kevezañ diroll Aostralia ha Zeland-Nevez dreist-holl). Evit tennañ ur c'horvoder hag izelaat ar c'houstoù, er blegenn-se, e rank ar broduerien en em lakaat da redek war-lec'h ment o c'hêrioù ha ment o zropelloù -ha brasaat anezho hep ehan- hag emgefreakaat al labourioù (robot-goro...).

Kement-se lavaret, sellomp a-dostoc'h ouzh ar skeudenn 9 p. 82 « Dielfennadur strategel filierenn produiñ al laezh bio » evit studiañ an daou zanvez pennañ, an endro diabarzh : « Nerzhioù / Dinerzhioù » hag an endro diavez : « Troioù / Gourdrouzoù » gant ar pal difraostañ an dazont kement ma c'haller ha lakaat kemman ar patrom produiñ.

Da gentañ e vo displeget an endro diabarzh gant e nerzhioù hag e zinerzhioù. Hag evit a sell ouzh an dinerzhioù e vo istimet penaos e vefe tu da reizhañ anezho.

5.1 Nerzhioù ha dinerzhioù an endro diabarzh

Dre an nerzhioù e c'hello ar broduerien tennañ splet eus an holl anaoudegezh ha chemet dastumet betek-henn ganto. En ur gemer harp war an tuioù kreñv-se e vo aesoc'h dezho diarbenn dalc'hoù ar produiñ laezh bio warc'hoazh.

⁴⁶³ L'Hours, D. *L'agonie des éleveurs laitiers filmée par Mathurin Peschet*, Le Télégramme, 27/02/2021.

	Skog pozitivel	Skog negativel
Faktor diabarzh	<p>Nerzhioù (<i>Barregezhioù ar broduerien</i>)</p> <ul style="list-style-type: none"> • Tizhout an efedusted teknik, genetek ekonomikel, sokial ha kevredigezhel. • Disheñvelaat (diwar kaier kargoù al laezh bio ha diwar mammennoù all), krouiñ gwerzh ouzhpennet ha talvoudekaat anezhi. • Kenwerzhelañ al laezh da gevredigezhioù produerien a zegas goprouñ reisoc'h dezho. • Fardañ produioù war al lec'h evit gwerzh war-eeun pe gwerzhañ anezho e rouadedoù kenwerzh nes hag e pretierezh stroll. • Rannañ, eskemm titouroù, skiant-prenet ha disoc'hoù evit araokaat, rakwelout, arnodiñ ha neveziñ. 	<p>Dinerzhioù (<i>Dilañs ar c'hêrioù laezh</i>)</p> <ul style="list-style-type: none"> • Galloud kevraouerezh kenwerzhel gwan ar broduerien e-keñver an dastumerien/treuzfurmerien (nemet ober gant kevredigezhioù produerien). • Kizidigezh ar sistem boued-chatal ouzh an argemmoù hin eus an eil bloaz d'egile. • Nebeutoc'h a c'hallusted evit kenderc'hel da zigreskiñ ar c'houstoù produiñ (nemet mont pelloc'h war an emrenerezh en energiezh dre banelloù fotovoltaek (dizaliet an unvezioù mikrometanaat hag ar robot-goro er produiñ laezh bio). • Dilerc'h nozus an halañ a-stroll war ar c'hinnig laezh d'al laezherioù. • Kehentiñ diavaez re verr c'hoazh e-keñver ar vevezerien hag ar gevredigezh war ar boazioù mat heuliet gant ar broduerien evit gounit an douar ha sevel an tropell.
Faktor diavaez	<p>Troioù (<i>Endro a-du</i>)</p> <ul style="list-style-type: none"> • Cheñchamantoù mat el lezennoù pe er reolennoù evit ar produiñ bio (steuñv « <i>Ambition Bio 2022</i> ») evit degas lañs d'ar bio. • An ekoreizhiad hag yec'hed an dud : sujedoù pouezusañ a-hed an amzer. • Ul log marc'had (broadel hag etrebroadel) hag e chom war gresk ? • Hentoù nevez evit disheñvelaat dre ar sistem produiñ. • Krouiñ gwerzh ouzhpennet en ur dreuzfurmiñ war al lec'h ha diorren ar werzh war-eeun pe e rouedadoù nes evit ma vefe kresket ar marzioù. 	<p>Gourdrouzoù (<i>Emdroadur ar produiñ hag ar marc'had</i>)</p> <ul style="list-style-type: none"> • Chom a raio ul log marc'had ? Kenderc'hel a raio da gresk ha gant peseurt lusk pe mont a raio war stabilaat, war zigresk (e-kreiz ur c'hinnig produioù diseurt-kenañ : lec'hel...) ? • Riskloù dreistproduiñ laezh bio kreñvaet gant tredeogiezhoù ar PBLD kentañ 2023-2027 (azasaat ar c'hementadoù evit mirout an talvoud) ? diouer a adkemerien sevel saout bio ? • Boazioù debriñ o cheñch (troet ouzh an danvezioù plant hag an amprevaned). • Penaos lakaat ar produioù bio da vezañ digor d'ar rummoù kevredigezhel izel pa eo ar galloud-prenañ preder kentañ ar vevezerien ? • Diaes lakaat al lezenn <i>EGalim</i> e pleustr evit reiñ an tu d'al labourerien-douar da vezañ gopret en un doare din en ur rannañ gwelloc'h an talvoud etre aktourien ar filierenn.

5.1.1 Nerzhioù evel barregezhioù ledan ar broduerien

Bet displeget dija pizh-kenañ a-hed ar memor-mañ barregezhioù ar broduerien ne vo dalc'het amañ nemet ar pennaennoù hag a c'hallfe kadarnaat o dibaboù strategel dindan hir amzer mui pe vui.

Teier fennaenn pennañ a c'hell bezañ lakaat war wel e dave d'ar skeudenn 9 p. 82 :

- Muioc'h a youl-sevel evit azasaat binvioù ha hentennoù labour.
- Muioc'h a werzh ouzhpennet evit gwarantiñ korvoder ar gêr.
- Muioc'h a gemer perzh e rouedadoù tud a vicher evit diorren ur spered digor.

A-hend-all, e rank ar broduerien bezañ emskiantek eus an diaesterioù a c'hell gwanaat o c'hêrioù ha bezañ prest da dalañ outo.

5.1.2 Dinerzhioù evel diaesterioù ar c'hêrioù laezh da ziabenn

Evel a-uc'h, ne vo dalc'het amañ nemet ar pennaennoù hag a c'hallfe lakaat en arvar padusted ar c'hêrioù war verr dermen pe dindan hir amzer mui pe vui.

Teier fennaenn pennañ a c'hell bezañ lakaat war wel ivez e dave d'ar skeudenn 9 p. 82 :

- Muioc'h a c'halloud kevraouiñ d'ar broduerien pe d'ar c'hevredigezhioù produerien -dre al lezenn *Egalim 2* dreist-holl- en o darempredoù kevratel.
- Muioc'h a ziaesterioù da boursuiñ politikerezh ar c'houstoù izel (dre ur sistem geotegek emren dreist-holl).
- Muioc'h a gehentiñ diavez war boazioù mat o micher evit sevel ar pezh a c'hell lakaat harz e-keñver ar vevezerien evit prenañ ar produ-mañ-produ.

Ar pennaennoù pennañ bet lakaet war wel a-uc'h, al loc'henoù evel ar skoilhoù evit diorren padusted ar c'hêrioù laezh bio, a zo, evel-se, anavezet mat a-walc'h.

Diaesoc'h eo anavezout kenkoulz troioù ha gourdrozoù ar c'hêrioù laezh bio, ar gourdrozoù dreist-holl, ar pezh a vo ensellet bremañ.

5.2 Troioù ha gourdrozoù an endro diavaez

Evit sevel strategiezhioù da gas ar c'hêrioù laezh bio war-raok eo ret d'ar broduerien anavezout troioù o gennad ha penaos tapout anezho.

Met ret eo dezho anavezout ivez ar gourdrozoù ha gouzout penaos ijinañ an doare ma c'hellint talañ outo ha gwelout ar broduerien laezh bio en amzer-da-zont.

5.2.1 Troioù evel un endro a-du war meur a dachenn

Bez' ez eus un endro a-du dre vras ha pa vefe ar gouarnamant, ar gevredigezh hag ar vevezerien pe ar broduerien o-unan, dre ar pennaennoù pennañ-mañ (e dave d'ar skeudenn 9 p. 82) :

- Muioc'h a vio bepred, diouzh c'hoantoù ar gouarnamant (steuñv « *Ambition Bio 2022* »), da lâret eo e vefe ar bio ur patrom kreskiñ ha n'eo ket ur c'hiz ?
- Muioc'h a evezh taolet gant a dud ouzh an ekoreizhiad hag o yec'hed eget na veze graet kent.
- Muioc'h a volontez diskouezet gant ar broduerien bremañ evit disheñvelaat o danvez diazez (al laezh) pe krouiñ gwerzh ouzhpennet en ur dreuzfurmiñ al laezh pe un darn anezhañ war al lec'h ha gwerzhañ ar produioù e rouedadoù nes.

Un diazez a-bouez a c'hell bezañ lodennoù disheñvel an endro a-du evit dazont ar produiñ laezh bio, met ret eo d'ar broduerien teurel evezh ingal war ar gourdrouzoù a c'hell dont diwar emdroadur ar produiñ hag ar marc'had laezh bio pe ar produioù aozet gantañ.

5.2.2 Gourdrouzoù evel ur produiñ hag ur marc'had war ziorren plaen ?

Ral a wech e c'hell un embregerezh derc'hel ur savlec'h ekonomikel a-du hep lakaat da ziwanañ ar c'hevezañ, da lâret eo izelaat ar prizioù da skouer. Ar gourdrouzoù pennañ a c'hell bezañ dezverket dre an nebeud pennaennoù-mañ (e dave d'ar skeudenn 9 p. 82) :

- Ur marc'had war astenn gant prizioù war zigresk evit filierenn ar produioù laezh bio ?
- Riskloù dreistproduiñ war berr pe grenn dermen (kreñvaet gant tredeogezhoù ar PBLD kentañ 2023-2027 (s.o. p. 48 ha p. 88/89) ? diouer a adkemerien sevel saout bio ?
- Ar boazioù debriñ o cheñch : peseurt plas evit ar boued loenel -ha peseurt boued loenel- er bevañs warc'hoazh ?
- Hep disoñjal emdroadur stummoù nevez al labour-douar.

Pouezus-kenañ eo, n'eo ket hepken evit ar broduerien laezh bio met evit an holl re a gemer perzh er filierenn al laezh bio bezañ emskiantek ouzh ar c'hudennoù a c'hell lakaat he dazont en arvar. Bez' ez eus faktorioù a c'hell levezonañ ar produiñ laezh bio en un doare pozitivel ha reiñ lañs dezhañ evit e gresk, met bez' ez eus ivez skoilloù evit gwanaat dazont ar filierenn ha ma eo ret d'ar broduerien tennañ splot eus an troioù eo ret dezho ivez bezañ war evezh ha bezañ prest da respont buan d'ar gourdrouzoù. Ar c'hinnig kael lenn sintezek-se (s.o. skeudenn 9 p. 82) war filierenn produiñ al laezh bio a zo un digarez evit kemer uhelder a-fet ar filierenn ha ro un taol sikour evit gwellaat aozioù buhez, labour ha korvoder ar broduerien laezh hag anavezout ar c'hudennoù a c'hell degouezhout war grenn pe hir dermen.

An elfennoù gwellaat-se ha dalc'hioù pennañ ar filierenn laezh bio a vo studiet bremañ.

5.3 Dinerzhioù a c'hallfe bezañ talañ outo ?

Dinerzhioù zo a c'hall ar broduerien mont dreist aesoc'h eget lod all. Mestr a-walc'h eo ar broduerien war ar c'hehentiñ diavaez hag ar c'houstoù produiñ. Hag er c'hontrol, ne vez ket kemeret a-walc'h e kont galloud kevraouerezh kenwerzhel ar broduerien gant an dastumerien/treuzfurmerien. Hag evit a sell ouzh an hin hag e levezon war ar sistem geotegek e rank ar broduerien ober gant e argemmoù eus an eil bloaz d'egile, nemet kaout boued a-walc'h a-gostez evit o loened.

5.3.1 Reiñ da c'houzout chemet ar broduerien

Da vare ar rouedadoù sokial stank n'hall ket al labourerien-douar labourat pep hini en e c'horn ken. Digor a zle bezañ ar c'hêrioù d'ar vevezerien ha d'ar gevredigezh dre vras. An obererien ekonomikel-se a zo o klask muioc'h-mui a ditouroù war ar boued a vez kinniget dezho. Kas ur politikerezh kehentiñ ha kelaouiñ war-raok, aozañ emgavioù er c'hêrioù a zo un doare pleustrek nevez evit al labourerien-douar da reiñ da c'houzout o chemet. Ur sin vat pouezus-tre eo a-benn ar fin evit skoulmañ un darempred a fiziañs gant ar vevezerien (« *agriloving* » kentoc'h eget « *agribashing* » : s.o. p. 60).

E-touez an darvoudoù a zo niverus e Breizh hag e meur a rannvro all e Frañs e c'hellomp menegiñ seitekvet dalc'h fest al laezh bio eus an nav warn-ugent a viz Eost 2021 d'ar c'hwec'h warn-ugent a viz Gwengolo 2021. Un abadenn laouenek eo evit degemer an dud da zont da zizoleiñ perzhioù liesseurt ar c'hêrioù ha da rannañ ul lein vintin eus an dibab, bio ha lec'hel⁴⁶⁴ evel-just !

Gant an hevelep tro spered eo bet savet gant ar gevredigezh « *Agriculteurs de Bretagne* » « Dizoloadennoù e kêr » e 2020 evit degemer strolladigoù gweladennerien a c'hell eskemmañ war-eeun gant al labourerien-douar. Ar re o deus graet ur c'hammed war-raok a sant ul lorc'h bras da rannañ o fleustr ha da respont d'ar goulennoù war an doare da broduiñ o boued⁴⁶⁵

Da-geñver « Devezh bedel al laezh » 2021, d'ar 1añ a viz Even, aozadur etremichere⁴⁶⁶ al laezh en deus graet bruderezh en Télégramme evit sevel liammoù santimant etre al laezh (hag an engouestloù a zeu diwarnañ : diwall an endro, doujañ mad al loened ha reiñ lusk d'an tiriadoù) hag ar brenerien gant daou lugan : « A-gevret, savomp ur Frañs douar laezh padus » ha « Bodañ hon entanoù ha reiñ da c'houzout hor chemet : sed aze pal Frañs Douar Laezh !⁴⁶⁷ ».

⁴⁶⁴ Agence Bio, *La Fête du lait bio 2021*. <https://www.agencebio.org/agenda/la-fete-du-lait-bio-2021/> (Consulté le 22/09/2021).

⁴⁶⁵ Le Télégramme, *Découvertes à la ferme, un nouveau concept de visite*, 13/06/2021.

⁴⁶⁶ Da lâret eo, ar CNIEL (Centre national interprofessionnel de l'économie laitière).

⁴⁶⁷ France terre de Lait a zo ur gevredigezh bet krouiet e 2017 (goude enkadenn al laezh evel biskoazh e 2015) gant obererien filierenn al laezh (kevelourioù, produerien, industriourien).

Bez' ez eus un darvoud pouezus all hag a glot gant ar pezh a c'hortoz ar vevezerien hag ar gevredigezh dre vras : mad al loened. Evel-se eo bet gouestlet da vad al loened ha d'ar saverien loened saloñs etrebroadel ar sevel loened « Space 2021⁴⁶⁸ » kreiz miz Gwengolo 2021 e Roazhon, bet « Ar saver hag e loened, un hevoud rannet » tem an dalc'h nevez-se. Evit an dud a vicher eo gwallvrudet ar sevel-loened gant an dud dre ma tianavezont emdroadur an doareoù da zalc'her kont gwelloc'h eus mad al loened.

Ar broduerien a c'hell kontañ ivez war kêr arnod Trévarez evit kizidikaat, aliañ hag ambroug anezho dre he c'hefridi klask ha diorren war ar produiñ laezh bet krouiet 50 vloaz zo⁴⁶⁹. Da-geñver 50^{vet} deiz-ha-bloaz he c'hrouidigezh dorioù digor-frank kêr arnod Trévarez a zo bet dalc'het d'ar 1añ ha d'an 2 a viz Gouere 2021⁴⁷⁰. Trévarez eo ar gêr arnod nemeti e Frañs gant daou lec'h, an eil gant ur sevel saout boas, dister e louc'h karbon, hag ur sal-c'horro glasel, hag egile er mod bio (gounezet en agrobiologiezh penn-da-benn) gant ur robot-goro heloc'h. Peadra da respont da brederioù ar broduerien da-geñver an atalieroù bet aozet e-pad an dorioù digor hervez pevar ahel dreist-holl : teknikouriezh al laezh, teknikoù evit ur produiñ laezh bevus, produiñ laezh Breizh hag e atoudoù e-keñver an dalc'hoù kevredigezhel ha postadurioù spletus evit produiñ warc'hoazh.

Hag evit echuiñ ret eo menegiñ ivez eo bet skignet war FR3 evit ar wech kentañ, d'an dri a viz Ebrel 2021, un abadenn, « Kêr muiañ-karet ar Frañsizien », lusket gant Stéphane Bern. Diwar skouer « Kêriadenn muiañ-karet ar Frañsizien » e oa 14 kêr er genstrivadeg. Un digarez e oa bet da gejañ gant labourerien-douar entanet e Frañs a-bezh ha da rannañ o entan gant ar muiañ ar gwellañ a dud.

Kement-se a ziskouez ar strivoù splann graet gant ar broduerien hag an aozadurien etremicherel evit reiñ da c'houzout ar boazioù lakaet e pleustr hag o emdroadurioù. Daoust hag a-walc'h eo pe get ? Sklaer eo emañ ar filierenn war an hent mat.

Ouzhpenn-se daoust hag e c'hell ar broduerien mont pelloc'h ivez war hent emrenerezh o c'hêrioù gant ar pal poursuiñ digresk ar c'houstoù produiñ ?

5.3.2 Poursuiñ digresk ar choustoù produiñ

Ar broduerien laezh bio a zo deuet a-benn da gaout o emrenerezh penn-da-benn pe dost evit boued al loened, ar pezh a zo divizoù ret evit pouezañ war digresk o c'houstoù produiñ ha kempouez ekonomikel o c'hêrioù. Petra c'hoazh evit gwellaat o disoc'hoù : broudañ espern energiezh, emrenerezh ha koustoù produiñ izel ?

⁴⁶⁸ Le Borgne, J. *Un 35^e Space consacré au bien-être des animaux et de l'éleveur*, Le Télégramme, Économie, 01/09/2021.

⁴⁶⁹ Le Télégramme, Économie, *Trévarez : « des risques à la place des éleveurs »*, 02/07/2021.

⁴⁷⁰ Le Télégramme, Chez Vous, *50 ans d'expérimentation à la ferme de Trévarez*, 03/07/2021.

Lod eus ar c'hêrioù a zo aet pelloc'h war tachenn an emrenerezh en ur ziorren o emrenerezh energetek. Un araokadenn war tachennoù espern energiezh hag an endro, emrenerezh kêrioù ar broduerien en ur zerc'hel da zigreszk o c'houstoù produiñ dre banelloù fotovoltaek hag/pe unvezioù mikrometanaat⁴⁷¹ (dizaliet a-walc'h koulskoude evit ar sevel saout laezh bio dre ma ne zegas ket an tropelloù saout laezh bio kalz a zistaoladoù loened da bourvezañ anezho⁴⁷²).

Ouzhpenn-se, e c'hell ar broduerien laezh en em harpañ war araokadennoù teknologel all evit gwellaat efedusted ekonomikel o zropelloù : niverel ha naouegezh artifisiel war sikour ar broduerien laezh.

Kaoz a zo bet dija eus implij an teknologiezhioù niverel en trede lodenn (rouedadoù sokial, labour-douar ent resis : traktorioù gant GPS, heuliañ an tropell hag evezhiañ an halañ). Kaset e vo war-raok imlij an teknologiezhioù-se buan-tre dre ma int binvioù evit gwellekaat ar sevel saout, aesaat buhez ar broduerien ha reiñ tro dezho da geñveriañ ouzh produerien all evit lakaat pleustroù efedusoc'h da ziwanañ. Ha mont a ra an naouegezh artifisiel, evel an teknologiezhioù niverel, war sikour ar broduerien laezh ivez ?

Bez' ez eus muioc'h-mui a aveadurioù sturiet gant an naouegezh artifisiel, met arabat d'ar broduerien lakaat ur skoilh arc'hant re vras enno. Ar robot-goro, da skouer, a zegas aezamant labour met n'eo ket spletus war an dachenn ekonomikel ent strizh ma vez goroet ar saout ur wech bemdez hepken er produiñ laezh bio surtout. Ouzhpenn-se, e rank ar broduerien diwall diouzh industrieadur o fleustroù evit al laezh bio dreist-holl. Met se ne dalvez ket n'eus plas ebet evit an naouegezh artifisiel er produiñ laezh bio. En ur pennad eus ar gazetenn *La Tribune*⁴⁷³ e tispieg Christopher Demblik e rank gennad ar produiñ laezh derc'hel kont eus an naouegezh artifisiel evit gwellekaat ar produiñ, kreskaat an askorusted ha gwellaat mad al loened. Met n'eo ket gwall vrudet an naouegezh artifisiel e Frañs er gennad al labour-douar hervezañ er c'hontrol d'ar Stadoù-Unanet. Kavout a ra d'ar broduerien -e gaou- o deus kement tra a zo ezhomm gant ar robot-goro.

Ha bez' ez eus e gwirionez doareoù all ouzhpenn ar robot-goro d'ober gant an naouegezh artifisiel. A-ziwar un dastum roadennoù (dielfennadur al laezh, dielfennadur genomek ar vuoc'h, hentenn voueta, endro tost ar gêr) e vefe tu da rakwelout ar ouenn hag al lignez saout a zere ar gwellañ da bep endro evit gwarantiñ ar produiñ laezh gwellañ ha muioc'h a c'hounidoù gallus eta. An naouegezh a c'hell kas war-raok koustoù marc'had-matoc'h, diwar-benn emelloù medisin al loened da skouer. Gwellaet e vez ensperiadur artifisiel ar saout a-drugarez d'an

⁴⁷¹ Staes, C. *Deux contrats de transition écologique signés avec Emmanuelle Wargon*, Le Télégramme, *op. cit.*

⁴⁷² Hervez Isabelle Pailler, kuzulierez war ar laezh bio ha kustum e Kambri rannvroel labour-douar Breizh.

⁴⁷³ Dembik, C. Ekonomour, rener e Saxo Bank, *Comment l'intelligence artificielle peut venir au secours des producteurs laitiers*, La tribune, 13/09/2021. <https://www.latribune.fr/opinions/tribunes/comment-l-intelligence-artificielle-peut-venir-au-secours-des-producteurs-laitiers-892232.html> (Consulté le 25/09/2021).

naouegezh artifisiel en ur ziskouez ent resis ar mare ma eo dirik ar saout. Ul loc'henn eo evit gwellaat marzoù ar broduerien.

An deknologiezh-se a c'hell ivez bezañ lakaet e servij mad al loened. En ur deurel evezh ouzh talvoudoù disheñvel kenaoz al laezh e c'hell skoazeller niverel al laezh diskoachañ an talvoudoù diboell ha displegañ o orin resis. Ar boueta -pe ar cheñchamantoù boued- a vez a-wechoù kiriek d'an direizhderioù. A-wechoù all eo merk kentañ ur c'hleñved o tiorren (tanijenn ar vronn⁴⁷⁴). Ar brodier a c'hell kemer neuze ar diarbennoù a zere evit prederiañ diouzh ar gwellañ al loened.

Bez' ez eus faktorioù araokaat ar produiñ laezh bio ha pa vefe « Reiñ da ch'ouzout o chemet » (war ober pe graet dija evit ul lodenn vras) pe « Poursuiñ digresk ar c'houstoù produiñ » (gallusteroù bihanoc'h e-keñver an oberoù kaset da benn dija). N'eo ket tre ar memes tra evit elfennoù all a c'hell lakaat dazont filierenn produiñ al laezh bio en arvar. Lavaret e vez « sellout ouzh an dazont a cheñch anezhañ ». Setu ar pezh a vo graet bremañ.

5.4 Dalc'hioù pennañ filierenn broduiñ al laezh bio

Niverus eo ar faktorioù a c'hell pouezañ war diorren filierenn ar produiñ laezh bio. Sellet e vo amañ nemet ouzh ar pouesuzañ a denn d'an endro reoliek, d'an endro kevezus ha d'an endro « mezher ha yec'hed ».

5.4.1 Un endro reoliek mesket gant un tammig nec'hamant

War tachenn an endro reoliek eo troet prederioù ar broduerien ouzh politikerezh boutin al labour-douar (PBLD) hag ouzh al lezenn *EGalim* diwar-benn goproù al labourerien-douar ha diwar se e seblant tredegiezhioù nevez ar bio etre daou. Ar PBLD kentañ a vo lakaet da dalvezout etre 2023 ha 2027 (s.o. p.48) a rank sammañ muioc'h a atebegzh war an dachenn ekologel⁴⁷⁵ evel-just. Met an tredegiezhoù nevez n'int ket degemeret a-unvouezh gant al labourerien-douar hag o ensavioù⁴⁷⁶ hag ar filierenn bio an hini eo he deus kollet kalz.

Eus un tu e vo roet an hevelep skoazelloù PBLD⁴⁷⁷ d'ul labourer-douar bio pe destenikaet talvoudegezh uhel a-fet endro (TUE), ul label ha n'eo ket ken strizh hag al label bio⁴⁷⁸. Eus un tu all n'halla ket al labourerien-douar aet war-zu ar bio dija tennañ gounid eus skoazelloù a-ratozh ken, dre ma eo dija, hervez Ministrerezh al Labour-douar, ar marc'had goprus a-walc'h

⁴⁷⁴ Mammite e galleg.

⁴⁷⁵ Le Feur, S. Députée LREM du Finistère, « *La nouvelle Pac doit être écologiquement responsable. Pour cela il faut impérativement replacer la transparence en tête de nos préoccupations.* », Le Télégramme Forum, Tribune, 12/05/2021.

⁴⁷⁶ Le Télégramme Économie, *PAC : les nouveaux arbitrages ne font pas l'unanimité*, 22 mai 2021.

⁴⁷⁷ Le Borgne, J. *PAC : le ministre précise ses arbitrages*, Le Télégramme Économie, 15/07/2021

⁴⁷⁸ UFC-Que Choisir, *Label Haute valeur environnementale. Greenwashing de l'agriculture intensive ?* 11/01/2021. <https://www.quechoisir.org/actualite-label-haute-valeur-environnementale-greenwashing-de-l-agriculture-intensive-n87083/> (Consulté le 14/12/2021).

evito. N'eus nemet ar re o deus divizet mont war-zu al labour-douar biologel a vefe skoazellet diwar vremañ⁴⁷⁹. Ur poent hegaz pouezus eo⁴⁸⁰. Met un doare dereat eo evit ar gouarnamant da boulzañ ar c'hêrioù war-zu al labour-douar bio.

Ha pa gendalc'h ar bio d'en em astenn⁴⁸¹, bet 2020 ur bloavezh dreist evit ar produiñ⁴⁸² kenkoulz hag ar bevezerezh, ne vo ket tizhet palioù ar gouarnamant ac'hann fin ar pempbloaziad. Ne vo gounezet er mod bio nemet etre 12 ha 13 % eus ar gorread labour-douar talvoudus fin ar pempbloaziad pa oa 15 % ar pal uhel bet lakaet gant prezidant ar Republik. Diwar-se en deus roet, prezidant ar Republik, ur pal nevez betek 18 % e 2027⁴⁸³. Ministred europat al labour-douar o deus degemeret ivez ur steuñv ober uhelekoc'h c'hoazh evit gounit er mod bio 25 % eus an tachennoù labour-douar Unaniezh Europa ac'hann 2030 (e-lec'h 8,5 % hiziv an deiz). Met ar pal pennañ-se a zo ul lodenn eus un difrae hollek evit kas war-raok ar boued biologel, diorren ijinerezh treuzfurmiñ ar boued biologel ha ledanaat ar marc'hadoù⁴⁸⁴. Da lavarout eo e rank an eil hag egile mont da-heul an difrae-se evit lakaat anezhañ d'ober berzh.

Met n'eo ket aes rakwelout levezon ar PBLD kentañ war emzalc'h ar filieenn laezh bio. Gallout a rafe reiñ ur gwir lañs da emdroadurioù nevez ? Hep bezañ war riskl da goll produerien staliet er mod bio pell zo evit lod anezho ?

Ha bez' ez eus ur dra bennak nevez diouzh tu al lezenn *EGalim* diwar-benn goprou al labourerien-douar ? Chom a ra skoilhòu da lemel c'hoazh evit doujañ al lezenn *Egalim* da vat ? Nebutoc'h eget tri bloaz goude al lezenn *EGalim* bet votet e 2018 -hep berzh bras evit kresk goprou al labourerien-douar- eo bet ensellet gant ar gannaded un danvez lezenn, anvet « *EGalim II* », evit gwarantiñ ar gwellañ goprou d'al labourerien-douar. Met, burutellet eo bet diouzhtu⁴⁸⁵ gant an dreuzfurmerien hag an dasparzherien dreist-holl.

Deuet an danvez lezenn er Sened, fellout a ra d'ar senedourien efedusaat doare goprañ al labourerien-douar⁴⁸⁶. Rakwelet eo gant ar skrid nevez ensellet er Sened e vefe hollekaet kevratoù tri bloaz da nebeutañ etre al labourer-douar hag an treuzfurmer en ur zalc'her kont eus ar c'houstoù produiñ. Ha ne c'hallfe ket bet marc'hataet, etre an industriour hag an dasparzher, lodenn ar priz dediet da goust danvezioù diaoz al labour-douar.

⁴⁷⁹ Le Télégramme Économie, *PAC : les nouveaux arbitrages ne font pas l'unanimité*, 22 mai 2021, *op. cit.*

⁴⁸⁰ Le Télégramme, *À Paris, près de 300 manifestants contre la « bio à poil »*, *op. cit.*

⁴⁸¹ Le Télégramme, *Le bio continue de gagner du terrain*, 10 juillet 2021.

⁴⁸² 53 255 kêr er mod bio -13 % ouzhpenn ar bloaz a-raok-, tost da 12 % eus kêrioù Bro-Frañs, *op. cit.* (481).

⁴⁸³ Le Télégramme, *PAC : les nouveaux arbitrages ne font pas l'unanimité*, 22 mai 2021, *op. cit.*

⁴⁸⁴ Le Télégramme, *UE : feu vert des 27 pour viser 25 % d'agriculture bio d'ici à 2030*, 20/07/2021.

⁴⁸⁵ Le Télégramme Économie, *EGalim II sous le feu des critiques*, 23/06/2021.

⁴⁸⁶ Le Télégramme Économie, *La rémunération des agriculteurs devant le Sénat*, 21/09/2021.

Met, daoust ma eo kalonekaet gant ar gouarnamant politikereh nevez goprañ al labourerien-douar e chom strizh-tre e bouez war an dachenn-se. Ha n'eo ket sur e yafe an traoù war wellaat gant an enkadenn a zo bremañ ha pa grog ar c'hevraouerezh kenwerzhel etre an industriourien hag an dasparzherien evit 2022⁴⁸⁷.

Gant an enkadenn yec'hedel a ya war wellaat mui pe vui (pe get, n'ouzer ket re vat) e verzer un adlañs ekonomikel bedel kreñv gant ur c'hresk bras war prizioù a zo. Peadra da sevel ar galloud-prenañ evel preder kentañ ar Frañsizien. Ouzhpenn-se ez eus ur c'hevrezerezh taer etre an dasparzherien evit dedennañ ar glianted gant prizioù an izelañ ar gwellañ. Ez eus riskloù e vefe ar broduerien ur wech adarre kollerien ar stourm etre an industriourien hag an dasparzherien. Peadra da luskañ produerien a zo marteze da vont war-zu ar produiñ laezh bio abalamour da gavout ennañ goprou uheloc'h. Ha peadra da nec'hiñ ivez ar broduerien laezh bio evit a sell emdroadur prizioù o froduioù.

Ezhomm he deus filierenn al laezh bio e vefe lamet ar skoilhioù a-fet an endro reoliek, war ar prizioù dreist-holl, pa eo ret deomp bezañ emskiantek ivez eus pouez souvereniezh ar boued. Siwazh, n'eo ket sur e vefe an endro kevezus siouloc'h.

5.4.2 Un endro kevezus direizh en arvar

Al labour-douar biologel a zo ur patrom e-touez reizhiadoù labour-douar all ha n'eo ket aes d'ar vevezerien gouzout penaos disheñvelaat anezho evit dibab ar produioù a vefe ar gwellañ evito evit gwellekaat ar c'heñver perzhded/priz er servijoù rentet dezho.

Peseurt senarioioù dave e c'heller ijinañ evit ar produiñ laezh bio diwar-se ? Ne c'haller ket komz eus se hep gwelet da gentañ liesseurtes an anvadurioù hag al labelioù a c'hell lezel ar vevezerien etre daou soñj dirak ur c'hinnig ezoterek un tammig. Un ezhomm sklaeraat bras a zo evit ar vevezerien.

Bez'ez eus un nebeud anvadurioù all ouzhpenn al labour-douar biologel hag an testeniekaat talvoudegezh uhel a-fet endro bet meneget a-uc'h. Evel-se e vez kaoz bremañ eus al labour-douar adtiñvañ⁴⁸⁸ ar pezh a dalvez etre 3 % ha 4 % eus kêrioù Breizh⁴⁸⁹. Met petra eo al labour-douar-se a-benn ar fin ? Agroekologiezh, permakultur, labour-douar biologel, labour-douar adtiñvañ... an holl chapelioù-se eus al labour-douar padus o deus pleustroù boutin, al labour-douar adtiñvañ evel ar re all. Disheñvel eo koulskoude dre e balioù hag e dachenn obererezh a-ziforc'h : adtiñvañ an douaroù⁴⁹⁰.

⁴⁸⁷ Le Télégramme Économie, *Prix des produits alimentaires : le bras de fer va reprendre*, 23/09/2021.

⁴⁸⁸ Agriculture régénératrice ou de conservation.

⁴⁸⁹ Chapin, P. *La Bretagne veut favoriser l'agriculture régénératrice*, Le Télégramme Économie, 09/04/2021.

⁴⁹⁰ Youmatter, *Agriculture régénérative : définition - c'est quoi l'agriculture régénérative ?* 03/10/2019. <https://youmatter.world/fr/definition/agriculture-regenerative-definition-cest-quoi-lagriculture-regenerative/> (Consulté le 05/10/2021).

Disheñvel eo diouzh ar permakultur (a zo un argerzh kalz hollekoc'h) ha diouzh an agroekologiezh, al labour-douar biologel dreist-holl, peogwir n'eo ket difennet-groñs implij an diastuzerioù ar pezh ne c'heller ket ober el labour-douar biologel. Evel an isrann eus al labour-douar biologel e c'hell bezañ sellet ouzh al labour-douar adtiñvañ. Er fedoù, ez eus, daoust d'an diouer a label evit sklaeraat fraezh reolennoù al labour-douar adtiñvañ, doareoù pleustrek liesseurt d'ober : implij a ra lod pe get enkasoù. Met, digresk o implij ar muiañ ar gwellañ a chom an hentenn hollek bouezusañ⁴⁹¹.

Embregerezhioù bras labour-douar pe agrobouedel a zo dedennet gant an hentenn-se koulskoude⁴⁹². Evel-se eo youlek-tre engouestl Danone da gaout, e 2025, 100 % eus e zanvezioù diaoz al labour-douar diwar al labour-douar adtiñvañ, ennañ koulz al labour-douar kustum hag al labour-douar biologel⁴⁹³. Nestlé a zo ivez o vont war-zu al labour-douar adtiñvañ⁴⁹⁴. Rakwelet en deus da bostañ 1,1 miliard euro war tachenn al labour-douar adtiñvañ e-kerzh ar pemp bloaz da zont. Fellout a ra da Nestlé labourat dreist-holl gant 30 kêr laezh en 12 bro evit arnodin pleustroù al labour-douar adtiñvañ a c'hell bezañ lakaet da dalvezout a-vras.

Ha bez'ez eus meur a batrom labour-douar all tost pe dostoc'h an eil diouzh egile. Evel-se, hervez prezidant Interbev⁴⁹⁵ Breizh, e c'hell Breizh an hini eo a vag ur Frañsez diwar 3 ober gant doareoù labour-douar disheñvel : bio, pebeilat⁴⁹⁶ (*L'agriculture alternative regroupe différents systèmes de production très divers tels que : agriculture biologique, agriculture durable, agriculture intégrée, agroforesterie, permaculture...*), kustum. Ar bevezer en deus da zibab e tispleg prezidant Interbev Breizh⁴⁹⁷.

Evel-just e c'hell ar bevezer dibab. Met ne c'hell ket sur awalc'h dibab ervat en ur bed ken farlotet all. Daou skouer all a ziskouez brav eo ret d'ar bevezer kaout ur sell lemm ha gallout dibab e-unan.

Al laezh reizh, ur raktres europat anezhañ bet krouiet gant l'« *European milk board* » e 2019 goude harzoù-labour ar broduerien laezh en Europa⁴⁹⁸, a zo ur skouer gentañ. Ma eo goprou ar saverien saout laezh gwellaet ha gwarantet gant al laezh reizh⁴⁹⁹, ar pezh a zo bet lakaet war

⁴⁹¹ Youmatter, *Agriculture régénérative : définition - c'est quoi l'agriculture régénérative ? op. cit.*

⁴⁹² Fermes Leader, *Agriculture régénératrice n°1 - La nouvelle promesse d'une agriculture durable et vertueuse ?* 10/11/2020. <https://reseau.fermesleader.com/agriculture-regenerative-la-nouvelle-promesse-dune-agriculture-durable/> (Consulté le 06/10/2021).

⁴⁹³ Danone, *Agriculture régénératrice et projets soutenus*. <https://www.danone.fr/revolution-de-l-alimentation/les-projets-que-nous-soutenons.html#engag%C3%A9s> (Consulté le 06/10/2021).

⁴⁹⁴ Le Télégramme Économie, *Nestlé se tourne vers l'agriculture régénératrice*, 17/09/2021.

⁴⁹⁵ Interprofession bétail & viande.

⁴⁹⁶ Sarthou, J.-P. *Agriculture alternative : Définition*. *Dictionnaire d'Agroécologie*, 2018. <https://dicoagroecologie.fr/encyclopédie/agriculture-alternative/> (Consulté le 06/10/2021).

⁴⁹⁷ Le Gall, F. « *Garantir l'autonomie alimentaire de la France* », Le Télégramme, 21/04/2020.

⁴⁹⁸ Faire France, *Le lait équitable c'est quoi ?* <https://fairefrance.fr/le-lait-equitable-cest-quoi/> (Consulté le 06/10/2021).

⁴⁹⁹ Le Borgne, J. *Le lait équitable contribue à améliorer les revenus des éleveurs*, Le Télégramme 27/02/2021.

wel a-uc'h dija (s.o. p. 44 trede lodenn), an danvez a zo laezh kustum pe laezh bio aboe fin 2017⁵⁰⁰. Ar priz reizh paeet d'ar broduerien an hini eo e gwirionez mennozh al laezh reizh⁵⁰¹.

An amann « *Nature de Breton* »⁵⁰² a zo ur skouer all. Emañ kevelouri Sodiaal Kemper o paouez lañsañ un amann nevez anvet « *Nature de Breton* », ur produ aozet gant laezh Breizh nemetken gant ur pakadur paper adaozadus betek 96 %. Gant « *Nature de Breton* » e c'heller, hervez servij marketing an embregerezh, surfiñ war ar prederioù lec'hel hag endroel en ur virout prizioù marc'had-mat. Ne c'haller ket gouzout hiroc'h diwar-benn an danvez diaoz implijet, an aozioù produiñ dreist-holl, nemet eo laezh Breizh. Setu al laezh hag ar produ a vez graet gantañ deuet da vezañ un afer marketing da fougeal ar santimant aparç'hantiñ d'an tiriad Ur merk tiriadel eo « *Nature de Breton* », koulz lavaret.

Hag ar vevezerien o deus da zibab ar produ-mañ-produ en ur bed e vez kavet a-leizh a veizadoù, a labelioù, a desteniekaat lakaet war wel o dibarelezh gant ar servijoù marketing (produioù gant tra pe dra, hep tra pe dra, produioù da virout, da wareziñ, da harpañ, da wellaat, ... hep elfennoù a c'haller muzuliañ pe ventañ a-wechoù). An ezhomm sklaeraat a zo, hiziv muioc'h eget biskoazh, e-kreiz dalc'hoù talvoudekaat ar produioù.

Ouzhpenn klask respont d'ar goulennoù-mañ ret eo derc'hel kont eus ar stad ekonomikel nevez a zo trec'h goude diskoulm -mui pe vui- enkadenn yec'hedel ar « C'hovid-19 ». Eus un tu eo adlañset ar c'hendiviz war souvereniezh ar boued⁵⁰³. Eus un tu all e garfe d'an embregerezhioù gwerzhañ o froduioù keroc'h abalamour da gresk-kaer prizioù an danvezioù diaoz. Ha dreistproduiñ laezh bio (pe un digempouez kinnig ha goulenn da nebeutañ) a zo c'hoarvezet, war ar marc'had, evit ar wech kentañ gant al live-se pa eo aet ouzhpenn war zigresk bevezerezh ar produioù laezh bio war un dro. Peadra da lakaat filierenn al laezh bio en e bezh dindan vec'h ? Studiet e vo da gentañ peseurt plegenn he deus tapet filierenn al laezh hag ar produioù laezh e-keñver souvereniezh ar boued dre ma eo bet lakaet war wel gant enkadenn yec'hedel ar « C'hovid-19 » e oa poent adlañs ar c'hendiviz war an dachenn-se.

Ouzhpenn-se, un danevell savet gant ar Sened e 2019 a istime dija e c'hallfe Bro-C'hall anavezout he c'hentañ divigad labour-douar e 2023⁵⁰⁴. Met, e peseurt plegenn emañ filierenn al laezh hag ar produioù laezh evit gwir ? Diazezet mat eo souvereniezh al laezh hag ar produioù laezh ?

⁵⁰⁰ Faire France, *5 bonnes raisons de consommer le lait équitable* FaireFrance, Communiqué 30/01/2020. <https://www.lavoixdunord.fr/702580/article/2020-01-30/5-bonnes-raisons-de-consommer-le-lait-equitable-fairefrance> (Consulté le 06/10/2021).

⁵⁰¹ Faire France, *Le lait équitable c'est quoi ? op. cit.*

⁵⁰² Heurtebize, E. « *Nature de Breton* » : *le nouveau beurre de la coopérative Sodiaal*, Le Télégramme Économie, 24/09/2021.

⁵⁰³ Le Télégramme Économie, *Le débat sur la souveraineté alimentaire relancé*, 18/05/2021.

⁵⁰⁴ Le Télégramme, *Le débat sur la souveraineté alimentaire relancé*, op. cit.

E-keñver souvereniezh ar boued emañ filierenn kustum al laezh hag ar produioù laezh en ar blegenn gwellañ hag ar filierenn bio a zlefe degas ur c’hempouez mat pe dost. Kampioned an ezporzh eo produioù laezh Bro-C’hall ! 4 litrad laezh diwar 10 a zo ezporzhiet ha da 3,4 miliard euro e sav ar reñverad kenwerzh e 2016⁵⁰⁵.

Evit ar produioù bio dre vras eo an dregantad enporzhiañ bras pe vrasoc’h. Koulskoude, merzout a reer n’eus tost enporzhiañ ebet evit al laezh hag ar produioù laezh bio. Evel-se, e sav, hervez an « *Agence Bio, 2018*⁵⁰⁶ » feur enporzhiañ al laezh hag ar produioù laezh bio da 6,4 % e 2017. E doare ma emañ filierenn al laezh bio war hent an emrenerezh boued kentoc’h. A-hend-all eo meneget en danevell ar Sened ez eus ur gudenn gant ar produioù bio enporzhet abalamour da brederioù ar vevezerien evit an endro sañset. Setu perak, e c’hellfe, hervez an danevell-se, bezañ imboure’het hentoù ul « *labeladur super-bio* » a c’hallfe bezañ miret evit produioù ar rouedadoù nes. Peadra da greñvaat souvereniezh ar boued war tachenn al laezh hag ar produioù bio ma vez kaset da benn ar raktres-se.

Emañ priz ar produioù ivez ul lodenn diazez eus souvereniezh ar boued. Met n’eo ket endro c’hwezadur hollek ar prizioù ur faktor mat evit an embregerezhioù da werzhañ keroc’h o froduioù d’an dasparzherien ha d’ar broduerien da vezañ gopret gwelloc’h eta. Goprou ar broduerien a zo dindan vec’h muioc’h eget biskoazh ?

Galloud-prenañ, setu preder kentañ ar Frañsizien⁵⁰⁷ o deus aon e yafe o aozioù bevañ war washaat. Chwezadur ar prizioù, setu preder kentañ ar c’hevelourioù laezh⁵⁰⁸ hag an dasparzherien a fell dezho mirout galloud-prenañ ar vevezerien ha bezañ kevezus e-keñver an dasparzherien all.

Ar priz, setu preder priorek an industriourien⁵⁰⁹ hag al labour-douar a raio tu da « gêr Frañs » da adkavout pe da virout e souvereniezh boued hervez ar filierennoù. Da lâret eo eo ret cheñch al lezenn war breujoù ar boued bet embannet d’an 30 a viz Here 2018 (ar pezh a zo war ar stern), peogwir n’eus bet araokadenn ebet tri bloaz war-lerc’h hervez ar skolveuriad Olivier Mével⁵¹⁰.

⁵⁰⁵ La filière laitière française, *Un marché qui croît à l’export*. <https://www.filiere-laitiere.fr/fr/filiere-laitiere/un-marche-qui-croit-lexport>. (Consulté le 28/10/2021).

⁵⁰⁶ Meneget en « *Sénat, Rapport d’information du Sénat, Sur les financements publics consacrés à l’agriculture biologique* », *op. cit.*

⁵⁰⁷ Ladepeche.fr, *Présidentielle 2022 : le pouvoir d’achat en tête des préoccupations des Français*, 22/09/2021. <https://www.ladepeche.fr/2021/09/22/presidentielle-2022-le-pouvoir-dachat-en-tete-des-preoccupations-des-francais-> (Consulté le 11/10/2021).

⁵⁰⁸ Le Borgne, J. (Propos recueillis par), *Lait : « L’inflation ne doit pas être taboue »*, Le Télégramme Économie, 15/09/201.

⁵⁰⁹ Le Télégramme Économie, *Les industriels veulent augmenter leurs prix*, 30/09/2021.

⁵¹⁰ Le Borgne, J. (Propos recueillis par), *Alimentation : « Il faut absolument modifier la loi »*, Le Télégramme Économie, 20/05/2021.

Kement-se a ziskouez splann diaesterioù ar stourmoù da zont evit lakaat prizioù al laezh kustum evel al laezh bio da greskiñ a-walc’h evit degas goprouù dereat d’ar broduerien, evit ma vo lodennet ar gwerzh ouzhpennet en un doare reishoc’h etre aktourien ar filierenn.

Tra ma emañ goprouù ar broduerien dindan vec’h muioc’h eget biskoazh eo deuet kinnig ha goulenn al laezh bio da vezañ digempouez evit ar wech kentañ d’al live-se gant dreisproduiñ ha bevezerezh war zigresk war un dro. Peadra da brederiañ evit dazont tost pe belloc’h marc’had al laezh hag ar produioù laezh bio. Un darvoud grevus pe zister eo an darvoud-se ha dreistproduiñ al laezh bio dreist-holl ? Dreistproduiñ al laezh bio a zo un arouez dic’hortoz ne c’haller na devel warnañ na chom hep klask dielfennañ anezhañ.

Disklêriet eo bet gant Prezidant Sodiaal⁵¹¹ : gwall evezhius omp abaoe ar penn-kentañ ouzh ar c’hevazasaat etre ar c’hinnig hag ar goulenn. Un efed koublet div anadenn a zo bet ar bloaz-mañ (e 2021) hervezañ. Sac’het eo chomet ar bevezerezh eus un tu, da lâret eo ez eus bet un digresk anezhañ eus 9,6 % e miz Gouere. Doareoù hin ar bloaz dibar evit ar geot o deus roet ul lusk nevez d’ar produiñ eus un tu all, gant 15 milion a litrad laezh ouzhpenn. Gant an div anadenn bodet eo bet ret war verr dermen, evit talañ ouzh an dreistproduiñ, cheñch rummad da 10 % eus al laezh bio (da lâret eo gwerzhañ anezhañ evel laezh boas). Fiziañs a zo ennañ war grenn dermen koulskoude ha gervel a ra ar berzhidi all da ober kemend-all ha da eveshaat ouzh ar c’hempouezh kinnig/goulenn-se.

Met efed a zo eus un anadenn all ouzhpenn. Un enkadenn greskiñ eo, evel ma c’hoarvez goude pep prantad emdroadurioù a-leizh, hervez Isabelle Pailler, Kuzulierez war al laezh e Kamberrannvroel labour-douar Breizh. Tu a vefe, hervezi, da vestroniañ an enkadenn-se dre fredoù nevez hag en ur ambroug an emdroadurioù nevez gant doareoù disheñvel.

Koulskoude eo live an emdroadurioù kalz uheloc’h an taol-mañ eget an div wech a-raok. Klotañ a ra al luskad kentañ, fin ar bloavezhioù 1990 - deroù 2000, gant ganedigezh filierenn al laezh bio, an eil luskad, fin ar bloavezhioù 2000 - deroù 2010, gant enkadenn 2009 al laezh, hag an trede luskad adalek 2015⁵¹², hag a zo c’hoazh war ober⁵¹³, gant enkadenn 2015 al laezh.

Ha daoust ha respont a ra Prezidant Sodiaal d’ar goulenn a-bouez a sav e diabarzh ar filierenn : peseurt dazont emamp o prientiñ d’hor produerien laezh bio ? Pe bez’ ez eus un enkadenn o tont ?

⁵¹¹ Le Borgne, J. (Propos recueillis par), *Lait* : « *L’inflation ne doit pas être taboue* ». Le Télégramme, *op. cit.*

⁵¹² Produire Bio, *Filière lait de vache biologique : retour sur la vague de conversion 2015-2019*. <https://www.produire-bio.fr/articles-pratiques/filiere-lait-de-vache-biologique-retour-sur-la-vague-de-conversion-2015-2019/> (Consulté le 19/01/2022).

⁵¹³ Baron, B. chargé d’études Service Economie des Filières, Institut de l’Elevage, *La filière lait de vache biologique française : la 3^{ème} vague de conversion, un changement d’échelle, 6^{èmes} entretiens de l’Observatoire de la formation des prix et des marges des produits alimentaires*, 23/06/2021.

Embann enlinenn LCI⁵¹⁴ en deus lakaet war wel eo grevusoc'h ar pezh a zegouezh eget un darvoud dister. Al laezh bio a seblante bezañ espernet gant an dreisproduiñ betek-henn. Emañ ar filierenñ keñveriet gant se koulskoude, tra ma en deus kresket-kaer niver ar c'hêrioù bio eus 13 % warlene (e 2020). Bez' ez eus ouzhpenn e-leizh a c'hêrioù o vont war-zu ar produiñ laezh bio hag o tont war verr dermen da greskaat ar c'hinnig laezh bio (s.o. a-uc'h).

Boazet e oamp, abaoe un toullad bloavezhioù, ouzh plas brasoc'h-brasañ al laezh bio e renkennadoù ar gourmarc'hadoù. Emañ ar vevezerien o cheñch penn d'ar vazh hiziv an deiz. Gant produioù nevez int hoalet : laezh reizh, lec'hel pe hep OGM, gant ma vo dedennus o frizioù, da lâret eo eo 30 % keroc'h ur vrikennad laezh bio eget ur vrikennad laezh boas. Kement-se a zo kaoz ez eus un dreistproduiñ laezh hag un enkadenn war wel. Aet labourerien-douar a-leizh war-zu ar bio peogwir eo ar goprou dedennusoc'h, priz diazez 1 000 litrad en deus digresket, evit unan anezho da skouer, eus 441 € da 410 € etre 2020 ha 2021 (- 7 %) gant an enkadenn.

Peadra da lakaat embregerezhioù laezh da baouez krenn ar broduerien laezh boas da vont war-zu al laezh bio. Evel-se, en deus divizet Lactalis, an embregerezh kentañ evit al laezh bio (30 % rann varc'had) hag ar produioù laezh bio (13,5 % rann varc'had) e Frañs, lakaat termen da skoazelloù al laboreien-douar evit paseal er mod bio⁵¹⁵.

Bez' ez eus prederioù all eo ret lakaat war wel ken heñvelster int eus patromoù o cheñch pe eus savboentoù tud arbennik a c'hell levezoniñ ar vevezerien.

Evel-se, emañ gourstal kreiz-kêr strollad dasparzhañ *Casino*, *Monoprix*, gourstal gentañ evit ar bio klask adlansañ dazrann marc'had ar produioù lec'hel ha rannvroel⁵¹⁶. Hervez ar pennad kazetenn meneget⁵¹⁷ eo tachenn ar produioù lec'hel bevoc'h eget ar bio e prederioù ar vevezerien. Deuet eo ur cheñchamant ha buanaat en deus gant kenfinadurioù enkadenn yec'hedel ar « C'hovid-19 ». Hervez un enklask kaset da benn gant l'IRI⁵¹⁸ e fell da 39 % eus ar vevezerien prenañ muioc'h a broduioù lec'hel tra ma n'eus nemet 26 % a fell dezho prenañ muioc'h a broduioù bio. Un tuadur nevez beveziñ da dapout eo evit Monoprix a oa war-raok evit ar bio hag a-dreñv evit ar produioù lec'hel. Lakaet ar pouez gant Monoprix war al « lec'hel » ha bet daougementet ar gwerzhioù abaoe penn-kentañ ar bloaz (2021).

⁵¹⁴ LCI, *Lait bio : pourquoi la France en produit trop*, 11/09/2021. <https://www.lci.fr/societe/video-lait-bio-pourquoi-la-france-en-produit-trop-2196048.html> (Consulté le 06/10/2021).

⁵¹⁵ L'Usine Nouvelle, *Comment Lactalis veut devenir numéro 1 mondial du bio*, 03/03/2020. <https://www.usinenouvelle.com/article/comment-lactalis-veut-devenir-numero-1-mondial-du-bio.N935694> (Consulté le 13/10/2021).

⁵¹⁶ Mestayer, T. *Monoprix veut rattraper son retard sur le local*, Le Télégramme, 09/10/2021.

⁵¹⁷ Mestayer, T. *Monoprix veut rattraper son retard sur le local*, Le Télégramme, *op. cit.*

⁵¹⁸ Information Resources Incorporated (Institut d'études spécialisé sur les produits de grande consommation), *op. cit.* (516).

Setu lakaet war wel kevezerezh etre ar bio hag al « lec'hel », bez' ez eus riskloù e yafe dazrann marc'had al « lech'el » war ziorren ha war liesseurtaat, diwar-goust ar bio ? N'eo ket ar respont anat, met ar c'heñver perzhded/priz a vo ur faktor a bouez, ma eo un tamm mat marc'had-matoc'h ar produioù lec'hel dreist-holl. Un diskoulm a vefe marteze dre strollañ « bio ha lec'hel » pe « lec'hel ha bio » evit unvaniñ an daou veizad. Un digarez a vefe marteze da grouiñ ul label nevez (s.o. ul « *labeladur super bio* » p. 93). Met ar priz a vo atav un dezverk a- bouez evit distignañ prenadenn ar bevezer, un dra a zo sur. Evit al laezh hag ar produioù laezh, produioù diazez ma'z eus, petra eo asant paeañ ar bevezer evit an dezverk biologel ?

Ha n'eo ket ar pezh a vo dispeglet bremañ a teuio da zislavarout ar bennaenn-se (s.o. p. 41 ha 42 ivez). En ur pennad-kaoz gant an Télégramme⁵¹⁹ en deus disklêriet Jean de Kervasdoué⁵²⁰ eo ar gwir gant ar gouarnamant da broudañ kresk skalfad al labour-douar en ur c'houverkañ ne glot ket se gant ar marc'had a c'houll produioù standart ha marc'had-mat. Ur produ bio n'eo ket anezhañ bep taol, ouzhpenn-se, ur produ a-feson hervezañ. Hag eñ da ouzhpennañ : daoust d'ar pezh a lavar an dasparzherezh bras a ra e varzoù a-drugarez da se, n'eo ket bet diskouezet e oa ar produioù bio gwelloc'h evit ar yec'hed. Ur brezegenn dic'hortoz a-walc'h a broui n'eus unsoñjerezh ebet diwar-benn ar bio hag e emdroadur.

Talvezout a ra n'eus dazont lañsus ebet evit ar bio a chomo ul log marc'had ? Pe e c'hellfe marc'had ar bio mont war-zu ar beveziñ a-vern, prizioù ar produioù tennet war-draoñ, ar gwashañ tra a c'hell degouezhout d'ar broduerien laezh bio ha d'o goprou ? Prizioù o froduioù a-feson a zo evito un ezhomm bras evit dont a-benn da vevañ en un doare dereat diwar o froduerezh.

Met ar prizioù a zo hiziv an deiz e-kreiz an holl vreudoù d'ar mare ma eo ar galloud-prenañ preder brasañ an dud. Ha n'eo ket an abadenn bet skignet war Arte d'an 12 a viz Here 2021⁵²¹ a c'hallfe degas ur arouezenn vat bennak d'ar broduerien ken tenn-spontus ar c'hevreaouerezh kenwerzhel etre an industriourien hag an dasparzherien diwar goust ar broduerien peurliesañ. Setu perak o deus ezhomm ar broduerien da vezañ harpet gant al lezenn « *EGalim 2* » evit gwareziñ o goprou en darempredoù kenwerzhel gant an industriourien hag an dasparzherien. Bet degemeret da vat « reolennoù nevez ar c'hoari »⁵²² gant ar Parlamant, gant ma vefe ar gwir gant ministr al labour-douar en deus disklêriet : « *le texte permettra d'agir réellement sur les rapports de forces en permettant de garantir la marche en avant du prix et en apportant de la transparence* ».

⁵¹⁹ Mestayer, T. (Propos recueillis par), *Interview de Jean de Kervasdoué*, Le Télégramme Forum, 02/09/2021.

⁵²⁰ Ingénieur agronome, spécialiste de l'économie des systèmes de santé.

⁵²¹ Hypermarchés, la chute de l'empire.

⁵²² Le Télégramme, *Le Parlement adopte des mesures pour protéger le revenu des agriculteurs*. 15/10/2021.

Lakaet warno kemend-all a wash war priz al laezh eo aet produerien zo abaoe pell zo evit lod anezho war gwerzh war-eeun laezh pe e dreuzfurmiñ e produioù ar gêr evit kreñvaat o marzioù⁵²³. En ur pennad e brezhoneg embannet gant an Télégramme eo diskouezet ur skouer vat eus an emdroadur-se evit ur *GAEC*⁵²⁴. Treuzfurmet e vez an holl laezh ar 35 buoc'h-laezh bio -goroet ur wech bemdez hepken- war ar plas da vont e yaourt, formaj fresk, dienn, amann hag all. Ouzhpenn aozañ paneradoù da werzhañ bep sizhun gant peizanted all e vez gwerzhet ivez ar varc'hadourezh war ur marc'had ouzhpenn stalioù Biocoop ha div *Amap*⁵²⁵. « Muioc'h-muiañ a dud a zo o c'houlenn abaoe ar c'honfinamant » eme un ezel eus ar *GAEC*. Ha skipailh ar *GAEC* en deus youl evit an amzer-da-zont.

Un doare da vezañ frank eo gwerzhañ war-eeun ar broduerien, mestroniet gwelloc'h prizioù o froduioù ganto evel-se. Met ur vicher all eo evit ar broduerien a rank gouestlañ kalz amzer da gas an obererezh nevez-se da benn. Hag an holl broduerien n'int ket en o aez atav war tachenn ar c'henwerzh⁵²⁶.

Bez' ez eus tud all ivez o deus youl sevel evit amzer-da-zont ar bio. Rouedad al labourerien-douar bio Breizh he deus galvet da skouer ar bolitikerien war ar renk evit dont da prezidant ar Republik, dezho d'en em ouestlañ da harpañ ar broduerien e pemp dalc'h ugent kinnig enno. Unan anezho a c'houll boued 100 % bio ha gall el liseoù a-benn ar bloaz 2027⁵²⁷. Setu ur c'hinnig, ur seurt redi kentoc'h, evit astenn marc'had ar bio eta, gant ma vo aesoc'h lakaat da dalvezout reolennoù kod ar marc'hadoù foran evit labourat muioc'h-mui gant produerien bio eus ar vro⁵²⁸.

An emsav « *Le vent du Changement* » roet lañs dezhañ gant meur a ziplomed yaouank a fell dezhañ lakaat disoc'h d'ur raktres « surentez sokial boued »⁵²⁹. Hervez unan eus degemennourien an emsav, ez eus nav million a dud e Frañs, tud yaouank dreist-holl, a zo o klemm diwar-benn breskted ar boued. Reiñ d'an dud-se ur gartenn evit prenañ produioù a zeu eus al labour-douar biologel ha lec'hel a vefe ar pennaenn. Demokratelaet e vefe evel-se ur boued a-feson -a c'hall bezañ prenet gant an dud dibourvesañ- en ur ginnig sav d'al labourerien-douar evit o froduioù. Petra soñjal diwar-benn an dra-se ? Tud yaouank sorc'hennet gant un utopiezh nevez evit lod sur a-walc'h. Un taol digent d'ar mare ma kresk bep bloaz feur

⁵²³ Staes, C. *Deux contrats de transition écologique signés avec Emmanuelle Wargon*, Le Télégramme, *op. cit.*

⁵²⁴ Quéré, A. *Labourerien-douar mod-nevez*, Le Télégramme, Spered ar vro, 22/04/2021.

⁵²⁵ Association pour le maintien d'une agriculture paysanne.

⁵²⁶ Besançon, R. « *La vente directe, le seul moyen d'être libre* » pour Patrick Sastre-Coader, Le Télégramme 17/07/2021.

⁵²⁷ Le Télégramme, Et aussi, *Vingt propositions des agriculteurs bio*, 08/06/2021.

⁵²⁸ Cabioch, P. (Recueilli par), *Cinq questions à S. Franrenet, Journaliste et auteure du « Livre noir des cantines »*, Le Télégramme Le fait du jour, 17/10/2021.

⁵²⁹ Mestayer, T. *Pourquoi ces jeunes veulent lancer « une sécurité sociale alimentaire »*, Le Télégramme, France, 14/06/2021.

eus poblañs c'hall a vev dindan treuzoù ar baourentez evit lod all marteze. Dindan verr amzer pe grenn amzer mui pe vui e teuo ar preder-se war wel mod pe vod, dre ma eo galloud-prenañ preder kentañ ar Frañsizien er mare-mañ.

Pep hini a fell dezhañ beveziñ produioù a-feson evel-just hag ar produioù bio a c'hell bezañ ar re-se. Met evel eo bet disklêriet gant Sandra Franrenet er gazetenn « *Le Télégramme* »⁵³⁰ : « *Le bio, c'est mieux, mais ce n'est pas pour ça que c'est bien* ». Da lâret eo e rank pep hini iober evezh ivez ouzh orin -pell pe eus ar vro- ha kempouez ar produioù a zebr.

Diwar se e ranker sevel ur goulenn diazez diwar-benn plas ar produioù laezh er bevañs an amzer-da-zont. Bez' ez eus atav un endro « mezhur ha yec'hed » douger evito e-kreizig-kreiz ul liesseurted bouedel brasoc'h-brasañ ?

5.4.3 Un endro « mezhur ha yec'hed » douger ?

Sellet e vo ouzh savboent ar skiantourien da gentañ penn a-raok teurel ur sell war emdroadur beveziñ ar produioù laezh bio. Ha da gentañ tout, yac'hus eo al laezh hag ar produioù laezh ?

Dalc'het he deus da vont war fallaat skeudenn ar sevel loened hag ar boued loenel goude un heuliad enkadennoù yec'hedel, ar c'hudennoù saotradur ha nevesoc'h zo eo bet niverusoc'h-niverusañ ar re o deus savet o mouezh a-enep pleustroù sevel ha diskar loened na zoujont ket mad al loened⁵³¹.

Se a zo kaoz eus diorren doareoù beveziñ all pe vefe ar fleksitarianed pe ar vejetalianed. Met, daoust ma'z eus breud atav, ne ziskouez ket ar studioù epidemiologel nevez, e vefe ul liamm etre beveziñ ar produioù laezh hag ar c'hleñvedoù kalongwazhiedel. Ar produioù laezh, en o-zouez ar yaourtoù dreist-holl, a c'hellfe kaout efedoù mat zoken war kleñvedoù zo. Ne seblant ket ar beveziñ amann zoken, e-touez ar produioù laezh, bezañ stag ouzh ar c'hleñvedoù kalongwazhiedel hag an diabet⁵³².

Setu, n'eus dizali ebet, war a seblant, war beveziñ ar produioù laezh nemet evit ar re ne suportont ket laktoz al laezh (ar pezh a zo liammet gant re nebeud a laktaz koazhañ). Kinniget e vez evit ar re-se evel-just laezh hep laktoz⁵³³.

Degemeret eo bet ar produioù laezh bio eus ar gwellañ gant ar vevezerien dre ma n'eus dizali a-bouez ebet a-enep o beveziñ ? Ha techet da greskiñ kalz, a vloaz da vloaz, o deus an aozioù beveziñ ? Setu degouezhet un taol fall-fall e lañs bevezerezh ar produioù laezh bio ?

⁵³⁰ Cabioch, P. *Cinq questions à S. Franrenet, Journaliste et auteure du « Livre noir des cantines », op. cit.*

⁵³¹ Rémond, D. (2019), *Quelle place pour les produits animaux dans l'alimentation de demain ? INRAE Productions Animales*, 32(2), 147-158. <https://doi.org/10.20870/productions-animales.2019.32.2.2500> (Consulté le 20/09/2021).

⁵³² Rémond, D. *Quelle place pour les produits animaux dans l'alimentation de demain ? op. cit.*

⁵³³ Lait Bio Sans Lactose LACTEL da skouer.

Siwazh, ne dro ket mat an traoù e 2021. Bet kaset en-dro gant berzh gwirion ar Frañsizien ha talvoudegezh bras an dasparzherien betek 2020, ar beveziñ en deus kilet e c’hwec’hmiziad kentañ 2021. Digresket o deus gwerzhioù ar fourmajoù bio ouzhpenn 4 % war ur bloavezh, an diennoù eus 9,6 % hag al laezh bio eus 8,6 %⁵³⁴.

D’ar mare ma eo ar galloud-prenañ preder kentañ ar frañsizien ha gant c’hwezadur ar prizioù a zo bremañ ret eo gwelout enni ul luskad evit krennañ an arc’hant dispignet evit ar boued ha da vrientekaat produioù marc’hamatoc’h eget ar bio.

Peadra lakaat da ziwan goulennoù diwar-benn amzer-da-zont ar filierenn, kement-se bet diverret en titl pennad ar gazetenn « *Les Echos* » : « *Lait bio : le pari risqué du haut de gamme* » meneget a-uc’h. Ha peadra da brederiañ war an doareoù da adlammat ha da grouiñ ul lusk nevez evit filierenn al laezh bio.

5.5 Adlammat ha reiñ ul lusk nevez da filierenn al laezh bio ?

Gouarnamant Frañs a fell dezhañ mont pelloc’h war kresk al labour-douar biologel ha bevezerezh produioù bio e pretierezh stroll foran ha prevez (steuñv « *Ambition Bio 2022* »).

Unaniezh Europa he deus ur steuñv uhelekoc’h c’hoazh evit al labour-douar biologel ac’hann 2030 hag evit kas war-raok ar boued biologel, diorren ijinerzh treuzfurmiñ ar boued biologel ha ledanaat ar marc’hadoù.

Setu ur c’hoant boutin da ziorren ar filierenn bio en argrec’h (produiñ) hag en ardraoñ (bevezerezh). Hag anat eo e rank an argrec’h hag an ardraoñ labourat evit diorren e kempouezh an eil gant egile. Met emdroet en enep o deus produiñ al laezh bio ha bevezerezh ar boued-laezh aboe 2019 : kresk an dastum laezh bio ha digresk beveziñ an holl voued-laezh bio pe dost etre 2019 ha 2021⁵³⁵.

Ouzhpenn se eo merket ar bloavezh 2021 gant emdroadurioù disheñvel-mik evit ar produiñ laezh bio war gresk kreñv hag ar bevezerezh war zigresk, da lâret eo un efed-sizailh anavezet mat en ekonomiezh. Bez’ ez eus un enkadenn laezh nevez e dalc’h, enkadenn al laezh bio ar wec’h-mañ, bet ar marc’had war gresk kreñv a vloaz da vloaz⁵³⁶ ? Hag un tuadur don pe boentel eo ? Re nevez eo eilpennañ an tuadur evit diskoulmañ ar gudenn. Met, en ur mod emañ filierenn al laezh bio ivez e-kreiz ar roudour hiziv an deiz.

⁵³⁴ Cougard, M.-J. *Lait bio : le pari risqué du haut de gamme*, Les Echos, 07/09/2021. <https://www.lesechos.fr/industrie-services/conso-distribution/lait-bio-le-pari-risque-du-haut-de-gamme-1344091> (Consulté le 20/10/2021).

⁵³⁵ Pinson, V. *Lait bio : production et consommation ont évolué inversement depuis 2019*, Les Marchés, Le média de l’alimentaire, 12/11/2021. <https://www.reussir.fr/lesmarches/lait-bio-production-et-consommation-ont-evolué-inversement-depuis-2019> (Consulté le 23/01/2022).

⁵³⁶ Le Borgne, J. *La filière du lait bio est-elle en crise ?* Le Télégramme, Économie, 22/10/2021.

War an tomm eo bet kemeret diarbennoù mirout, en ur cheñch rummad d'ul lodenn eus al laezh bio (ouzhpenn 20 % eus dastum Biolait -dastumer kentañ laezh bio e Frañs- e 2021⁵³⁷) -gant efedoù war diskenn priz al laezh- hag ouzhpenn ne vez ket arc'hantouet ken an emdroadurioù war ar bio gant an dastumerien. Reoliñ ar produiñ laezh bio gant aozadur etremicherel al laezh bio a c'hellfe bezañ un doare all da bouezañ war digresk ar produiñ.

Trawalc'h e vo an diarbennoù-se war verr dermen pa zo laezh ouzhpenn da zont war ar marc'had a-benn ar mizioù da zont e fin an daou vloaz emdroadur ar broduerien o deus divizet mont war-zu ar bio⁵³⁸ ? N'eo ket sur gant an enkadenn a zo bremañ diwar-benn ar galloud-prenañ.

Dre ma pouez ivez war tachenn ar sevel saout laezh bio gourdrouz an diouer a adkemerien⁵³⁹ (ur saver saout diwar dri a yay war e leve a-benn ar 7 vloaz da zont) -se a c'hellfe lakaat ivez ar produiñ laezh bio da zigresk hervez un doare naturel- emañ dazont filierenn al laezh bio en arvar. Ha dre vras pal ar gouarnamant da dizhout 18 % eus ar gorreadoù gounit gounezet er mod bio e Frañs e 2027.

Met ret eo ivez ha gwelloc'h e vefe evit tizhout palioù labour-douar bio Gouarnamant Frañs pe Unaniezh Europa ledanaat fredoù ar boued-laezh bio hag adlakaat ar beveziñ war un hent nevez a-fet ar c'hreskiñ, da lâret eo adstagañ gant ur c'hempouez etre kinnig ha goulenn. Evit se, ouzhpenn redioù al lezenn *EGalim* evit beveziñ 20 % (diwar ar prizioù) produioù bio adalek miz Genver 2022, ul loc'henn all a vefe war ar stern war a seblant. Ur c'houlzad kehentiñ a vefe lañset war tem al laezh bio evit kas war-raok dazrann ar boued-laezh bio ha disheñvelaat anezhi e-touez an difraeoù dazrannañ a zo anezho⁵⁴⁰.

Skoazellet a-benn ar fin ar beveziñ gant loc'henoù ar bruderezh (evit kas marc'had ar boued-laezh bio war-raok, ar pezh a zo ret-holl evit talañ ouzh ar c'hinnig laezh bio a zo hag a vo) hag ar c'hantinoù⁵⁴¹. Hag an diarbennoù a c'hallfe bezañ kemeret gant ar gouarnamant evit skoazellañ galloud-prenañ ar vevezerien. Al loc'henoù-se a c'hellfe degas un adlamm war verr dermen ha krouiñ ul lusk nevez evit filierenn al laezh bio dindan grenn amzer mui pe vui. Met, ret eo diwall ouzh kement dielfennadur re brim.

Gant an diarbennoù a denn d'ar produiñ evel da varc'had ar boued-laezh bio eo ret adkempenn panevet adijinañ patrom filierenn ar produiñ laezh bio koulz lavaret.

⁵³⁷ Le Borgne, J. *La filière du lait bio est-elle en crise ?* Le Télégramme Économie, 22/10/2021, *op. cit.*

⁵³⁸ Le Borgne, J. *La filière du lait bio est-elle en crise ?* Le Télégramme Économie, 22/10/2021, *op. cit.*

⁵³⁹ Le Borgne, J. *Le manque de repreneurs menace l'élevage bio*, Le Télégramme, Économie, 06/09/2021.

⁵⁴⁰ Chambres d'agriculture Normandie, *Lait bio : le point sur un contexte tendu*, 27/10/2021, *op. cit.*

⁵⁴¹ Bonnardel, X. *Entre surproduction et baisse de la consommation, la crise du lait bio s'enlise*, Ouest-France, 11/01/2022. <https://www.ouest-france.fr/economie/agriculture/agriculture-biologique/entre-surproduction-et-baisse-de-la-consommation-la-crise-du-lait-bio-s-enlise-e9aea25c-6ed9-11ec-a670-97ff7e2699e5#> (Consulté le 23/01/2022).

Gant kement-se n'eo ket gwall aes gwelout sklaer war verr dermen pe dindan grenn amzer mui pe vui. Setu perak eo talvoudus sevel ur seurt taolenn-stur evit diskouez berr-ha-berr an tuadurioù pennañ bet arsellet a-uc'h hag an efedoù gallus.

5.6 Taolenn-stur dalc'hiou pennañ filierenn broduñ al laezh bio

Evit klozañ gant al lodenn-mañ eo kinniget er skeudenn 10 p. 102 un dastum eus menegerioù pennañ emdroadur ar filierenn laezh bio bet lakaet war wel a-uc'h. Dispartiet int hervez teir lodenn : lodenn ar menegerioù a zo en takad gwer (a zo mat evit diorren ar filierenn), lodenn ar menegerioù a zo en takad orañjez (e ranker teurel evezh outo) ha lodenn ar menegerioù a zo en takad ruz (a zo fall-tre, war verr dermen da nebeutañ).

Dre se e c'heller diskouez, daoust d'ar faktorioù pozitivel pe a-du mui pe vui evit diorren ar filierenn laezh bio, emañ anezhi en arvar evit ar wec'h kentañ marteze a-walc'h hag ez eus riskloù e vefe torret kresk mont war-zu ar bio en ur zegas goprou ar broduerien laezh bio war zigresk. War verr dermen hepken ? War grenn pe hir dermen ? Gant ur barregezh adlammat ha krouiñ ul lusk nevez evit filierenn al laezh bio dindan grenn amzer mui pe vui diazezet war ur patrom filierenn al laezh bio adkempennet panevet adijinet ? Aze emañ an dalc'h !

Skeudenn 10

Menegerioù pennañ emdroadur filierenn broduiñ al laezh bio

Menegerioù	Stadañ an traoù
<p>Menegerioù en takad gwer</p>	<ul style="list-style-type: none"> • Youl ar gouarnamant da vont pelloc’h war : <ul style="list-style-type: none"> ➢ Kresk al labour-douar biologel ha bevezerezh produioù bio e pretierezh stroll foran ha prevez (steuñv « <i>Ambition Bio 2022</i> » ha tredegiezhoù ar PBLD kentañ 2023-2027). ➢ Difenn goproù al labourerien-douar (lezenn <i>EGalim 2</i>). • Youl an aozadur etremicherel da lakaat e pleustr -ouzhpenn redioù al lezenn <i>EGalim 2</i> evit ar pretierezh stroll- ul loc’henn all dre ur c’houlzad kehentiñ war tem ar boued-laezh bio evit kas war-raok dazrann ar boued-laezh bio ha disheñvelaat anezhi e-touez an difraeoù dazrannañ a zo anezho. • Galloudoù neveziñ (war doareoù produiñ, merañ an tropell hag implij teknologiezhioù niverel ha naouegezh artifisiel) ha krouiñ talvoudegezh ouzhpennet ar broduerien (fardañ produioù lec’hel ha gwerzhañ anezho e rouedadoù nes,... met ur vicher all eo). • Lusk ingal ar broduerien da gehentiñ war o micher hag o boazioù mat.
<p>Menegerioù en takad orañjez</p>	<ul style="list-style-type: none"> • Galloud ober ar broduerien evit kenderc’hel da zigresk ar c’houstoù produiñ (gant loc’henoù disteroc’h evit an dazont ?). • Ezhomm sklaeraat evit ar vezezerien perzhioù produioù eus doareoù labour-douar disheñvel sanset (labour-douar biologel, padus, enframmet, a skiant vat, atebek,...) hag al labelioù (testeniekaet pe get). • Ur c’hadarnadur erru-mat : n’eus dizali a-bouez ebet a-enep beveziñ produioù laezh. • C’hoantoù ar vezezerien evit kaout muioc’h a broduioù lec’hel, nann bio zoken. • Diouer a adkemerien war tachenn ar sevel saout laezh bio.
<p>Menegerioù en takad ruz</p>	<ul style="list-style-type: none"> • Enkadenn ar galloud-prenañ deuet da vezañ kentañ preder ar Frañsizien. • Digempouez etre ar c’hinnig hag ar goulenn evit al laezh hag ar produioù laezh bio : <ul style="list-style-type: none"> ➢ Dreistproduiñ pe gresk bras (liammet gant efedoù an emdroadurioù nevez a vo santet betek 2022) al laezh bio. ➢ Ha digresk bevezerezh ar produioù laezh bio war un dro.
<p>Efedoù gallus</p> <p>En despet d’ar menegerioù en takad gwer ha orañjez :</p> <ul style="list-style-type: none"> • Ehan kresk mont war-zu ar bio (peurarsavet an emdroadurioù nevez hiziv an deiz dija). • Reoliñ ar produiñ laezh bio gant aozadur etremicherel al laezh bio ha/pe dre ziouer a adkemerien ar c’hêrioù laezh bio. • Digresk goproù ar broduerien laezh bio. <p>War verr dermen hepken ? War greñn pe hir dermen ?</p> <p>Gant ur barregezh adlammat ha krouiñ ul lusk nevez evit filierenn al laezh bio, dindan greñn amzer mui pe vui, bet anezhi adkempennet panevet adijinet ?</p>	

Klozadur

Patrom labour-douar askoridik an « Tregont vloaz glorius » a zo bev c'hoazh e spered kalzig a dud dre ma eo bet ur gwir dispac'h e-touez al labourerien-douar. Tud zo o deus savet o mouezh, abred-tre, a-enep e wastoù a bep seurt war an natur, an dud, al loened... pa oa bet broudet ar patrom-se koulskoude gant ar Stad evit magañ ar vro goude an eil brezel-bed.

Ne vefe ket bet tizhet ar pal-se hep mekanikadur ar maezioù, stummadur al labourerien douar, implij temzoù ha diastuzerioù, re anezho a-hed an amzer. E-keit-se eo aet war wellaat live-bevañ al labourerien-douar ivez tra ma tigreske kalz an niver a c'hêrioù hag ar boblad labourerien-douar.

Met aet an traoù re bell -evel e c'hoarvez alies- war tachenn al labour-douar askoridik eo deuet al labour-douar biologel war wel er bloavezhioù 1980 hag ar produiñ laezh testeniekaet bio hervez ur c'haier ar c'hargoù start un tammig diwezhatoc'h. Tamm-ha-tamm eo bet roet lañs d'ar patromoù-se diwar atiz ar galloudoù foran hag ar re o deus kemeret perzh en o diorren (aozadurioù micherel al labour-douar, kambroù al labour-douar, al labourerien-douar o-unan, hep disoñjal gwask ar gevredigezh), en ur genderc'hel gant an teknikoù henvoazeloc'h bet gwellaet war meur a dachenn a vloaz da vloaz memes tra.

Hir eo an hent bet heuliet gant ar broduerien laezh bio kentañ (ouzhpenn 30 vloaz a zo) tra ma kendalc'h produerien laezh -betek-henn-, niverus anezho, da vont war-zu ar produiñ laezh bio, goude bezañ bet skoet gant enkadennoù al laezh kustum dreist-holl, da lâret eo dreistproduiñ ha digresk ar prizioù. Prouiet o deus e oa tizhet gant ar produiñ laezh bio palioù uhel war an tachennoù ekonomikel, endroel, sokial ha kevredigezhel. Pozitivel-tre eo ar bilañs evit ar poent eta. Da lâret eo e klot an disoc'hoù zo bet gant ur strategiezh c'hounit evit ar broduerien, war verr dermen da nebeutañ, hag ar gevredigezh dre vras, bet ouzhpenn goulenn ar vevezerien uheloc'h eget ar c'hinnig gall kentoc'h.

N'eo ket evit-se eo distank-tre an dazont en despet da youl ar gouarnamant -hag Unaniezh Europa ivez- da reiñ lañs d'al labour-douar biologel ha da bouezañ war ar c'hevraouegezh kenwerzhel etre an industriourien hag an dasparzherien evit ma vefe gwarantet ur priz dereat d'ar broduerien, evel da skiant-prenet ar broduerien ha d'o lañs da neveziñ dalc'hmat.

Kenderc'hel a raint da lakaat ar c'houstoù produiñ da zigresk pe vefe en ur ziorren emrenezh energetek o c'hêrioù pe en ur hollekaat, er bloavezhioù da zont, implij an naouegezh artifisiel hag an ostilhoù niverel evit al labour-douar hag ar produiñ laezh bio evel-just. Ar genetek a vo ivez un dalc'h pouezus war ar produiñ laezh ent strizh ha war an endro. Tra ma fell da lod all, daoust ma eo ur vicher all, krouiñ gwerzh ouzhpennet en ur dreuzfurmiñ war al lec'h al laezh e produioù laezh uheloc'h o skalfad ha gwerzhañ anezho e rouedadoù kenwerzh nes pe da zaspazherien.

Met gwall souezhet e c'hell bezañ ar vevezerien gant dibab bras ar produioù a vez kinniget dezho e rouedadoù dasparzh disheñvel. Kavout a reont ur bern produioù hep kontañ al labelioù (gant ur c'haier kargoù pe get) hep gouzout re vat ma int produioù a galite uhel mat pe gwelloc'h evit o yec'hed : bio, lec'hel (avel a-du gant ar produioù-se war a seblant), lec'hel ha bio, gant pe hep tra pe dra, boas, eus doare-mañ-doare labour-douar (padus, a skiant-vat,...) da brenañ pa emañ ar braz anezho o klask produioù standart izel o frizioù.

Diaes eo ijinañ dre se forzh penaos e teufe log marc'had ar produioù laezh bio da vezañ hollekaet un devezh bennak nemet e vefe lakaat discoc'h d'ur raktres « surentez sokial boued » da skouer, ar pezh a denn d'un utopiezh hiziv an deiz c'hoazh. Ul labour-douar liesseurt e seblant bezañ ar patrom da heuliañ kentoc'h un hanter kantved war-lerc'h an « Tregont vloaz glorius », dre ma eo ret derc'hel kont eus souvereniezh ar boued -un atoud strategel a-bouez diwar-vremañ-, ar pezh a glot gant ur produiñ a-vern a-feson hag en ur skoazellañ produiñ boued disheñvelaet evel al laezh hag ar produioù laezh bio evit dazrannoù marc'had. Da lâret eo e vo ret ober gant reizhiadoù labour-douar hag agrobouedel warc'hoazh e plas ur patrom nemetken, hini an « Tregont vloaz glorius ».

Evit gwir emañ filierenn al laezh bio war arvarioù ar mare-hont (petra, penaos, pelec'h ha da beseurt priz produiñ ha gwerzhañ da skouer) kreñvaet gant pandemiezh ar c'hleñved koronavirus he deus heuliadoù ekonomikel ha sokial a-bouez bremañ. Prizioù ur bochad mat a broduioù a zo war gresk ha galloud-prenañ a zo preder kentañ ar Frañsizien war un dro. Peadra da bellaat bevezerien zo marteze eus ar produioù bio uheloc'h o frizioù.

Ouzhpenn se eo merket ar bloavezh 2021 gant emdroadurioù disheñvel-mik evit ar produiñ laezh bio, war gresk, hag ar bevezerezh war zigresk. Se a zo kaoz eus enkadenn kresk ar produiñ laezh bio. Ar pezh a laka ar filierenn en e bezh e-kreiz ar roudour hiziv an deiz, seul vui ma zo laezh ouzhpenn da zont war ar marc'had a-benn ar mizioù da zont e fin an daou vloaz emdroadur ar broduerien o deus divizet mont war-zu ar bio.

War an tomm eo bet kemeret diarbennoù mirout, en ur cheñch rummad d'ul lodenn eus al laezh bio -gant efedoù war diskenn priz al laezh- hag ouzhpenn ne vez ket arc'hantouet ken an

emdroadurioù war ar bio gant an dastumerien. Reolet e c'hell bezañ ivez ar produiñ laezh gant aozadur etremicherel al laezh bio. Ha gallout a rafe ivez diouer a adkemerien war tachenn ar sevel saout lakaat ar produiñ laezh bio da vont war digresk war grenn pe hir dermen.

Da lâret eo e chom ar mod bio hag ar filierenn laezh bio dreist-holl ur patrom da startaat evit saveteiñ anezhi, da lakaat da vezañ padus ha da ziorren evit ma teufe ar palioù lakaet gant ar gouarnamant da wir. Ret e vo evit se krouiñ loc'henoù da zegas ar marc'had war-raok ouzhpenn ar c'hantinoù-skol (ma eo 20 % al lodenn bio adal miz Genver 2022 da skouer). Un digarez mat evit reiñ lañs d'ur c'houlzad kehentiñ evit al laezh bio gant harp an aozadur etremicherel gant ar pal sachañ prenerien nevez.

Klask troioù kreskiñ evit kaout fredoù d'al laezh bio a zo ret evel-just. Met ret eo kompezañ dreist-holl prenañ ar bevezer gant ar cheñchamantoù boazioù beveziñ, da lâret eo doareoù beveziñ atebek, ar bio keroc'h e briz en o zouez, goulennet gant ar gevredigezh. Hag ar bevezer an hini eo a ziviz pe get da brenañ ar boued-laezh bio a-benn ar fin.

Berrr-ha-berr he deus ar filierenn laezh bio da dalañ ouzh ur pezh dae dre ma eo keroc'h ar produioù bio dreist-holl.

Kavout a rafe deomp e vefe un druez, a-benn ar fin, bet diorroet kement a strivoù splann ha pleustroù mat gant ar brodrierien a-doug ar bloavezhioù tremenet, ma ne vefe ket kavet un diskoulm dereat evit reiñ ul lañs nevez da filierenn al laezh bio dindan grenn amzer mui pe vui.

